


BARR-HEOL

WAR FEIZ HA BREIZH



Chapel Keriwallan (22 - Tonquedeg)

NIV. 95

MIZ KERZU 1977

PRIZ : 9,00 LUR

BARR-HEOL

REVUE DE LA BREIZH

TAOLENN

1 - KLERG. Ar Skrivagnerien brezhonek	1
2 - A. DUVAL. Dallentez, Avel Walarn	2
Mamm-gozh Visanta	
10 a viz Here 1903	
3 - E. Ar BARZHIG. Azeuldigezh	2
4 - KLERG. Ar Prosez war vuhez ha burzhudoù Sant-Erwan	4
5 - E-skeud Prosez St-Erwan : Kervaria-Sular	8
6 - J.C. Diwar-benn ouzha ar vroadelouriezh vrezhat	9
7 - KLERG. Gregor a Rostron	13
8 - P. BOURDELLEZ. Emgann etre ar re yaouank hag ar re modern	16
9 - P. BOURDELLEZ. Merzherenti Santez Eulalla	17
10 - E. Ar BARZHIG. Loeza	18
11 - KLERG. Viviana (kontadenn Nedeleg)	22
12 - LEVRIOU HA KELAOUENNOU	28
J.C. P. de la Haye: Histoire de Trégulier	
J.C. Jean Markale: La Tradition Celtique	
J.C. Michel Poniatowski présente Cadoudal	
Klerg. C.J. Guyonvarc'h: Le Catholicon	
Studioù hag ober	
Al Liamm ; le Télégramme	
J. Chardonnet: le livre d'or des Saints de Bretagne	
13 - P. DENEZ. Keginerezh	33
14 - L. ANDOUARD. Kudennoù an amzer-mañ: hor pesketerezh	33
en arvez	
15 - L. ANDOUARD. Eil beaj Jakez Kartier	36
16 - Pedenn an Iliz	41
17 - Keleier berr	45
18 - L. ANDOUARD. Namibia	46

AR SKRIVAGNERIEN VREZHONEK

N'eo ket diwar-benn labour ar skriva-
gnerien, evel ma c'hellfe titl ar pennad-mañ
reiñ da gompren, met diwar-benn o oad
dreist-holl eo e fell dimp komz. Ma ne domp
ket hon-unan o vezañ prederiet gant ar
gudenn-se, peogwir e lenner war niverenn
184 eus ar gelaouenn **Al Liamm**, paj. 414
(niv. Gwengolo - Here) an hevelep goulenn
Daoust ma weler anvioù nevez aliezik war
Al Liamm, anvioù tud yaouank, ne c'heller
ket lavarout ez int eus ar stankañ. Eus a-bell
ez eo trec'h niver ar re ne dint ket mui
yaouank da niver ar re yaouank. Kemeromp
da skouer an niverenn 184. Setu roll ar
skrivagnerien evel ma c'heller o gwelout :
Per Denez, troet gantañ kontadenn Adolf
Rudnicki : *Istor ur banne te*. **E. ar
Barzhig** : *En-dro d'am ugent vloaz*. **Kenan
Kongar** : *Un damsell war Istor ar Stadoù
Unanet an* **R. Hemon** : *Istor
Breizh La Borderie*. **F. Kervella** : *Prientiñ ur
skrid evit an embann*. Lezet hon eus
a-gostez ar pennad war Yan-Kel savet gant
Y. Tillemont pa n'ouzomp ket piv eo an
Tillemont-se nag e oad.

Sellit mar kirit war **Imbourc'h** :
Youenn Olier, ar pennskrivagner.
Sellit **Brud Nevez** : tud ha n'int ket
yaouank evel Charlez ar Gall, P. Mevel,
Keravel, h.a. Re yaouankik : Fañch Broudig
Evit kaout skrivagnerien yaouank e
ranker kouezhañ war **Skrid e-lec'h** ma
kaver kontadennoù gant studierien.
Ne dalvez ket ar boan ober tro Breizh.
Lakomp c'hoazh, mar kirit **Keleier an
Naoned**, Evid ar Brezhoneg, **Hor Yezh...**
Wanig ha Wenig.
Ne c'heller ket nac'h : tachenn ar
skrivañ brezhoneg a zo tachenn ar re gozh.
Perak ? Evit meur a abeg a dra sur. Gant
aon da vezañ kaset da Gankaria an Noz, ne
gomzimp ket diwar-benn yezh ar re
yaouank, nemet evit lavarout fonnusañ ma
c'hellimp, o deus c'hoazh da vont d'ar skol
da zeskiñ o c'hemmadurioù, ha pa ne ve
ken ! Met dre o fact n'eo ket, peogwir
emañ ar yezh o vreiñañ en-dro dezho hag

ez eo diaesoc'h dezho bremañ deskiñ ar
yazh eget na oa d'ar re a vrezhonege dija
kent ar brezel diwezhañ : 1939 - 1945. Ur
fed ez eo kement-se ha ne c'hellomp ober
seurt ebet a-enep dezhañ.

Goude bezañ sellet e park ar re an,
gwelomp bremañ penaos emañ kont gant
Barr-Heol war ar poent-se. An hini koshañ
eus kenlabourerien **Barr-Heol** ne deo ket
ur paotr met ur vaouez : *Anjela Duval* ha
skoulmet he deus un tamm 'zo dija he
72 vloaz. War niverenn diwezhañ ar
gelaouenn (niv. 94) e oa ur pennadig
bennak gant tud yaouank. Met abaoe 2 pe
3 bloaz 'zo ne oa ket bet. **J.C., L.A., Per ar
Maenour** hag **hor c'heginerezh** (kuit da
venegiñ ar re all) n'emaint ket da vezañ
renket e-touez ar re yaouank. An hevelep
kleñved a zo gant **Barr-Heol** hag ar re
bouezusañ eus kelaouennoù brezhonek
Breizh (hervez hor soñj-ni) : skrivagnerien
gozh.

Ken nec'hus ez eo avat, kudenn
Barr-Heol ma ranker koulz lavarout ken
lies niverenn a zeu er-maez komz anezhi.
Kaer a vez goulenn skoazell digant tud
yaouank, tu ebet da gaout. Daoust hag e
vefe un afer a Relijion dindan ? Re nebeut a
dud yaouank pe get troet gant ar Feiz
kristen ? Rak kaer a zo lavarout, e fell d'ar
gelaouenn bezañ kristen, gwazh-a-se
ma tichañs dezhi koll koumananterien :
frank a-walc'h ez eo an dachenn evit
kelaouennoù all. Evel ma tegouezh alies, e
lavar herañ pe hennont ez eus re a draoù
relijiel. Met war-lerc'h **Pêr** ha **Paol** ha
Mari-Madalen...

Zoken beleien ne gaver ket da sikour,
pe ken nebut !
Bez'ez eus ur c'horn eus Breizh ha
n'en deus biskoazh pourchaset kenlabourer
ebet : **Bro-Wened**. Moarvat en askont d'o
rannyezh. N'eo ket me eo a zesko dezho
skrivañ ar rannyezh-se hervez reolennoù ar
yazh peurunvan, daoust ma vefen gouest,
(pe dost da vihanañ !) met digarez ebet
n'em eus d'hen ober ! D'ar wenedourien eo
da skrivañ o yezh, ar yezh hag a zo naturel
dezho. C'hoazh ur wech, kenlabourer ebet.

na beleg, na den lik n'en deus biskoazh, pe ez omp tromplet-kaer, degaset pennadoù-skrid da **Varr-Heol**. Nemet un nebeut linenn a rankemp gwiskañ eus hor gwellañ, hervez doare-skrivañ **Barr-Heol**.

Met peoc'h gant ar joskoniat-se ! Mar deo sirius ar gatoliked vrezhonek, pa n'o deus kelaouenn gatolik ebet 'giz homañ, e tefent neuze en em dolpañ, en em strollañ, en em vodañ en-dro dezhi.

Sed eaz ur galv a gasomp dezho —hag

a zo risklet, siwazh, da chom hep respont. Kement a draoù evel m'o deus holl da ober ! Pe mar ne blij ket ar gelaouenn-mañ, dezho neuze da sevel unan nevez moder-noc'h, renet gwelloc'h hag o pourchas danvez kristen muioc'h diouzh doare an amzer o ren. Ha gwella a se !

... Peogwir ez eo homañ niverenn an Nedeleg, ne c'hellomp nemet hetiñ e vefe ingalet an traoù.

NEDELEG LAOUEN
ha
BLOAVEZH MAT !

KLERG

Dallentez

*Berr-weled hoc'h eus, tudoù
— Mar n'edoc'h ket dall-moek —
Ober a rit eus ho pugale
Tud bouzar ha mut !
Ne vezit ket eta ?
Nann ! Ne vezit ket moarvat
Eo graet da vat o dibab
Gant an intellektualled yaouank :
Warc'hoazh —ha dija hiziv—
Ar brezhoneg 'vo o yezh.
Yezh ar gêr, yezh o darempredoù,
O bodadegoù, o frezegennoù,
O diduamantoù. O yezh
War gement tachenn-studi,
War gement tachenn-c'hoari,
Ar c'hewerzh, al labour.
Yezh o spered. Yezh o c'halon.
— Hag ho pugale-c' hwi ?
A gomzo, ya da ! meur a yezh estren,
Met estrenien o-unan e vint en o Bro.
E-touez o c'henvroiz. Chom 'raint
Bouzar ha mut...*

A. DUVAL
22 Here 1977

Avel-Walarn

*Dec'h 'oa c'hoazh meur a hini
Evel ur bagadig dridi
E begenn ar wezenn-bubli*

*Avel-walarn he deus c'hwezhet
Hag an delioù 'zo bet skubet
Unan hepken a zo chomet*

*Emañ hi aze o krenañ
O c'hortoz hec'h eur diwezhañ
Marteze o prederiañ
War be tu eo tonket dezhi kouezhañ*

A. DUVAL
Here 1977

Azeulidigezh

*Dre wenodenn gammigellet ha strizh an duchenn
E oa gant tri abostol war hent Menez Tabor,
O hasañ hag o sachañ o zreid dre ar boultrenn
Etre kozh palmezennoù distank, treut ha lor*

*Degouezhet war lein ar menez, leun a c'hwezenn,
Korf Mab Doue, dirak o daoulagad bras-digor,
A voe bezuset evel 'n ur mor a sklerjenn
Skedusoc'h eget ur mintim-zzh eost e gor.*

*Moizez hag Eliaz a gomze gant o Aotrou,
E barr al levenez e oa o c'halonoù :
'Na brav eo dimp, eme Bêr, bout amañ,*

*Mar karez, e savimp dirazout teltennoù ?
Setu ur vouezh ponneroc'h eget kurunoù :
'Va mab muioc'h-karet, pa lavaran, eo hemañ !'.*

An ebestel d'an douar war o fas 'oa kouezhet.

Ernest Ar BARZHIG

Mamm-gozh Visanta

(1822 - 1889)

D'ar mare-mañ eus ar bloaz e teu atav em memor Pasion va mamm-gozh : Visanta Paskiou.

Evel m'eo bet kontet nouspet pet ha pet kwech din gant va mamm, ar yaouankañ eus a zek.

A zeiz-da-zeiz hag eur-hag-eur, mamm a heulie red he c'hleved-mervel, ha taolenn fromus he marv kristen. Dic'hortoz-kaer 'oa c'hoarvezet an darvoud. Un nebeut devezhioù 'oa bet a-walc'h evit terrif neudenn he buhez. Dres d'an ampoent p'edo o vont da gemer un tamm renoz en he c'hozhni gant he fried goude hirvloavezhioù a boan, a soursi hag a drevell. En un atant bihan, e-kichen ti o bugale, o doa dibabet chom.

A ! a lavare-hi : Bremañ 'c'hellin nezañ. Un dudi hag un diduamant 'oa eviti nezañ. Siwazh ! N'eo ket an den mestr d'e blanedenn. Siwazh ! evit he fried ken feal, evit he bugale.

Ha siwazh ! ivez evit peorien ar C'hontre —ken niverus d'ar mare— He c'halon 'oa ganti war he dorn, ha hi leun a druez kristen.

Un tiegezh kristen oa ti ya zud-kozh. Roet o doa div verc'h d'ar gouent. Ha benniget 'oa bet ivez o ziegezh gant ur pare burzhodus, deuet dre c'hras Santez Anna, da unan eus o merc'hed, seizet gant kleved.

Mamm-gozh Visanta war wele he marv, ha hi war he zremenvañ a bede gredus an Itron Santez Anna. Ken krefv ma tassone koad he gwele.

Mervel a reas d'an Eur ma varvas hon Salver war Venez Kalvar, da deir eur goude kreistez. Pried, bugale, amezeien en-dro dezhi o pediñ.

Pa grede an holl a oa eno e oa aet ar vuhez diouti, ha ma tavas pep hini, stonket ha fromet-don, e voe gwelet ha muzelloù o fihval un nebeut. He merc'h henañ a dostaas he skouarn hag a intentas ar gerioù-mañ : *Pedet c'hoazh bugale ! Pedet c'hoazh !*

Pediñ a rejont ha war askell ar bedenn diwezhañ e nijas hec'h Ene kaer trema 'n Neñv.

Pep devezh eus ar bloaz

A zo un deiz-ha-bloaz.

Darvoud trist pe darvoud laouen

Ur merk a zo war bep devezh.

En diavaez zoken eus kalander an Iliz

Hag eus kalander an Istor

Emañ kalander buhez pep unan.

P'emeur deut war an oad

P'hon eus lezet war hol lerc'h

Bloavezhioù, mizioù, devezhioù stank

Pep deiz en deus e Istor.

Nag a zelenn kousezhet eus gwezenn hor Gouenn,

Eus bodad hon amezeien

Eus boked hor mignoned.

Nag a blantenn yaouank

O sevel e-kichen ar wezenn gozh

Pe en he lec'h...

3

Setu fenez 'vidoc'h e pedan, Mamm-gozh Visanta,
Ha c'hwi, pedit 'vidon ivez, Sant Erwan ha Santez Anna
Joa da viken d'hoc'h ene. E peoc'h Doue.

Amen.

A. DUVAL
Here 1977

10 a viz Here 1903

Maia ! Maia ! Va c'hoarig din-me
Pevarzek vloaz ha tri-ugent hirie
Abaoe m'out nijet d'an Neñv
Mil-nav-c' hant-tri, an dek a viz Here
O lezel war da lerc'h war an douar
Tad ha Mamm er brasañ glac'har.

Gwerc' hezig koant, leun a furnez
Bet oas a-hed dek vloavezh
Levenez o zi. Heol o buhez.
Liamm a Garantez. Esperañs o c'hozhni.
Ha setu bremañ goull o zi !

Nijet oa kent un Aelig gwenn-kann
Un nebeut deizioù goude e vadeziant.
— Perak 'ta va Doue
E felle deoc'h o bugale ?

... Ouzhin-me ne oa keloù c'hoazh
Ret oa bet gedal tost daou vloaz.
Ha pa ziskennis ur beure Ebrl
Bugel na c'hoarzh 'us d'am c'havell !
Tad ha mamm qtav o krenañ.
Petra 'vo Planedenn houmañ ?
Bez'vo ivez hini an daou henañ ?

Diseñvel eo bet... Ha me kozh bremañ
Am eus bet atav hiraeth, em digenevez,
Dit va c'hoarig Maia ! Dit va breurig Charlez !
Doue da gresko ho joaioù
E gwenna hon Hendañ !

Da virviken.

Amen.

A. DUVAL
10.10.77

AR PROSEZ WAR VUHEZ ha BURZHDOÙ SANT ERWAN

un afez diaoulerezh

ha sorserezh

(paj. 257-262)

Bez'ez eus e levr ar Prosez war
vuhez ha burzhdoù Sant Erwan, un
nebeut pajennoù o kontañ un istor iskis,
istor ur paotr yaouank bet milliget gant e
mamm, ha deuet da vezañ evel perc'hennet

gant an diaoul, ha pareet neuze dre veritoù
Sant Erwan, e-tal e vez. Ur gwir istor
sorserezh...

Er bloaz 1329, d'ar merc'her goude
Sul-Fask ar Pantekost, d'ar c'houlz ma
tistro an dud eus o labour, goude o devezh,

edo Ivon ANDREV eus Perwenan, war ar
blasenn, e-kichen ur wezenn tost da di un
den anvet Yann Portavitaïha. Ur paotr
yaouank 20 vloaz e oa Ivon ANDREV.
A-greiz ma oa oc'h ober kaoz gant
Portavitaïha, setu e vamm oc'h erruout,
stumm fuloret warni, hag hi kerkent o
tistagañ ar c'homzou-mañ : «*Ha te an hini
eo ac'h eus va droukprezeget, te hag a oa
dleet dit lezel ar re all da gomz da
gantañ !*».

Hag hi da vont war he daoulin, digeriñ
he c'hrubuilh ha dispakañ he divronn : «*Me
a ro dit va mallozh, emezi, ha mallozh an
divronn-mañ ac'h eus sunet, ha mallozh va
c'hof en deus da zouget ; ha kement gwir
am eus warnout pe a c'hellan kaout, ha
kement am eus roet dit ouzh da c'henel,
kement-se holl a roan d'an diaoul hag a
zilezan gantañ !*».

Kerkent ha ma oa bet lavaret ar
c'homzou-se, e kouezhas ar paotr yaouank
d'an douar, ken na soñje gant e amezeg,
Portavitaïha, e oa marv. Hag hemañ neuze
da lavarout d'un toullad gwazed a oa eno :
«*Degasit-efi du-mañ d'hen lakaat war ur
gwele !*». Ober a rejont eta, met pa vo
astennet ar paotr yaouank war ar gwele, e
krogas da vezañ gwallgaset, hag en em
lakaas da yudal evel un den aet e skiant-vat
digantañ : «*Laeron ! Laeron ! Nan in ket
ganeoc'h, rak Sant Erwan am difenno !*». Berr
e oa warnañ spontus hag e harzhe evel
ur c'hi.

E-pad ar c'heit-se e oa aet gwreg
Portavitaïha, Yuzeta Prijant, ur verc'h da
Brijant eus Ker-Sivi (Trelevenn), betek ti an
Andrev da zegemenn dezhañ edo e vab, en
he zi — da lavarout eo, e ti Bortavitaïha —
gourvezet war ur gwele hag eñ foll-droll,
hag e oa ret d'erc'hel mat dezhañ.

Ivon Andrev, kerkent ha ma klevas, a
zeuas er-maez, hag eñ da vont, tizh
warnañ, da di Bortavitaïha, nec'het-bras.
Un amezeg dezhañ, Juliana, merc'h ar
Beleg, a gejas gantañ hag ouzh han
gwelout ken strafuilhet, a soñjas e oa en em
gavet ur gwalleur bennak, hag e teuas d'e
heul betek ti Bortavitaïha...

Ret e oa gwelout ar reuz a oa e ti
hemañ ! Ivon Andrev, ar mab, a oa
astennet war ur gwele, aet e skiant-vat
digantañ hag o tifestañ, ken o devoa mil

boan ar re a oa ouzh hen d'erc'hel :
Mac'haot, merc'h Ivon Riezou, Mahaot,
Rozella, Amon Marzhin. Huchal a rae :
«*Sant Erwan, va sikourit ! Sant Erwan, va
sikourit, va difennit ouzh ar givri-se, hag
ouzh al laeron o deus c'hoant d'am c'has
ganto !*». Ken strafuilhet e voe Juliana gant
ar pezh a welas hag a glevas, ma rankas
mont d'ar gêr war he c'hiz.

Bez' e oa un den all c'hoazh, Yannig,
mab Gwilherm Ouzkann, ha na voe ket
kalonekoc'h eget Juliana, rak e-lec'h chom
da sikour ez eas d'ar gêr, hag eñ paotr
yaouank 28 vloaz.

An tad avat, pa welas e petore stad
edo e vab, a skoas ur c'hiaouenn en e
galon, ha daoust d'e boan-spered, ec'h en
em daolas war e vab a save a-enep dezhan,
hag en em astennas warnañ, war e beultrin,
evit herzel outañ da fiñval, ha d'ober droug
da zen ebet ; rak e vab a glaske zoken hen
dantañ hag a zalc'he da lavarout : «*Va
difennit, va difennit a-enep al laeron hag ar
givri-se o deus c'hoant d'am c'has ganto*».

Ar paour-kaezh foll a wele a-us dezhañ
daou ziaoul bras evel tourioù, du ha
spontus, dezho stumm, doare, ha karniel
givri, hag a glaske tapout krog ennañ en ur
lavarout : «*Te 'zo dimp ! Te 'zo dimp ! rak
da vamm he deus da roet dimp !*».

«*Sant Erwan, a lavare an tad, erbediñ a
ran va mab ouzhoc'h !*». Pa ganas ar
c'hilhog, e lavaras ar paotr yaouank d'e
dad : «*Tec'hit bremañ, tad, va list da gomz
gant Sant Erwan a zo aze ouzh va
difenn !*». Ha goude bezañ lavaret ar
c'homzou-se, meur a wech, e vanas
kousket...

Evel ma kontas diwezhatoc'h, e oa en
em ziskouezet Sant Erwan dezhañ, en e
goazez war boull e galon, hag en devoa
lavaret dezhañ : «*Ivon, ha kousket out ?*».

— *N'on ket, Aotrou, emezañ, met piv
oc'h c'hwi ?*

— *Arabat dit kaout son. Dilun diwe-
zhañ e oas bet war va bez, ha dougen a rez
va anv-me ; setu perak ez on deuet d'az
salviñ ; rak da vamm ne c'helle ket da reiñ
d'an diaoul, pa n'he deus ket muioc'h e wir
warnout-te eget n'en deus ur sac'h war ar
gwinizh a zo ennañ o vont d'ar vilin da
valañ !*».

Neuze e tec'has an diaouled kuit hag e
vanas kousket ar paotr yaouank hag e
reposas betek ar beure...

Abred diouzh ar beure, e tihunas hag a
lavaras d'e dad : «*Kasit ac'hann da geout*

Sant Erwan, ha goulennit digant Yann Doliga donet ivez.

Ar Yann Doliga-se a oa ur mignon bras da Ivonig Andrev ; un tamm bihan e oa koshoc'h peogwir en devoa 4 pe 5 bloaz warnañ, met en em glevet mat a raent. En noz a-raok, e oa bet kemennet dezhañ e oa marv Ivonig, ha daoust ma oa klav war e wele, e oa deredet diouzhtu. En em gavet e oa war an hent gant ar merc'hed a oa o tougen Ivonig da di Bortavitalha, hag aet e oa d'o heul, ha gweliet en devoa an dud o lakaat ar foll war ur gwele, hag hemañ oc'h ober sodadennoù spontus. Neuze e oa aet d'ar gêr. Antronz vintin evelkent, e oa sampar a-walc'h evit mont betek Landreger

P'edont gant o hent, e teuas mamm Ivonig d'o heul. Met kerkent ha ma santas edo e vamm o tont, e krogas gwall-enkrez ennañ adarre, hag en em lakaas da yudal : «Kasit-hi kuit ! Kasit-hi kuit !». E vamm neuze a lavaraz dezhañ : «Va mab, da erbediñ a ran ouzh Sant Erwan !». Met he gwaz a lavaraz dezhi mont d'ar gêr, hag e paouzas ar gwall-enkrez ken na voent erru en Iliz Landreger, e-tal bez Sant Erwan. Eno e krogas ur barr gwall-enkrez ennañ adarre, gwashoc'h eget biskoazh, hag e voe ret d'erc'hel mat dezhañ, betek eur ar gousperoù. War-dro an eur-se e reas e dad dezhañ pokat da benn ar maen a oa war bez Sant Erwan, hag e santas ar paotr yaouank e oa disammet eus e zroug ha yac'haet. Goulenn a reas e sae hag e c'houriz ha neuze e kouskas e-pad ur pennadig.

E-sell edo da zistreiñ d'ar gêr diouzhtu marvat, met sakrist an iliz-veur a zeuas d'e gaout hag a zifennas outañ, evit enor Sant Erwan, kuitaat kêr-Landreger, ken na vije embannet ar burzhud. Chom a reas eta nav pe zek devezh e Landreger kent distreiñ d'ar gêr yac'h ha sampar.

Setu koulz lavarout lakaet penn-da-benn en hevelap danevell, hervez diskleriadurioù an testoù, istor Ivonig Andrev, mab Ivonig Andrev eus Perwenan, aet da 6

sot-diroll da heul mallozh e vamm, ha pareet dre veritoù Sant Erwan.

Gant ar gwelaennoù deuet en anaoudegezh eus an c'hlevedoù-spered, e c'helle marteze ur mezeg psikiatrek kaout e soñj war an darvoudoù hon eus kontet, met kement-se n'eo ket labour un istorour. Gwell ganeomp distreiñ bremañ war an anvioù-tud hon eus kavet, da vihanañ ar re a dalvez ar boan.

Setu amañ eta roll an anvioù a gavomp en destenn.

Andrev : anavezet-mat ez eo bepred an anv-se, un tamm dre-holl.

Konstans (koustañs) : en destenn : Yvo filius Alani Constancii Eozen, mab Alan Konstañs.

Yuzeta evit *Yuzed*, anv biblek Judith, luidith (ar Yuzevez).

Lannig : un anv a gaver alies hag e kalz stummoù disheñvel hag adkavimp diweshoc'h. Skrivet amañ *Lannic*.

Mahaot : *Mahaut*, diwar Matilda (Mathildis) cf saozneg *Maude*.

Ouzkann : gwel. Barr-Heol niv. 90. Skrivet amañ *Onzcani* (Onzcanus).

Perwenan : ur barrez a Vro-Dreger, skrivet *Penguennan* en destenn. Un dra bennek evel *Penn ar Vro Wenn (?)*. Cf. Porzh-Gwenn war zouar ar gumun se.

Portavitalha : douger-bitailh, mestr-bitailhour. Anv ur garg dindan duded Vreizh Skrivet amañ *Portavitalha*.

Presbyter(I) : troidigezh e latin eus an anv *beleg*, *Juliana Presbyteri* : Juliana ar beleg.

Prijant : e latin *Prigencii* diwar *Prigen-cius*, skrivet bremañ *Prigent*, ger anavezet.

Riet : dizanav deomp, hag a lezomp war gont tud all da ziskleriañ Mahaut, filian Yvonis Rieti.

Sivi (Kêr-Sivi) : endestenn *Syvoy*, quedam mulier Yuzeta, filia Prigencii Ville Syvoy. Distaget bremañ gant ar bobl : *Ker-Zivi*, stok e bourk Trelevren *Yvonetus* : Yvonet, bremañ ; met distaget *Ewanned*, *Ewanned* e brezhoneg.

Chom a ra ganimp bremañ da ziskleriañ an anv diaesañ-holl marvat : **DOLIGA**. E kement ha ma ouzomp, n'eus bet kavet diskleriadur ebet dezhañ. Yohannes DOLIGA : Yann DOLIGA, mignon da Ivonig ANDREV. Un anv bet kemeret, war a seblant, evel un anv brizh-latin gant paotred an ACTA SANCTORUM peogwir o deus hen skrivet **DOLIGAM I**

E levr-mañ Act. Sanct. e lenner eta :

«*Rogavit patrem et Joannem DOLIGAM quod ducerent eum ad S. Yvonem : Goulenn a reas Ivonig Andrev digant e dad ha digant Yann Doliga(m) hen kas da gaout Sant Erwan.*

C'hoazh ur wech taollet evezh ouzh an dibenn *AM evel pa vefe DOLIGA un anv en . A lakaet en dro-damall (akuzativell) cf ROSA - ROSAM.*

Met e gwirionez, d'hor meno, en deus ar stumm-mañ DOLIGAM nebeut-tre a chañs da vezañ gwiriek. An domskrid hag a dalvezas da sevel ar skrid da vezañ moulet gant Bollandiz, war-dro ar bloaz 1660, hag a oa miret en iliz-Veur Landreger, a ranke dougen, evel domskrid La Borderie, DOLIGA ha latinekaet e oa bet en AM an dibenn anezhañ gantañ adskrivier. E levr La Borderie eta, ne gaver nemet DOLIGA : «*Rogavit patrem suum et quemdam alium nomine Johannem DOLIGA (Goulenn a reas digant e dad ha digant un den all anvet DOLIGA).* (hen kas da gaout Sant Erwan)... Ha bep tro e levr La Borderie e kaver DOLIGA : 5 gwech, war hon eus kontet. N'eus arvar ebet : ret eo kemerout an anv-se evel-se, da lavarout eo DOLIGA. Hennañ eo anv pe lesanv mignon Ivonig Andrev.

Evel-hen eta e rannomp an anv DOLIGA :

DOL — I — GA
Anavezet a-walc'h ez eo ar ger DOL : evel lakomp kêr-Dol, Dolo (marteze) ur barrez eus eskopti Sant-Brieg, koad dol (koad krommet, kammet) hag all. An orin eus ar ger a zo da glask er c'heltieg kozh *Dola* eus ar wrizienn *dhalo* = gwareg, pleg, krommenn.

Bez'ez eus c'hoazh, e kembraeg da vihanañ, ur ger DAWL o talvezout rann, lodenn.

Ar gerioù all hag a c'heller kaout e Geriadur L. Fleuriot (Henvrezhoneg) : DOL = dellenn, DOLEG = kalonig n'o deus ket kalz a dra da ober gant hor c'hudenn, draist-holl DOLEC hag a vefe da

rannañ e DO — LEC.

An I (I) a zo d'hor meno, ar raganv-perc'hennañ implijet bepred dindan ar stumm-se an-dro da Landreger ha draist-holl a Tregar Vihan hag e Gwelou : = e, he. Gweliet hon eus evelkent, ez eo E a veze implijet e Lannuon, en amzer Sant Erwan, p'hon eus studiet an anv KARGE-SAE (Barr-Heol, 94). Dre vras emañ kont evel-se atav, en amzer o ren.

War-lerc'h I e c'hoarvez kemmadurioù evel ma ouzomp holl : K.P.T. hag all. Met ne vezent ket skrivet peurvuiañ. Dre-se war-lerc'h I amañ e kaver ur ger o kregiñ gant GA. E-touez ar gerioù o kregiñ gant GA, lakomp e geriadur R. Hemon ez eo hirik al listenn anezho GAR, GAD, GAG... Met peseurt abeg a vije bet da skrivañ DOLIGA e-lec'h DOLIGAR o talvezout neuze KAMM-I-C'HAR, da skouer ?

Pa ne welomp ger ebet o kregiñ gant GA ez eo dav klask e roll ar gerioù o kregiñ gant KA ; ha peogwir hon eus amañ da ober gant ur paotr, e c'hoarvez en un doare naturel ur c'hemmadur KA (I) — GA (I), kemmadur hag a veze anezhañ, hep mar ebet, en amzer Sant Erwan, war-lerc'h E (e).

E geriadur R. Hemon avat, n'eo ket ar gerioù o kregiñ gant KA eo a vank adarre ! Nemet e ranke kaout un abeg a bousz evit na vije ket bet skrivet ar ger war e hed gant ar sekretourien a reas war-dro paperoù Prosez Santelezhadur Sant Erwan. Ha ne welomp abeg ebet, nemet un abeg a onestiz.

Lenn a rafemp eta : DOLIGA(izh), distaget en amzer Sant Erwan : DOLIGATH (th kalet). Ar ger-mañ KAZH a sell ouzh korf, ouzh anatomiezh ur gour hag e lezan pep hini da gompren ar pezh a vefe deraet merkañ en ul levr-medisinerazh, mat a vefe amzere a-walc'h war bejennoù Barr-Heol. Ur si eta e korf ar paotr yaouank, deuet gantañ war an douar. Bremañ, e vez oberataet an dud eus ar si-se. HUPOSPAD eo a vez graet eus an hini en deus ar si-se (Damdizhog). Ur si dibaot-tra.

Un dro-lavar heñvel-mik ouzh DOLIGAZH, e brezhoneg a-vremañ, a zo bet kavet gant Mikael Madeg e-karz e enklaskoù war lesanvioù an dud. E-lec'h

DOL emañ ar ger KROMM hag e lec'h KAZH ur ger anavezet un tamm e pep lec'h (2).

Divinet hoc'h eus moarvat ster ar ger KAZH. Ger anavezet e Bro-Dreger. Boutin a-walc'h en oberennoù Prosper Prou. Hen kaout a reer el levr *Amourousted an den kozh* (moulet e 1647, e Montroulez, hag adembannet —lod anezhañ da vihanañ— gant Roparz Hemon, Dublin Institute Advanced Studies, e 1969). R. Hemon n'en devoa ket kredet reiñ an droidigezh eus ar ger (3).

KLERG

(1) *Kan ar c'hilhog, e latin an destenn : et dum gallus cantavit ; ar pellgent.*

(2) *Gant an droidigezh HUPOSTAD roet ga*

neomp d'ar si-se e vo aezet d'al lenne-rien, gant sikour geriadurioù bras, e yezhoù estren, gwelout petra eo.

N'eo ket ur ger resis-tre drezhañ e-unan, zoken e gresianeg. Ar brezhoneg avat, a lavar petra a «veler» : kromm, kamm, pe marteze, mar galler en em harpah war an DAWL kembraek, ar rann, an troc'h. En amzer Sant Erwan e lavare marteze ar vezeged «doligalch» met ar bobl 'vel ouzoc'h...

(3) *Evel just, ma'z eus tu da ziskleriañ an anv diaes-se DOLIGA en ur stumm all, ez omp prest da zegemer evezhiadennoù tud gouiziekok'h egedomp. Nemet e hahval an traoù klotañ ervat etrezo en hon diskleriadur-ni.*

Klerg

e-skeud PROSEZ SANT ERWAN : KERVARIA SULAR

dependentis sive unite nunc ecclesie de Lohanec (paj. 552) : *Derian a Goadsalio, eus Kervaria an ENEZ, hag all.* Hehvel ez eo an div destenn, nemet ar stumm da skrivañ latin hag an droidigezh eus anv **Bouaysalio** ; anat eo amañ ur wech ouzhpenn, e oa bet «nevesaet» testenn ar skrid-orin. Dishehvel ez eo ar stumm da skrivañ **Insuler, Insulae**, ar pezh a lavaromp ni bremañ **Sular**. Dav evel just disteurel stumm **BOLLANDIZ** —hag hini S. Roparz da heul : **INSULE - INSULAE** a vije bet *Enez*, hep mar ebet, en deiz a hiziv, da lavarout eo **Kervaria-an-Enez**. Sellit da skouer anv an test 77 a zo anvet **GAUFRIDUS de INSULA**, eus parrez Plouganou.

Er bajenn 493, e kaver an anv **INSULER** skrivet in **Sular**, en daolenn o reiñ anvioù an testoù evel m'emañt e korf al levr. Lenn a raimp ivez **IN SULER**.

Meur a wech ez eo meneget anv parrez **KERVARIA-SULAR** el levrioù diwar benn Sant Erwan. Un drev eus parrez Louanneg e oa **Kervaria**, en amzer Sant Erwan. Donet a reas da vezañ parrez distag er bloaz 1791 ha laket da gumun e 1793. E-skeud an dielloù a gaver eta e levr *La Borderie, an Acta Sanctorum* (Bollandiz) e karfemp diskleriañ, pe da vihanañ reiñ un diskleriadur bennak eus anv ar barrez-se. Lezel a reomp a-gostez testenn S. Roparz, alvokad hag a embannas e *Vuhez Sant Erwan*, e 1886, rak e destenn, paj. 84, e traoñ ar bajenn, ne ra nemet adskrivañ skrid Bollandiz.

Setu eta petra a lennomp e levr de *La Borderie* (paj. 107, testis XLIV) :

«Darianus de Bouaysalio, id est, Dyonisius de Boscho Aliochi, parrochie Beate Marie Insuler, dependentis, sive unite nunc ecclesie de Lohanec : Derian eus Koadsalio, da lavarout eo, Denez eus Koad Aliochi, eus parrez Kervaria Insuler, bremañ stag pe unanet ouzh iliz Louanneg.

An Acta Sanctorum a ro : Darianus de Boisaliou, parrochie Villae Mariae Insulae;

Bremañ e vez lavaret **SULAR** e-lec'h **SULER**, met anat eo ez eo an hevelep ger emdroet un tamm bihan. Faos avat, ez eo ar stumm **SULARD**. Evel ma weler, hervez testenioù kozh Prosez Sant Erwan, hag

hervez an distagadur, en deiz a hiziv, n'eus **D** ebet en anv. An **D**-se moarvat eo en devoa harzet ouzh Smith (Toponymie Bretonne 1940) da ziskleriañ an anv, pa lenne **SULARD**.

Anat eo emañ ar ger **SULAR** da dostaat ouzh gerioù brezhonek all, evel **SULER** (e gwenedeg), **solier, sulvez** (gwel. *Barr-Heol*, niv. 92). E Lokmear (kanton Sizun) e kaver end-eeun **SULER** !

Diwar al latin **solaris** : **heoliet**, e teu ar ger. Ul lec'h da heoliet, hag e skeud-se neuze ul lec'h da sec'hañ ha da glenkañ an eodeier, ha da c'houde, grignol, kalatrez, h.a.

Forzh pegen iskis e seblanto moarvat, e rafen a-walc'h ar goulen-mañ : daoust hag e-touez an anvioù niveruzik o tougen anv an Heol, pe savet diwar anv an Heol : **SUL**, ne vefe ket unan bennak o tougen testiñ da Relijion an Heol ? Restajoù eus ar Relijion-se ez eo tantadoù hor pardonioù, tantadoù Gouel-Yann ; ha petra eo eta giz Kef an Nedeleg ? Daoust hag e-touez an anvioù a venegomp ne vefe ket hini pe hini o verkañ un andred bennak e-lec'h ma veze

graet lidoù en enor d'an heol, evel m'hon eus kinniget evit *Kersulvez Pluned* ?

Evit distreiñ da **Gervaria-Sular**, n'en deus den ebet eno soñj eus tra pe dra o tegas da goun eus kehelerzh an heol, na zoken eus plasoù ar barrez tommheolietoc'h eget ar re all. Hervez hengoun ar bobl e oa ur c'hoad bras gwechall al lec'h m'emañ an iliz-parrez bremañ. Daoust hag ar c'hoad-se eo en devefe root e anv d'ar barrez : *Kervaria (en) Suler* ?

EN Suler a lavaromp, met petra a dalveze e gwirionez an **IN** eus **IN Suler**, hervez skrid *La Borderie* ? Gallout a rae merkañ al lec'h ha neuze e oa an araogenn **E, EN**. Met gallout a rae bezañ ivez evit ar ger-mell : **En, AN** (bremañ). Neuze **Kervaria (en) Suler** pe **g-KervariaarSuler**. Diaes ez eo gouzout, met ne deo ket un dra a-bouez vras moarvat.

KLERG

Da vezañ embannet : Daoust hag e ouie Sant Erwan gresianeg ?

DIWAR-BENN ORIN AR VROADELOURIEZH VREIZHAT

En dastumadenn 10/18 emeur o paouez bouc'hañ ur rannad-studioù evit, sañset, didouelliañ an dud diwar-benn ar vroadelouriezh, mammenn da gement a walleurioù, dec'h hag hiziv. Met ! Met, dre ma n'eo ket bet diskleriet pizh ster ar ger, e vezo lakaet e mil hilienn, un doare spontailh aes evit taga'h ha klask dispenn ar re ne welont ket an traoù evelloc'h. En dastumadenn-mañ ez eo bet savet gant **BERNARD TANGUY** : «*Aux origines du Nationalisme breton*». Daou levr :

1° : N° 1165 : *Le renouveau des études bretonnes au XIX^e siècle*,
2° : N° 1169 : *Essai sur l'histoire de la langue bretonne par Hersart de la Villemarqué, suivi de Notes et Eclaircissements*

ments.

Amah eo sklaer al liv diouzhtu : krouer, kouz lavarout, eo bet ar vroadelouriezh vreizhat, ur c'hantved 'zo, dre faltazi ur barzh-istorour : Kervarker, ha dre untuegezh un istorour : La Borderie. Ha strivañ a ra B. Tanguy, a-hed e labour, da ziskar o diazezoù. Hervazañ (hag hervez F. Falc'hun e gelenner), ez eo Breizhiz hiziv, evit ar pep muiañ, mibien d'an henvroiz arvorigat, ken gwan evel ma voe pouez «*Divroadeg*» ar pempvet kantved o tont eus Breizh tramor. Ne deo ar brezhoneg dreist-holl nemet un treuzvevadur diwar ar gallaneg.

Evit proufiñ se, emañ B. Tanguy oc'h implijañ un doare-burutellat sebezuz, ha sur-mat eo bet ret dezhañ, evit sevel e labour, poanial e-pad meur a vloavezh-enklask. Den ebet ne nac'h eo un den helennek-dreist. A-hed pajennoù an daou levr-se, ez eo diblusket dre ar munud oberennoù (hag ivez doareoù) Kervarker : *BARZHIZ BREIZH*, evel just, met ivez «*SKRID-ESA WAR ISTOR AR BREZHONEG*», embannet e galleg, e deroù Geriadur ar Gonideg, hag adembannet amañ. Goude kement a dud hag o deus c'hwez war ar gudenn-se abaoe 110 vloaz (ur sifr hag a laka anat pegen frouezh e voe o strivioù ouzh daoulagad ar Vretoned...!!! Hag a-hervez, adkregiñ a raio re all c'hoazh gant an arv. Abeg ebet evit ma vefe echuet gant al labour-se ! Kalon vat dezho ! — ez eus kel amañ da ziskouez ur wech ouzhpenn :

1 - E c'hoari Kervarker gant an testennoù, ken na zeu *Barzhiz Breizh* da vezañ tra Kervarker kentoc'h eget tra pobl Vreizh,
2 - Ne oa ket Kervarker ken mailh-se war e vicher a skiantour, ha ne ouie ket kement-se a vrezhoneg.

Evit pezh a sell ouzh La Borderie, ez eo startoc'h an tamm da ziframañ. N'eus forzh ! Taget e vez e dalvoudegezh en ur deurel distiziañs war e oberennoù kentañ ken yaouank e oa. Taget e vez dreist-holl e ziuntuegezh dre damall dezhañ diazezañ deroù *Istor Breizh* war un «*priori*» : mojennek-rik eo Konan Meriadeg ; peoc'h-leun e voe diskenn ar Vretoned en Arvorig, diskenn aas ha stank dre ma oa damzibobl ar vro.

Lakaet K.O. (knock-out) La Borderie e teu neuze tro Joseph Loth, e ziskibl, da glevout e... santa maria ! Aes eo kompren perak ez eo ken c'hwerv ha ken flemmus an tag a-enep La Borderie pa lenner en «*Istor Breizh* (I, paj. 247) en tri dibab kinniget 10

diwar-benn diskenn ar Vretoned en Arvorig :

1 - An diskoulm «*breizhat-dreist*», dre aloubadeg dre nerzh e 383 gant Konan Meriadeg.

2 - An diskoulm «*breizhat-etre*», dre zivroadegoù tamm-ha-tamm adalek 455 (diskoulm dibabet gant La Borderie).

3 - An diskoulm «*enep-breizhat*» o lakaat an divroadeg da wan-tre, ha bezzet buan e-touez pobl ar vro. Nac'hañ a ra La Borderie an diskoulm-mañ en abeg :

a) ma voe kemmet anv ar ragenez arvorigat e dibenn ar Vvet kantved,
b) ma voe kemmet enni ar yezh en hevelep mare. Hogen an diskoulm diwezhañ, an trivet, a zo, kouz lavaret, an diskoulm dibabet gant F. Falc'hun hag e ziskibl feal, B. Tanguy o tiazazañ o c'helenn war ar guzennoù soutil ur skiant fonetikel digor d'an arbennigourien nemeto.

E gwirionez, petra a c'hellfe chom eus Kervarker ha La Borderie goude ar 750 pajenn-se a hejañ-dihejañ !

Atizet gant tan an emgann, e teu B. Tanguy da c'hoari e fentigeller : «*Laouen gant frouezh labour e skoliad — komprenit Loth — pe gentoc'h gant frouezh e labour e-unan, e lavar La Borderie...*». Ma ! Setu dres an doare kemeret ivez gant F. Falc'hun evit kinnig d'al lenner labour e ziskibl, B. Tanguy... Eveek ! Risklus ez eo avat ober e baotr farsus, pe verkañ gant ur «*sic*» un tamm goapaus, ur fazi dievezh, pe ur vi-koukoug bennak, rak piv, zoken B. Tanguy, a zo direbech er c'heñver-se, pa gomz teir pe beder gwech eus Miorcec de Kerdanet e-lec'h eus *Miorcec* (stumm kemeret atav gant an den gouziek L. Kerbiriou).

Lavarout ez eo Kervarker *Tad ar Vroadelouriezh* ez eo lavarout ne voe tra a seurt-se en e raok. Daoust ma oa ne oa ket anavezet ar ger-se a-raok an Dispac'h bras, ez eo arabat mennout ne oa emskiant vroadel ebet e kalon ar Vretoned. En amzer ma oa Breizh ur Stad dieub e veze diskouezet an emskiant-se e person an Dug e-unan. Pa voe diskaret ar skeudenn bev-buhezek-se eus ar bersonelezh vreizhat e veze darvoud pe zarvoud o lakaat anat ne

oa ket marv an emskiant-se e-touez ar bobl : divizoù Feur-Emglev 1632, ar gerioù «*Frankiz arvorig*» el Lezennoueg koueriat, e 1675, ar goullenn groñs ma vefe miret gwirioù Breizh er «*haierou-klemmoù*» e 1789, Diskleriadur Bothereh, h.a. Dont a ra berzh-mat ar *Barzhiz Breizh* — forzh pegen gorrek, met n'eo ket echu c'hoazh eus e dalvoudegezh lennegel, met ivez a dra sur dre m'az adkav ennañ al lenner e soñjoù don, kuzhet e kreizig-kreiz e ene, met displeget ken brav — ur bam — gant an oberenn-veur.

A-hed munudoù ar vurutelladenn-se, hir ha poanlus da lenn, en askont d'he galleg, pell-kaer diouzh galleg Kervarker, La Borderie, ez eo souezhus gwelet n'eus kal ebet, nemet en ur dremen, eus tezen skiantel-meurbet Donasian Laurent e 1974, hervez an dielloù-orin hag a ziskouez n'eo ket bet savet ar c'hanaouennoù diwar faltazi Kervarker ha n'en deus kemmet enno nemet traoù munud. Evit kanenn pe ganenn n'eus bet dizolot roudenn ebet e-touez ar bobl, met n'eus ket aze ur broenn ne oa ket bet kanet amañ pe ahont.

N'eus ket anv zoken (a gredomp) eus Aboezen hag en devoa embannet er ge laouenn *PREDER* tri c'haier : «*En ur lenn Barzhiz-Breizh*», e 1962. N'eus ket da grediñ e vefe dizanav ar c'haierou-se da v/B. Tanguy. Met n'eo ket ken iskis-se pa weler gant petore spered ez eo savet ar skrid ; da skouer diwar-benn Janedig-Flamm (L. III, paj. 229) : «*An teir gwerz a lenner da heul (Janedig-Flamm, Stourm, an Erminig) a zeu da greskiñ niver ar re na gaver nemet a Barzhiz Breizh*». Aes a-walc'h, ha pa ne ve nemet en abeg da se, en o zamaller da Gervarker. Ha, pa soñjer ervat, ez eo hennezh ar martezeed aesañ evit disammañ ar spered ; ezhomm ebet ken da glask pelloc'h da c'houde... Buan a-walc'h avat, e teu ur soñjezon da rodellat dre ho spered : ar re a sav dizamant a-du gant ar menoz-se, ne reont ket katz a stad eus a Gervarker evel brezhoneger ; hag ar gwerzioù-mañ ne dint ket fall tamm ebet. Dibaot-tre ar munudoù a gavomp da bismigat e brezhoneg Barzh Nizon. Neuze penaos chom hep bezañ trechalet gant diuntuegezh ur buruteller oc'h abegiñ ken taer «*untuegezh*» ar re all ?

Hag-er eo ret komz eus ar pavadoù-azen roet da La Borderie, ken treuzwelus ez eo ar youl da vihanaat talvoudegezh «*an* 11

hini brasañ eus hon istorourien». (Durtelle de Saint-Sauveur) ? Ur skouer hepken : emañ B. Tanguy o souezhiñ dre na oa ket bet nec'het La Borderie gant an herder ma voe brezhonekaet ha goude, divrezhonekaet ar «*Vro c'hallio*» (T. 377). E gwirionez, ne dremenas ket en traoù ken buan ha lavarout chou d'ur yar : meur a kantved ! Kit da welout penaos eo bet en traoù e El-Djezair, etre 1830 ha 1962, penaos e voe lakaet ar stumm gallek d'an anvioù-lec'h, ha goude an anvioù arabek diouzhtu goude dieubidigezh ar vro, dre reizhadur ar gouarnamant. E Breizh, reizhadur ebet evel just, ne voe kemeret gant an Duged, Breizhiz anezho deuet da c'hallegerien, evit gallekaat an anvioù-lec'h ; setu perak e chom er Vro c'hallio, kement a anvioù-lec'h brezhonek o stumm, hag o lakaat anat e voe komzet ar yezh eno. Anez, perak n'eus ket, kouz lavaret, anv ebet ar broioù nesañ ? Ma chom hini pe hini evel «*Harcouët*», ken dibaot ez int ma ne vezont ket gwelet diouzhtu. Ha koulskoude a voe komzet gallaneg eno ivez, e-pad kantvedoù Perak eo bet kollet an anvioù gallanek-se ?

A-barzh fin ar gont e teu un tamm amplek bennak d'al lenner diwar an debron-se da abegiñ gant an oberour : war emziwall e teu da vezañ e-keñver hemañ marteze muioù egot e-keñver ar re daget. Donet ar ra da vezañ evezhiekoc'h-evezhiekoc'h kent degemerout ar menozioù displeget. Sed aze, d'hor menno ar frouezh gwellañ diwar ar studi-se : chom war evezh a-arok diskleriañ netra pe grediñ netra ha barn ; zoken e danvezioù skiantel pe zamskiantel : rak un dra diskouezet evel gwir hiziv, en em gavo digwir ha fals warc'hoazh. Dija en doa Kervarker kemmet e soñj diwer-benn orin ar brezhoneg, en Arvorig. Neuze a vija bet un dra eus ar furañ evit B. Tanguy bezañ evezhiekoc'h o tiepakañ e venozioù dezhañ e-unan. Dav eo degas da goun gerioù ar mizeg-buhezoniour, Loeiz Kervran : «*N'ouzon ket petra ez eo ar re a oar so. Me ne c'hellan nemet kaout treuz outo*».

Petra a ra talvoudegezh un istorour an tu-hont d'e ampartz evel skrivagner ? Bezañ donezonet evel furcher, pervezh hag aketus en e enklaskoù, bezañ lesi a-walc'h

evit en em zifenn a-enep ar c'hoant da devel war draoù 'zo ha da reiñ diskleriadurioù untuek eus an darvoudoù. Se ne vir ket ouzh ur studiadenn istorel da vezañ savet hervez ur menoz-stur : atav ez eus ur menoz-stur bennak, emskiantek pe get. Bez'ez eus unan anat-kaer e labour B. Tanguy. Ha ma nac'hfe an dra-se evel un dra ha na glot ket gant an diuntuegezh ha gant an dalvoudegezh istorel eus un oberenn, neuze ne dalv mann ebet e labour dezhañ e-unan.

Evit gwir, mar ne vije ket bet gant La Borderie perzhioù un istorour, penaos krediñ e vefe atav diskouezet e *Istor Breizh* evel un oberenn diaze? «*E-touez an oberennoù a hiziv, ez eo dleet al lec'h kentañ, hep mar na marteze, d'an «Istor Breizh» bras savet gant La Borderie*», daoust ma c'heller breutaat diwar-benn tra pe dra dreist-holl evit pezh a sell ouzh marevezh orin Breizh (Durtelle de Saint-Sauveur). Netra souezhus avat ne vefe ket bremañ «up to date» penn-da-benn, goude pevar-ugent vloaz. Met gant *ISTOR BREIZH* (embannadur Privat) savet gant kelennerien ar Skol-Veur dindan renerezh Jean Delumeau, e komzer eus labour La Borderie atav evel eus «un oberenn ar gonidusañ».

Evit pezh a sell ouzh Joseph Lot? Dom Gougaud (*Les Chrétientés celtiques*, 1911; *Kristianezhoù Keltia*) a ziskleir ez eo e labour «*L'émigration bretonne en Armorique*» (*Divrodeg ar Vretoned d'an Arvorig*) un oberenn-diaze eus an talvoudusañ. Hag ur barn mat e oa Dom Gougaud, un den hag a gomze hep tro na distro eus poentoù gwan La Borderie. Marteze e vefe dav arlivañ hiziv ar varn-se goude al labourioù embannet lakomp gant Nora Hadwick ha zoken labourioù F. Faic'hun ha B. Tanguy diazezet war zoareoù-labourat disheñvel. Met arabat ankouazh e c'hell ar re-mañ faziñ ivez. Hag argarzhusañ reolenn ha leit-motiv evit un istorour ez eo ar re-mañ : «*Tec'h alese, ma kamerin da blas !*».

Bez'e vank alies un tamm uvelded d'ar skrivagnerien hag ivez un tamm anaoudegezh vat ouzh ar re o deus dre o labourioù hag ivez dre o faziñ, degaset sklerijenn war Istor Breizh. Paneveto e vefe skort eus ar skortañ hon anaoudegezh eus an istor-se. Da bep hini da gas pelloc'h an erv boulic'h gant ar re all.

Touell bras ez eo krediñ e vo disprizet

ha mouget ar vroadelouriezh vreizhat en abeg d'ur fazi bennak (evit ma'z eus). Ouzhpenn an istor hag ar yezh ez eus elfennoù all niverus evit he c'hompren : an douar, an douaroniezh, ar ouenn, ar relijion, ar politikerezh, an arboellerezh, youl an dud, h.a. Kemer kentel war se digant : Becquet «*L'ethnie française d'Europe*», un oberenn talvoudus-tre. Bez'ez eo ar vroadelouriezh ur spered hag a vev, a gresk hag a varv ivez. N'eo ket aes atav displegañ perak en em santer disheñvel diouzh ar re all, amezeien pe get, na perak e lavar an amezeien-se ez int tud disheñvel. Ma sant ur bobl he deus ur sevenadur dezhi hec'h-unan, ma kred ez eo taget ar sevenadur-se hag en arvar da vervel, n'eo ket souezhus e felle dezhi hen diwall. Ar gwir he deus d'hen saveteiñ, ha pa ne vefe gwelet disoc'h ebet nemet un diskoulm politikel.

J.C.

Evezhiadenn gant BARR-HEOL: *Ur bern notennoù e latin a ro B.T. en e levrioù hep o zreiñ. Ur fazi ez eo a dra sur kement-se, rak bez'e vo kalz eus al lenne-rien ha na vint ket gouest d'o c'hom-pren. Latin gant faziou c'hoazh ! Met arabat deomp tamall d'ar re all ar pezh a zo da damall da Varr-Heol : an neb en deus un ti-gwer ez eo arabat dezhañ skeiñ mein 'barzh liorz e amezeg !*

**Strollad ar Vro-Bagan
MA C'HELLJEN-ME
KANAN LAOUEN**

Pezh-c'hoari (10 Lur)
Embannet gant Al Liamm

**Hor C'henlabourer ha mignon
ERNEST AR BARZIG**

*a zo set da Anaon, d'an oad a 60 vloaz, d'an
Iañ a viz Kerzu 1977 e Mur. Doue d'e
Bardono.*

*Lidet eo bet d'an 21 a viz Kerzu 1977
en Iliz-Veur Rouzhon, obidoù an Aotrou
Chalon H. Poisson, istorour anavezet,
marvet d'an oad a 79 vloaz (Doue d'e
12 bardono).*

GREGOR A ROSTREN

(1672(?) + 1750(?))

Biskoazh bravoc'h, ne gav ket deoc'h ? Met ar Geranna-mañ n'eo ket kozh hag ouzhpenn n'eo bet Rostren morse eus eskopti Gwened, ha yezh Rostren a zo yezh Kernev Uhel ! Ne chom mui eta nemet PERRED : Keranna un hanter-lev en hanternoz eus ar vourc'h. Perred bet eus eskopti Gwened, e-giz m'emaomp o paouez lavarout, gant ur yezh trefoet enni en abeg ma oa eno ar Govelloù gant micherourien deuet eus an diavaez. Evit Istor Perred hag ar Govelloù, kemerout kentel gant E. Barzig, en e levr *Mur de Bretagne*, paj. 241 sq. moulet gant «Natures et Bretagne».

Ne oar den ebet na peur ez eo bet ganet na peur ez eo bet marvet. B. Tanguy, en e levr *Aux origines du nationalisme breton*, paj. 216, a veneg kement-se adarre, nemet e lavar ouzhpenn (ne ouzomp ket avat, eus a belec'h en deus tapet an doare) e oa bet ganet en ur gêriadenn anvet KERANNA. Ar pezh a zo iskis eo ne seblant ket gouzout eta ez eo kenvroad d'an Tad Gregor, a Rostren peogwir, n'eus ket marteze div lev etre o farrezioù genidik... Met arabat mont re vuan.

••

An hini en deus savet unan eus ar Geriadiurioù brezhonek gwellañ ha brudetañ a zouge daou anv : e anv-lean GREGOR, hag unan all o verkañ anv e barrez c'henidik pe anv ur gêrig tost d'e lec'h genidik. Peogwir e oa bet ganet en ur geriadenn anvet KERANNA, tapomp ar Roll-Geriou (Nomenclature) embannet gant an INSEE. Tri anv e KERANNA a gavomp e korn-bro Rostren : unan e Prijag (Bro-Wened), unan all e Rostren and-eeun, hag unan all, nepell diouzh Rostren, e parrez Perred, gwechall eus eskopti Gwened, ha bremañ abaoe an Adkempenn graet e-kerz ar Reveulzi, en eskopti St-Brieg.

Klaskomp pehini eus an teir Geranna-se he deus ar muiañ chañs da vezañ lec'h orin an Tad Gregor.

An Tad Gregor (e raskrid e C'heriadur) a lavar e komze en e yaouankiz (en e vloavezhioù kentañ and-eeun) ur yezh trefoet diaes da intent, nemet en eskopti Gwened, ar pezh a ziskouez eo bet ganet pa da vihanañ savet en eskopti Gwened. PRIJAG, marteze, daoust ma'z eo Prijag pellik e-walc'h eus Rostren ? Met e Prijag e komzer brezhoneg yec'h Bro-Bourled ! Da zisteur eus et. ROSTREN ? Anv an Tad o klotañ gant ar gêr-se, hag ouzhpenn, ez eus e Rostren ul lec'h anvet KERANNA ! 13

Bremañ e klaskimp resisaat ar bloavezh ma voe ganet an Tad Gregor : lakomp da c'hortoz etre 1660 ha 1675. Ma l' E 1665 he devoa bet Marc'harid a Roc'h an sotre digant ar roue ma vije graet foarioù e Perred gant gouelioù Sant-Vazhe, Sant Mark, Sant Urvan, Sant Visant ha Sant Yann, ha marc'had ur wech ar sizhun. Betek 1682 a padas an traoù evel-se, met er bloaz-se e voe koazhet niver ar foarioù hag aotreet div hepken. Perak e c'ant bet koazhet ? N'ouzomp ket. Daoust ha stank e veze an dud ar foarioù hag ar marc'hadou-se ? Ne ouzomp ket muioc'h, met gallout a reer soñjal an em gave Kernevadeg ha Gwenedourion enno, hag e rankent c'hoari gant ur seurt kenyezh d'en em gompren etreze... Ur yezh trefoet.

Met da glozañ gant PERRED, daoust ha n'eus ket er c'horn-bro-se ur gredenn gozh hag a lavar e oa bet ganet Gregor war ribl forest Kenekan, etre Perred ha Laskoed-Gwareg ?

Bremañ, peseurt darempredoù a c'helle bezañ bet etre Gregor, e diegzh ha Rostren, se 'zo ur gudenn all. Hervez Benjamin Jollivet (1856) e veze kavet c'hoazh e kêr-Rostren, 20 vloavezh kentañ, tud eus familh an Tad Gregor. Daoust ha deuet e vijent da chom da Rostren eus a Berred ? Tu a vefe d'ober meur e ginnig, evel da skouer, lavarout e c'ant deuet da vezañ da Rostren, goude ma oa bet koazhet ar gerivers pe oa bet diskaret ar foarioù. Met kement-se ne deo

nemet martezeoù hep diazez ebet, pa n'ouzer tamm ebet pe e oa labourerien-douar pe geñversanted vihan eus tud Gregor...

•
•

Evel just, ne ouzon ket petore anv-familh en devoa an Tad Gregor, ha klask an anv-se a vefe moarvat ken start ha mont da derrañ e gorf o troc'hañ beuz Koad-en-Notz I Dav e vefe kaout ar c'haieroù-parrez eus an amzer-se, ha bezañ sur eus deiz ganedigezh ar bugel hag eus ar bloaz, hag eus anv e dad I

Dav eo tastornat. Gant sikour ar pezh a ouzer a-hend-all hag ar pezh hon eus ni hon-unan klevet digant mirour Ti-Meur Dielloù an Tadoù Kabusuned, e Pariz (30.10.77), e c'hellomp klask resisaat.

E 1962, hervez B. Tangi (op. cit.) en devoa an Tad Gregor gwisket sae ar Gabusuned. Mirour Dielloù an Tadoù Kabusuned e Pariz a skriv : « e seblant bezañ asur (?) e oa kloareg er GROAZIG, e 1692... Ne c'hellomp ket chipotal, hag e lezomp ar pik-goulennata a-gostez. Pet vloaz a c'helle hor c'hloareg kaout en amzer-se : 18-20 vloaz moarvat. Neuze e ranke bezañ bet ganet etre 1672 ha 1674.

Hervez an doareoù roet gant an Tad Gregor e-unan e oa bet kroget da visioniñ er bloaz 1700. Neuze e oa bet beleget war-dro ar bloavezh-se. Ur paotr speredek evel-se — goude, ober e neveziañelezh e studioù hag e ouestloù — a zlee kaout un 28 vloaz bennak d'an hirañ-holl. Ha setu ma'z adkavomp hon sifroù 1700-28 - 1672. Kinnig a rafemp eta d'ar furcherien klask etre 1670 ha 1675...

•
•

Evel misioner Kabusun en devoa ezhomm da c'houzout mat brezhoneg. A-viskoazh eo bet brudet an Tadoù Kabusuned, evel Tadoù an urzhioù all (Jezuisted hag all), da vezañ ampart war ar brezhoneg. O micher e oa, marteze, met e gwirionez, e taent da vezañ akuit maurbet war ar prezeg. Nevez 'zo az eo bet marvet an Tad Daniel (90 vloaz bennak) ganet e Kalaner, hag a oa eus Urzh an Tadoù Maristed : pa oa en e splannder n'en devoa ket e bar da sarmon...

14

Kement ha lavarout deoc'h e oa an Tad Gregor a Rostren, hep mar ebet, eus gouenn an tadoù-se. N'hon eus poan ebet, goude bezañ studiet pizh e C'heriadur, o krediñ an hengoun hag a lavar e komze ken aezet all an holl rannyezhoù.

E 1705 e prezegas an Azvent, e Kastell-Paol. C'hwil 'wel fri-mic'hi Perred gant e yezh trefoet hañval ouzh hini Gwened ? A-benn neuze avat, e 1705, d'e 30 bloaz bennak e oa mestr war yezh Bro-Leon I Er bloaz war-lerc'h e prezege ar C'horaz e Kastell-Paol adarre, gant skoazell an Tad Bonaventur eus Dinam (Dinan).

Abaoe 1700 avat, e talc'he da zastum gerioù ha troioù-lavar e-touez ar bobl, e-touez e genvreudeur, n'eus forzh pelec'h e veze « e stacyonn, e miczienn, e coummunionez » (1). Tamm-ha-tamm e teuas da vezañ brudet evel an hini ampartañ eus an Tadoù Kabusuned ha setu ma voe goulennet digantañ sevel ur GERIADUR gant an Tad Frañsez-Mari a Sant-Maloù, an Tad-Rannvroat pe, evit ober gant gerioù Gregor e-unan, en e C'heriadur, ar « Provincyal ».

•
•

Bremañ avat, o vezañ m'emaomp war un dachenn anavezet ne gollimp ket hon amzer o studiañ Lizher an Tad da Aotronez Breujou-Breizh, nag e raskrid pe an notennoù all e penn e C'HERIADUR : DICTIONNAIRE FRANÇOIS-CELTIQUE ou FRANÇOIS-BRETON, embannet e ti Julien VATAR, e MDCC XXXII (1732). Merkomp en ur dremen ne ouie ket an Tad Gregor ar ger GERIADUR, bet amprestet digant ar C'hembraeg, ha deuet da vezañ e gwirionez, ur ger brezhonek, diaes-tre tremen heptañ I Skrivañ a rae *Dicciöner* ha *Dicciöner*, p. 286.

Adskrivañ a reomp hepken un toullad notennoù tennet eus REVUE HISTORIQUE DE L'OUEST, 1895, paj. 271-283, eus ur pennad-skrid gant an Tad Emmanuel ar Lanvodez, hag o sellout ouzh an eskemmilzheri etre an Tad Gregor hag an abad Bignon, levr-ouegour ar roue. Treiñ a reomp e brezhoneg an notennoù-se bet kemeret evidomp gant ar chaloni du Cleuzioù, sekretour eskopti Sant-Brieg, un den eus an amgrasañ (mil bennozh dezhañ I). Diwar-benn kudenn ar moulañ e C'HERIADUR an hini emaint, ha kaset ez

int bet darn eus a Vontroulez, darn eus a Sant-Brieg, pe eus a Roazhon.

Lizher eus a Vontroulez d'an 19 a viz Mae 1730 : o klask ur mouler evit e C'HERIADUR.

30 a viz Mezheven 1730 : id.
4 a viz Du 1730 da Gabusuned Sant-Brieg da c'houlenn ma rofe Breujoù-Breizh skoazell da voulañ e c'heriadur. Er stad fall emañ kouent Montroulez, o kouezhañ en he foull, hag emañ ar venec'h o-unan o c'houlenn aluzen da adsevel o zi.
D'an 28 a viz Eost 1730 ul lizher all da Gabusuned Sant-Brieg kaset eus a Vontroulez.

Id. 18 a viz Du. Ar marcihal d'Estrées, emezañ, en deus bet ar vadelezh da aprouiñ va labour. Dav eo kaout aotre ar C'hontroller Bras (cf. Geriadur I) (1) ma c'hello ar Breujoù asantiñ « ober ul largueñtez bennak » (1).

Montroulez : 20 a viz Du 1730 : emañ o vont da Sant-Brieg.

Sant-Brieg : 13 Kerzu, 1730 : o klask rakprenerien d'e C'heriadur an hini emañ. Dav ober er stumm-se peogwir e fell d'ar Breujoù ma vefe graet evel-se. Ar re-mañ a vot I 200 Lur da sikour moulañ al labour.

Roazhon 19 a viz Eost 1731. El lizher-mañ e ro an Tad doareoù diwar-benn ar moulañ. Ne venn ar mouler moulañ nemet 7 pe 800, pa oa dleet dezhañ tennañ 2 000 (pe 1 500 ?) rak a bep tu e c'houlenner ar GERIADUR : Avignon, Londrez, Amsterdam. Hag hervez testeni ar mouler e-unan e oa prometet « plasañ » dibaoñ-kaer ur milier e skouerennoù, e Pariz.

Roazhon, 31 a viz Kerzu 1732 : echu eo moulañ ar GERIADUR abaoe 3 sizhun, emezañ. Kalz a fazioù... (kompren moarvat, kalz a viciù-koukoug I)... Ha bremañ, emezañ, e c'houlenner diganin sevel ur « C'hrammel » (Yezhadur) in-8° : (1).

A-barzh ar fin ez eo diaes gouzout pet skouerenn a oa bet tennet. Kalz a fazioù a oa en e C'heriadur ? Benjamin Jollivet, pa'z adembannas labour Gregor, e Gwengamp, e 1834, a gavas tremen 40 000 !!!?

An hini a fell dezhañ studiañ pizh roudoù an Tad Gregor a ranko darc'hel kont eus al lec'hioù meneget el lizheroù a-us, dreist-holl MONTRouLEZ. Er bloaz 1730 ado o vevañ e kouent Montroulez. Ma'z eus chomet dielloù, papiroù kozh eus ar gouent-se un tu bennak, e vefe tu marteze da glevout tra pe dra hag a

sikourfe dizoleiñ sekred buhez an Tad Gregor...

•
•

Ur ger bennak da glozañ diwar-benn embannadurioù an Tad Gregor.

Goude e C'heriadur bras ec'h embannas ur Yezhadur e Roazhon, er bloaz 1738.

An daou labour-se a voe adembannet gant Benjamin Jollivet, mouler e Gwengamp, e 1834 evit pezh a sell ar GERIADUR, e div levrenn, met kalz bihanoc'h eget levr bras ha kaer Gregor. Ar « C'hrammel » a voe adembannet gant B. Jollivet atav, e Gwengamp, e 1833. Hogen bez'ez eus ur moulañ eus ar Yezhadur-mañ ha na seblant ket bezañ anavezet, anezhañ ul levr hag a zle bezañ eus an dibaotañ, pa ne weler meneg ebet anezhañ nep lec'h ebet. Un adembannadur bet graet, e Brest, e ti « Allain Le Fournier », Libraire, Rue de la République, N° 49 - III^e année de la République.

•
•

Mervel a eure an Tad Gregor e kouent Rosgo, er bloaz 1750, hervez mirour dielloù an Tadoù Kabusuned, e Pariz (Lizher eus an 30 a viz Here 1977).

Bez'ez eus traoù avat, hag a seblant kollet diremed, siwazh I Dornskridoù an Tad. Nag e Pariz, nag e Roma (rann an Tadoù Kabusuned a Vreizh), n'eus manet roud ebet anezho. Un taol-chañs eta e vefe o dizoleiñ, da vihanañ mar ne dint ket bet distrujet...

Daoust ma'z eo set war-raok ar brezhoneg ha ma'z eus traoù kozh e Geriadur Gregor a Rostren, ez eo hep mar ebet, un test hep e bar eus ar yezh e deroù an XVIII-^e kantved. Ul labour graet gant onestig, gant koustiahs ha gant kerantez.

15

(2).

NOTENNOU

- (1) Ar gerioù-se a oa e galleg e raskrid ar Geriadur, met o adskrivet hon eus evel m'int bet troet er Geriadur e-unan !
 - (2) Evit ma c'hellfe marteze hor pennadskrid servijout d'un enklasker bennak, setu amañ roll ar c'helaouennoù da studiañ. E darn avat, n'eus netra koulz lava rout.
- Kerdanet, Notices chronologiques (Brest 1818), paj. 243-254.*

La Villemarqué, Essai sur l'Histoire de la Langue Bretonne. Introduction au dictionnaire Français-Breton de Le Gonidec, St-Brieg, 1847.

Revue Historique de l'Ouest (Gwened 1895, paj. 1 - 15).

Annales de Bretagne : tome XXXII (1919), paj. 488.

Kerviler, Bio-bibliographie bretonne t. XVII, paj. 154-155, mouladur 1907.

Le Vot, Bibliographie bretonne, t. II paj. 780 - 781.

**an emgann etre
AR RE yaouank hag AR «BED MODERN»**

saotr pep tra. Lavarout a raent din pebezh dispiz o doa evit ar bolitikerien ; hag e oant douget d'ar re o deus kredennoù start (evel Testoù Jehovah hag ar Komunisted !!!).

Lavare em eus kement-se d'an Aotrou 'n Eskob, hag a zo, a-berzh Jezuz, e-karg anezho... «N'anavezan ket ar re yaouank...» emezañ. Setu aze petra a c'hoarvez en hon re vras : an Tad n'anavez ket e vugale !!!

Penaos e lakaio neuze ar skolioù kristen, an deputeed kristen, d'ober o dever e-ke 'nver ar re yaouank ? Penaos e savo e vouezh a-du ganto, dirak ar gouarnamant hag e gargidi ? Ne vo graet netra eta, nemet lezel ar re yaouank, ar re daerañ anezho, ar re a c'hellfe krouñ ur Vreizh yac'h ha kristen, —lezel ar re-se en dizesper, da foeltriñ ar bed fall, ha foeltriñ Bro-C'hall da gentañ ? Un anv a lavarfen a-walc'h amañ, anv unan eus re wellañ e-touez Breizhiz yaouank, hag en deus kavet ar marv war dachenn an dizesper, pa ne oa den ebet da zigeriñ dirazañ hent an esperañs. Kement «ki mut» a zo e Breizh a zo kiriek d'e varv... Soñjli pe trouz a vije bet klevet ma vije bet bev an Aotrou Trehioù !! Gwir eo, ma vije bet bev, ne vije ket bet hon re yaouank emzivadec...

Hogen c'hoazh ur wech, gant ar re yaouank ez ay an trec'h. Ar re gozh, ne vern pegen uhel o c'harg, daoust m'emañ an arme, an arc'hant, ar galloud, ar c'helaouennoù hag all, etre o daouarn, a zo sur da goll, dre ma'z int kozh hag a c'hiz kozh. Skubet e vint diwar-hent gant an Ankoù.

Meur a wech ez eus bet c'hoarvezet kement-se a-hed an Istor. Hag ar fromusañ, evidomp kristenien, eo lenn penaos e teuas un nebeudig re yaouank a-benn da ziskar an Impalaerded roman, mestr bras ar bed... Adalek an deiz ma teu ar re yaouank da vezah heug ouzh an doare bevañ, soñjal, ha doare-doujah a vez o ren, ez eo barnet ar bed-se d'ar marv.

E-pad meur a gantved, en doa Impalaerien Roma bourrevet ha lazhet kristenien ; ha setu un deiz e voe gonezet d'ar Feiz kristen darn eus ar re yaouank ; gonezet, da heul yaouankiz ar bobl, darn eus dimezelled an noblahs. Merc'hedigoù lorc'hus, desavet fall, dizouj, dispont, leun a fae war ar baganiezh hag ar baganed, an aotronez e-karg hag ar gouarnamant pagan. Santez Barba a oa unan anezho, hag a zo anavezet mat, daoust da vojenn ar c'hurun o kouezhañ war he zad goude m'en doa lazhet e verc'h «dizenor ar familh». Santez Eulalia a oa unan all. Merzherenti homañ a zo bet lakaet e-gwerz (e latin) gant un alvokad a Vro-Spagn, Prudentius e anv. Tamall a reer da homañ bezah *ijinet* prezegennoù hir ha rok graet gant ar verzerien dirak o barnier ; ha me va-unan am eus bet kredet kement-se. Ne gredan ken, abaoe ma'z on bet o testenianh a-du gant an aotrou Breton dirak «Lez Surentez ar Stad», e Pariz. Gwelet ha klevet em eus eno re yaouank o komz ouzh ar varnerien gwisket e ruz, herminiget ar medalennet. A bep eil e teus ar re yaouank ; ha biskoazh neblec'h n'em eus klevet teurel war zen ebet kement a zispiz hag a zismegahs evel war ar varnerien ! Komz a rae dispont an testoù yaouank-se, daoust da fuzuilhoù ar Gwarded-Republican, (ken yaouank hag i, hag a gleve a-hed an deiz, kunujennañ o ofiserien uhel !!) bannet ouzh o c'hein, evel ma oant bet ouzh va hini.

Ur gevredigezh ken kasaet ha disme-gañset gant he re yaouank a zo echu dezhi...

Setu eta penaos e kont Prudentius barnedigezh ha merzherenti Santez Eulalia, ur verc'hig yaouank-tre, peganed a renk uhel he zad hag he mamm, hag he holl gerentiezh.

P. BOURDELLEZ 17

Merzherenti Santez Eulalia

Antronz, lorc'h enni, e teu dirak al Lezvarn, ha sonn en he sav etre 'n *drammaù-bizhier* !! e skrij : «Lavarit din dre bebez araj e roit taol ar marv d'ar re vev ? ha diskar dindan reier noazh kalonoù prest d'en em ginnig ? ha nac'h Tad an holl grouadurien ? Emaoc'h, c'hwi bagad tud fall, war-lerc'h ar Gristenien ? Setu me amañ : enebouez 'on d'an diaouled ; ar fals-skeudennoù a voustran 'dan va zreid ! A galon hag a c'henoù Doue 'n hini 'veulan ! Izir, Apollo, Gwener, n'int netra ! *Maksimiane-unan, netra !* (2) Int-i n'int netra, pe'z int graet gant dom-den ; nag eñ, peogwir ez ador oberoù dom an den ! Avel an eil hag egile ! an eil hag egile, netra !

Maksimian, aotrou war gement a vadoù, (ha koulskoude devot da vein !) n'en deus nemet gwerzhañ ha gouestlah d'an doueed, e benn e-unan ! Perak e sko war galonoù dispont ? O Priñs madelazhus ! o barnier dreist-par ! D'n em vagon gant gwad dizrouk, O c'headal korfoù devot da dagañ, O tispeann intrailhoù gwerc'h, hag evit e blijadur, o verzerienh 'r Feiz !

Bec'h dezhi 'ta, bourrev, dev ha troc'h ! dispenn va izili da deurel 'meak ar fank ! Aes eo luzhañ ur c'horrig dinerzh... Met em c'hreiz, ha daoust d'ar baon, ne vo ket tizhet va ane !a.

O klevout kement-se 'fuloras ar *Praetor* (3) : «Raktal, emezah, Liktor (4) e kasi homañ da vourreviah, ma santo ez eo gwirion doueed hon Tadoù, ha n'eo ket un c'hoari galloud an Impalaer !... Nag e karfen 'velkent, arack da luzhañ, mar gelien, da zistrañ, merc'hig gouez, diouzh da fallagriez. Sell pebezh levenez e aosties, pebezh enor e va dit da eured ! Da diegezh, faezhet gant ar glac'har, e zo ouzhi da glesk ; ha noblahs da gerentiezh e hirvoud gant an ankrez o welout e varvez e bleñ da yaouankiz e-tal da argouroù ha da wle-sured !

Pe 'vi, gant ar c'hiezo, dibennet ! pe gant loened kriz diframmet da izili ; pe, krignet gant goulaouennoù mogedek,

- e-kreiz gouelvan ha gamadeg da dud -
a bruzhun ha ludu e kouezhi !

Na petra d'ober evit mirout a gement-se ?
astenn da viz, kemer un tammig holen
hag un nebeudig ezañs...
Mar teurvez, merc'hig, a galon vat hen ober,
er boan skrijus a ballao diouzhit !»

Ne rannas ar verzherez grik ! - Hogen
hurusañ... hag ouzh daoulagad an tirant
e skopas ! hag ar fals-skeudennoù
a ziskaras, hag ouzh ar bleud sakr (5)
lakaet er pod-ezañs, e taolas taolioù-treid !

Hep dale, daou vourrev
a zispenn he feultrin gwak ;
ha daou gostez ar werc'hez, gant kribinoù
a zo krignet ha troc'het bet 'an askom,
e-pad ma kont-hi he goulioù.
«Skrivet e viot bremañ warnon-me, Aotrou
Pebez plijour lenn ar skritur-se
a verk ho Trec'h, o Krist !
Hag ar gwad ruz a ver diouzhin
ivez a lever hoc'h anv sakr !».

Hep na daeroù na klemmedenn
e kane, laouen ha dispont.
Ar boan griz ne dizh ket hec'h ene ;
hec'h izili, livet gant gwad fresk,
a walc'h o c'hroc'hen evel en ur feunteun glouar.

N'eo ket echu ar bourreviañ :
na gant goulioù ar c'hribinôù,
na gant irvi ar c'hostezennoù aet bet 'an askom...
rak flamm ar gouloouennoù
a zivrol ouzh he c'hostezioù hag he c'hof.
Ar flamm a stlak, hag a nij d'he dram, !

loeiza

«Me 'zo souezhet ganit», eme va
mignon Jorj, «perak eo dit ober goap
evel-se ouzh da berson ? Propoc'h e vefe
dit bezañ laouen o welout anezhân o kanañ
kantikoù brezhonek».

Ataoe 'zo, va c'heneil Jorj a oa
dichañset dezhañ en em gavout du-mañ, e
Keris, asambles gant ar person, met n'eo

hag a lonk he fennad-blev,
a bak he fenn, hag a sav dreist...
Ar werc'hez, evit ma teuy primoc'h ar marv,
digor he beg, a zebr hag a ev an tantad.

Setu ur goulm o tiflukañ
eus genoù ar verzherez, gwennoc'h eget an erc'h,
a seblant mont diouti, pignat betek ar stered :
c'hwezhenn-buhez Eulalia e oa,
ken gwenn ha laezh, lijer, dinoaz.
Stouñ 'ra he gouzoug pa'z a kuit an ene,
hag e varv an tantad-tan.
Ar peoc'h a ziskenn war ar c'horf divuhez ;
an ene, en oabl, a drec'h 'kreiz al levenez
hag a bign evel un evn da Dempi ar Baradoz.

Ar mevel e-unan a wel anat an evn
o nijal eus genoù ar werc'hig ;
hag eh, spontet ha spouronet,
a red kuit ac'hano o tilez' e labour !
Al Liktor kerkoulz all a dec'h kuit gant ar spont...

Ha setu ar goañv yen-skorn
o verniañ erc'h war dachenn al Leur-Gêr,
kuzhet gantañ izili Eulalia
lodet dindan ar yenijenn
evel dindan ul linsel-lin.

PER BOURDELLEZ

Notennoù

- (1) douget gant paotred ar polis.
- (2) an Impalaer.
- (3) ar barnar
- (4) ar poliser
- (5) ezañs bruzonet moarvat

ket eus ar vro ha diaes e oa dezhañ
kompren... Ya, diaes e oa dezhañ kompren
ne oan ket doujusoc'h e-keñver an aotrou
beleg Paol an Argoad e oan kamarad
gantañ sbaoc ma oa kloareg ha me skolaer
yaouank.

An deizioù a-raok e oa bet interament
Loeiza. Person kozh Keris, an aotrou
Digerc'her, a oa deut diouzh Sant-Brieg da
ganañ an oferenn, ur beleg all, bet hor
c'hure, a vinnigas ar c'horf hag a zibunas
an diwezhañ pedennoù, ha Paol an Argoad

en doa graet war-dro ar c'han hag an
armonium. Ha setu ma oa troet en e benn,
e fin al lidoù, kanañ ar c'hantik kaer «Evit
bevañ gant levenez». E Keris, evel 'ouzoc'h,
n'heller ken nemeur ober gant ar brezhoneg
en iliz, gant a danv-tanv ez eo deut da
vezañ niver an dud a gompren c'hoazh un
disterañ ar yezh kozh. A-raok kregiñ da
ganañ en doa troet komzoù ar c'hantik, ha
p'en doa diskouezet mat n'en doa ezhomm
an nen «nag acour na perlez» evit ren ur
vuhez evurus, ha degaset soñj eus Loeiza,
ken paour —stad a vefe enni e lein ar
neñv— eñ da ganañ eta e brezhoneg en iliz
Keris, pezh na oa ket bet graet pell-pell 'zo,
evit un interament, da vihanañ. Peseurt
enor da Loeiza gozh ! Komzet e voe eus se,
evel-just, en holl diez ar barrouz.

Nann, va c'heneil Jorj n'helle ket
kompren... N'en doa ket anavezet Loeiza.

Homañ he doa dalc'het gwechall
un tammig kenwerzh danvez lien ha kotoñs
er bourk, met dilezet he doa abred he stal
evit dont da chom gant he zad hag he
c'hoar Mari, diberc'henn evelti, en Hent-
Trez, ur geriadennig nepell eus traoñ
bourk Keris. Ar paotr-kozh, lesanvet
«Toucher chas», en doa tremenet e vuhez
oc'h ober war-dro kement ki chase a oa bet
er c'hastell e-pad un hanter kantved, ha me
'lar deoc'h n'eo ket se a vanke eno a-raok
ar brezel. Er c'hastell ivez e oa bet Mari
keginerez, ur flipad amzer, met pa oa
marvet an tron gozh, e oa chomet er gêr ha
mont a rae a di da di da sozañ predoù
badeziant, pask-kentañ pe aured ; hi,
lakada, he doa gwelset penaos e veze graet
e ti an noblañsoù ! Goulennet e veze ivez
evit ar wastell er menajoù bras.

M'he doa dilezet Loeiza ken prim he
micher marc'hadourez, e oa dre ma n'helle
ken he zad, gant a zivalav e oa deut da
vezañ, ober war-dro e «voutik» pe e bennti,
mar deo gwelloc'h ganeoc'h, div vuoc'h,
un tammig douar, ul liorz, ar yer hag al
lapined. Ret e veze dezhi ivez sozañ boued
d'he zad, pa veze Mari o labourat e tu
bennak. Ne oa ket, avat, ur plac'h da
ziboutrennañ, da goañh ha da lakaat urzh,
ha Mari a veze ret mat dezhi kavout amzer
da ober war-dro an ti. Hemañ, e gwirionez,
ne oa ket bras, un tammig ti a-wechall, izel
ha teñval, un nor hag ur prenest dezhañ,
un oaled ledan, ul leur zouar mac'het, met

un arridennad arbebeuri kaer pe gaeroc'h,
koaret ken mat ma veze sklerijennet an ti
gante. Bez' e oa aze tri gwele-kloz toull
bras, ur ganastell hag he listrier, daou bres
meurdezus (unan anezhe a zeue diouzh ar
c'hastell, a-hervez), hag un horolaj a vent
gant an armelioù, a oa diaes kavout
bravoc'h egetañ e Keris.

Mervel a reas ar paotr-kozh goude
bezañ bet pell war e wele.

Mari a zalc'has e-pad hir vloavezhioù
da vont da geusteurenniñ er bourk ha war
ar maez, met dont a reas ar paour-kaezh
plac'h da vezañ lart-toaz, poan dezhi
kerzhout. Kaset ha kerç'het e veze neuze
gant gweturioù, betek an deiz ma chomas
setzet.

Menel a reas Loeiza hec'h unan gant
he saout. He labour er-maez a veze graet
mat ganti, met en diabarzh, avat, ne oa ket
kont memes tra... Lavaret a vefe bet e oa
deut an dour da vezañ ker, hag an
torchoeroù hag ar skubellinier 'ta !
foeltr urzh ebet ken, gwelet e veze ar grib
stok ouzh an dorzh-vara, ha me 'lar deoc'h,
e veze ret bezañ dirankon evit mont da
evañ kafe e gwer pe dasoù Loeiza !
Seurt-se, eme Yann ! Ul lousken gozh e oa
deut Loeiza da vezañ.

Meur a vloaz 'zo he doa gwerzhzet he
div vuoc'h ha pañsion ar re gozh a gouezhe
en he godell ha meur a dra all ouzhpenn,
tikedoù kig, koad ha glaou diouzh an ti-kêr,
ha me oar... Loeiza a oa bet lakaet kuit da
dermal e-touez ar re baourañ, ha marse ne
veze ankouezet pa veze keloù da ginnig ur
banerad barnak d'ar re gozh. E tu-hont da
se, chomet e oa yac'h, ha mont a rae da
sikour ul liorzhour deut da c'hounit douar
nepell eus he zi, ha n'eo ket legumaj a rae
diouer dezhi.

Koshaat a rae evelkent. Aet e oa war
he c'hwec'h vloaz ha pevar-ugant, ha
seul-vui ma kreske pouez an oad, reuzeudi-
koc'h-a-se e seblante bezañ he stad gant a
houstet fall ha lous e veze. He gwelout a rin
pell c'hoazh, en he zrad he heuzoù
kaoutchoug re vras, bet roet dezhi,
emichañs, gant al liorzhour. Ne veze un
tammig dereatoc'h nemet pa'z se d'an
oferenn-bred, pezh a rae bep oad. Rak devot
e oa sañset, giz gwechall, ha doujus
e-keñver ar velen. An aotrou Digerc'her a
oa bet mat evit, na vefe nemet abalamour
d'ar gweladennoù a rae dezhi bep gwech
ma tremene an Hent-Trez. Plijout a rae
dezhi chikanañ gantañ. «Emaoc'h adarre,

Aotrou Person !», emezi. Hag un devezh, goude bezañ tapet he fevar-ugent vloaz, e lavaras dezhañ : «*Me, pichoñs, n'em eus kar tost ebet... Evit bezañ sur e vo graet an traoù evel 'zo dleet pa vin marv, ez an da baeañ deoc'h va obidoù war o hed ; lavarit din ar pezh am eus da reiñ deoc'h*».

Ha peogwir e felle dezhi, ar person da gontañ en tu-hont d'an interamant, eizhved an anaon, an ofernenn deiz-ha-bloaz, an oferinier hag ar servijoù all. Evel m'en defe lavaret gwechall an n'onn peseurt... un amezeg eus tu-mañ, paeañ a reas dezhañ kitez kement mallouzhtouen pedenn a oa tout.

An deiz-se end-eeun e lavaras ar beleg dezhi :

«*M'eus aon e virit re arc'hant en ho talc'h, Loeiza, deut ganin d'ar post evit digeriñ ur c'harnedig «Caisse d'Épargne»*».

Goude bezañ daoubennet ganti ur pennad mat, e teuas a-benn da gas anezhi gantañ evit lakaat dindan hec'h anv ur yaic'had vat, feiz, ar pezh a soñje dezhañ ivez he doa a-gostez, lakada.

Glac'har he doa bet an hini gozh o welout he ferson o kuitaat Keris evit ur garg all e Sant-Brieg.

«*Ba ! ba ! Loeiza, me 'zeuio c'hoazh da derrañ ho penn deoc'h, eus a rin*».

Ha dont a rae en ur zegas ur prof bennak dezhi. E gwirionez, abaoe ma oa deut Loeiza truezus da welout, e tegouezhe dezhi kaout meur ha meur a brof, kalz a dud o doa kemeret skouer war ar beleg ; dont a rae kendirvi dezhi, re hanter dost, met ivez re all kar dezhi hepken dre vorzhed re mamm-you gozh, amezeien ha Kerisiz a bep seurt. Darn o doa bremañ o devezh merket er sizhun, evit dont gant un tamm panerad betek ti bihan an Hent-Treuz. Degaset e veze da Loeiza, kafe, sukr, chikore, boestadoù gwestell, pakadoù makaroni, gwin, ha me 'oar... Ma ivez 'vat, tud vadelezhus a zo evelkent e Keris, tud vadelezhus a zo evelkent e Keris, emezoc'h... Ya, a drugarez Doue, bez'ez eus seurt kristenien, se 'zo sklaer, evel e lec'h all, met, selaoùit 'ta, ne oant ket holl ken kalon vat-se... Dedennet e oant kalz anezhe davet ar paour-kaezh penti evel gant ur pikol maen touch : ar vrud he doa Loeiza da zerc'hal kuzh traoù kaer ha pep hini a soñje e vefent kerkoulz gantañ ha gant unan all... Pa vez lakaet ur garotezenn dirak fri un azen, lakada... Ha Loeiza, ar plac'h fin, an drutell gozh kentoc'h, a ouie hejañ ar garotezenn :

«*Va horolaj a vo dit, merc'hig...*».

Diaes eo gouzout da bet ha pet e tistage Loeiza an hevelep komzoù. D'ur gwir vignon bennak he doa silet gant ur minc'hoarzh goapaus :

«*Al lopagned-mañ a zeu holl da glask skrapañ va zammou traoù diganin*».

Ar c'hlukennoù a soñje an eil hag eben :

«*Ar c'hozh kaouenn-mañ a zo erru evelkent ampustu ha ret e vo dezhi unan eus an deizioù plegañ da vont da di ar re gozh. Evel ma n'hell ket neuze derc'hel da baeañ he gourmikael, e vo feurmet he loch da unan bennak all ha dav e vo dezhi en em zizober eus he feadra*».

Ya, klev, met Loeiza n'houle evit priz ebet klevout komz eus ar falanksti trist-se.

«*Dèz ! petra ez in me d'ober e-barzh an toull brein-se gant kozh foererien ? Eno, adalek ma vez klañv an nen war e wele, e vez kaset kerkent d'an ospital da Bondi ; amañ e vo graet memes tra din, kerkoulz eo din neuze chom em c'hredañs da c'hortoz... Doue ra viro !*».

Nag an aotrou Digerc'her, nag ar person nevez, Paol an Argoad, den ne oa deut a-benn da gas anezhi d'ar bourk gant ar re gozh all, chom a rae stag-peg ouzh hec'h annez evel ur vrennigenn war ur garreg. Evit lavarout eeun ar wirionez, barrek e oa bepred da vont d'ar bourk d'an ofernenn-bred ha da bleal gant he zammou kefredioù, ne oa kabac'h en he c'herzhed na fall en he gweled.

Siwazh, bremañ ez eus un nebeut deizioù ez eo bet dav dezhi chom 'n he gwele gant un tamm brav a derzhienn. Un amezeg he deus galvet ar medisin ha fellout a rae da hemañ kas ar glañvourez d'an ospital.

Hopala, se ne voe ket eus grad Loeiza ! «*Mardouen, me, pichoñs, a chomo amañ, eus a rin, ha hastit buan ober war va zro ha tevel gant ho komzoù kleuz*».

«*Neuze, Loeiza, en an' Doue, chomit tranquil da ober grallig en ho kwele, ha difenn groñs a ran deoc'h mont da zastornat er-maez*».

«*Hag a rin*».

Hogen pan eo aet ar saverien-o-fri diwar he zro, he deus soñjet Loeiza baour en he yer hag he lapined, hag hi, fidambie, da lakaat war-benn he hiviz, he c'horfenn hag he c'hotilhon ha da vont da voueta he loened. Allas ! Allas ! kouezhet eo 'n he gourvez e klud ar yer ha torret he brec'h ganti. Hi, er bord all... Pegeit eo chomet ar paour-kaezh kozh evel-se ?

An taol-mañ, avat, e oa gwashoc'h eget fall-daonet he stad ha ret-mat kas anezhi da Bondi ! Rebarbiñ hag enebñ a reas Loeiza gwashañ m'hellias gant garm ha blej ha dav e voe dougen anezhi betek ar c'harr-ambulañs.

He c'henderv Per Robin a yeas adalek an deiz war-lerc'h, da welout penaos e oa kont ganti. E Keris, evit lavarout eeun ar wirionez, ne seller ket berr evit mont da weladenniñ ar re glañv da ospital Pondi. Loeiza a yae madik a-walc'h, daoust ma oa skuizh, ôg kentoc'h o vezañ bet palvataet war he nav zu, gwalc'het ha naetaet. Met un dra all gwashoc'h c'hoazh a oa c'hoarvezet ganti : kaset e oa bet he dilhad da gannañ ha kollet hec'h alc'houez. Spontus e oa nec'het hag hi da c'hourc'henn da Ber :

«*Distro buan da Geris ha kae war eeun da di an amunuzer, degas anezhañ ganit da lakaat ur grogenn nevez war va dor, ha na chomez ket da rusañ da votoù e kêr*».

Met re a gerse a oa gant Loeiza, ken nec'het e oa, ken ne oa ket retornet mat Per war e giz d'ar gêr ma oa marvet trumm e genitervez.

Obidoù kaer a zo bet graet eta d'an hini gozh...

An deiz war-lerc'h ez eas ar maer hag an noter da zigeriñ dor Loeiza... E traoñ an daol-noz, izeloc'h eget ar pod-kambur, e oa pevar milion !... E forn ar fornigell, bet kinniget d'ar «baourez» gant ar gumun — biskoazh n'he doa c'hwezhet an tan enni — e oa ur guzhiadell all : pemp milion !... Ya, pemp. Kavout a rejont ivez tri-ugent boestad sukr, kement all a bakadoù kafe, gwestell ha kement ispisiri a zo tout, boutailhadoù gwin a bep seurt, champagn 'zo kaeroc'h, dindan ar gweleoù...

Me 'm eus c'hoarzh kement, ken em

eus skrivet war an tomm, ha koulskoude tud 'zo a soñj dezhe n'eo ket echu d'ar c'havadennoù. Mari he doa bet diouzh ar c'hastell, hervez 'glevan, ur voestad vat a lozioù hag a bep seurt en arc'hant, peadra da lakaat evit ur pred eured, ha «Toucher chas», ken kras e revr hag ur billig, a oa, diouzh klevout ur mignon kozh, ur c'hlenker-aour... Met n'houllan ket gortoz, betegouzout ez afec'h da damall din bezañ ur c'hozh poufer a Dregeriad, o tennañ flugez d'e lennerien...

N'eus testamant ebet. Un afer vat evit ar gouarnamant ! Ar gendirvi a vano ur bempvedenn bennak gante da lodennañ.

«*Evit bevañ gant levezeg*»... Kompren a rit bremañ perak em eus goapaet un tammig va mignon Paol an Argoad, p'eo deut betek du-mañ.

Siwazh, n'eo ket el levezeg he deus bevet Loeiza he momedoù diwezhañ, met en enkreze, poazhet gant ar vezh, o soñjal e oad o vont da zizoleiñ he zeñzorioù ha, c'hwitet eo buan he c'halon. Peoc'h d'an anaon !

Ernest AR BARZHIG
Dibenn Here 1977

UL LIZHER 30 A VIZ HERE 1977

... Gourc'hennenoù a gasan deoc'h evit BARR-HEOL a vez atav ken plijus, ken bourrus da lenn penn-da-benn...

N'eo ket evit se e skrivan deoc'h dreist-holl. Evit un dra all (an hini eo). Klevet hoc'h eus komz eus ar gazetenn YOD-KERC'H ha gwelet marteze un niverenn bennak anezhi. Me am eus un tañva anezhi gant niverennoù bet degaset d'ar gêr gant ar vugale. Ur vezh eo embann seurt traoù ken hudur. Ar brezhoneg n'eo aze nemet un digarez da silañ an hudurniezh e spered ar re yaouank. Rak ar re yaouank eo a gouarnamant d'ar gazetenn lous-se : e brezhoneg eo ? neuze eo mat, a soñj an darvuiañ anezho. Dre chahs ne gomz eus se nag Al Liamm, na Barr-Heol Arabat hen ober evel just !

Gwashoc'h a zo c'hoazh ! 6 miz binnek 'zo ez eus bet er gazetenn-se ur pennad ne oa ket sinet e-lec'h ma oa anv eus Mon, Barr-Heol, ar sektannoù e bep doare, Krisma hag all, ur meskaj spontus ; ar menzioù hag ar mennadoù a oa dizoue, digristen hag enep-kristen. Goulenn a rae ar

skrivacher ma vije diskaret ar c'hroaziou a-hed an hentou, e Breizh, an ilizoù zoken ha kement tra a zo merk ar gristeniezh warnañ.

Hag an holl labour distruj-se a zoug frouezh e-touez hor yaouankiz. Ral a wech eo ma vez kavet un yaouank eus an Emsav a ya d'an oferenn. Ar re boas da vont gwechall ne dsont ket ken...

RESPONT BARR-HEOL

Bet en deus hor c'henskriver ar vadelezh da zegas deomp ur fotokopi eus ar pennad abebet aantañ...

Re a enor e vefe ober da YodKerc'h o reiñ ur respont bennak da gomzoù direvret evel-se ! Mar ne deo ket gouest ar re yaouank d'en em vestroniañ o-unan ha da reiñ un taol-skub e-lec'h ma'z eus ezhomm, ne dint nemet leueoù ha kaer he defe **BarrHeol** klask lakaat an traoù war o rez, koll e amzer ne rafe ken. An hini a zo sot hag a oar a zisota, pa gar. Oberour dianav ar pennad lakaet da dalbenn dezhañ «**Barr-Heol war Moon, Feiz ha Breizh**» ne oar ket sur-mat petra ez eo e-unan, na petra a lavar.

KLERG

VIVIANA

kontadenn nedeleg

E kreiz-Lia, war zouar parrez Tonke-deg, e oa un toulladig tud o furchal hag o toullañ an douar : kavet e oa bet gant ur meser bihan ur podad pezhioù-moneiz kozh hag a lavare an dud ouiziek e oant eus amzer ar Romaned. Deuet e oa eta ur strollad tud yaouank, studierien dindan renerezh ur arkeologour bennak d'ober furchadegoù. Tammou podoù-pri torret o devoa kavet dija nemet un tamm ludu ne oa ken enno :

— *Oc'holla, eme Bêr, un dra bennak a zo amañ.*

Ha gant beg ar balig-dorn a oa gantañ, e stagas da zispegañ gant kalz a evezh an douar a oa peg ouzh ur seurt moudenn-bri. Ur pod en e bezh an hini 'oa. E holl gompagnuned a savas o fenn hag a dostaas. Diwar-bouez raskañ ha diraskañ goustadik-goustadik, e paras ar pod dirak o daoulagad. Ur pod eus ar finañ e oa, klozet-mat gant ur seurt simant kalet ha fin-meurbet ivez. Me 'lavar deoc'h, eno e oa ranellerezh, ken e vervent gant ar c'hoant da c'houzout petra a c'halle bezañ er besel-se. Mil son o devoa avat da derrañ ur seurt pod hag a

ziskoueze bezañ un dra dibaot-tre ha kevrinus. Marteze avat, ne oa ennañ nemet eskern, evel ma oa bet kavet dija er sitread-se, eskern hag a gouezhe e ludu kerken ha ma veze stoket outo. Ya, met stumm ar pod a ziskoueze a-walc'h ne oa ket eus an amzerioù koshañ ; anat e oa, e oa eus diwar-dro ar pevare pe pempvet kantved. Daoubennet e choment holl kas digeriñ ar pod hep hen terrañ. Met ne servije ket, dav e oa tennañ ar golo kuit, en ur derrañ un dra bennak.

N'eo ket eskern an hini 'oa er pod : ur gavadenn souezhus, dic'hortoz, hag a oa galvet da lakaat empenn ar ouizieien da labourat ; ur gavadenn eta hag a daolfe sklerijenn war an amzerioù teñval ma kej istor an Arvorig hag Istor Breizh : ur skrid paket ervat gant danvez eus ar finañ, met goloet-holl gant un indu heñvel a-walc'h ouzh parafin, met parafin ne oa ket, rak ne oa ket anavezet en amzer-se. Eoul ne oa ket kennebeut, rak en em silet e vije an eoul a-dreuz an danvez betek ar paper, ha kollet e vije bet ar paper, ha dislivet ar skritur a oa warnañ. Rak ur skrid hir-hir e oa, ha skrivet gant lizherennoù munut, ur skrid azot e latin hag a vije ezhomm ispisialourien evit hen lenn hag hen treñ e brezhonag. Da c'hras Doue ar seurt jubennourien a vez kavet en deiz a hiziv.

Ur soñj kaer en devoa bet ar skrivagner, rak evel ur gartennig-douaroniezh en devoa treset da heul e skrid, ha daoust ma oa disheñvel, evel just, an anvioù diouzh ar pezh m'emaint en deiz a hiziv, e oa aes evelkent heuliañ an traoù a oa skrivet war ar paper. Setu amañ eta, berr-ha-berr un toullad arroudadoù da c'hortoz embann ar skrid war e hed. An anvioù a lakomp evel m'emaint en deiz a hiziv.

•
•

... Brav e oa an amzer en deiz-se, fresk ar glazur nevez er pradeier hag e kane ar goukoug ar son bet desket dezhi ken mat er penn kentañ eus ar bed ma n'he deus biskoazh desket hini all abaoe : «*Koukou ! Koukou !*» Joa ha levenez a bare e sitread Sant Izuned (St Iened), rak un eured a oa da vezañ : eured Viviana ha Romanus. Neb a zo bet en Sant Izuned a oar a-walc'h e sav dour e pep lec'h ; roudennet e oa an holl gornad gant kanouç'hellou dalc'het a-ratre ha dre-se n'o devoa tamm poan ebet tud an eured o vont etrezek ar maen plat-se kleuzet un tamm en e greiz hag a vez graet anezhañ en deiz a hiziv : «*Gwele Sant Iened*», dre m'az eo heñvel a-walc'h ouzh ur gwele, ha ma lavare ar re gozh ez eo eno eo e veze ar Sant o kousket...

Joa ha levenez eta a bare dre-holl : en oabl er gwez, en saonennig, er parkeier, er pradeier ha war zremmoù an holl. Dreist-holl war zremm Viviana ha war zremm danvez he fried, Romanus.

Unan eus al lidoù pennañ evit an euredoù a oa pignat war ar gwele hag azezañ warnañ. Dav avat e oa tremen dreist ur wazhig-dour ; met evel ur skabell a oa taolet dreist ar wazh ha ne oa ket diaes sevel war ar gwele, hag azezañ war ar bord anezhañ kichen-ha-kichen. Un dudi gwelout ar c'houblad yaouank liv ar garantez o parañ war o zal... Ur c'hemmesk a oa lid an eurediñ : lidoù deuet da heul ar Romaned, mistri ar vro abaoe meur ha meur a remziad, ha gizioù kozh chomet bev ne ouie den abaoe pet ha pet a gantvedoù.

En em vodet e oa ar baotred hag ar merc'hed yaouank a bep tu d'ar gwele hag e kanent kanenn an Humen (an

Dimeziñ) : *O humen, humenaios ! O Humenaios !*. Ar baotred yaouank eilet gant tonioù skiltr ar fletù a gane hag ar merc'hed yaouank eilet gant ar gitara a responte gant o mouezhioù skanv ha laouen.

Pa voe echu o c'hanadeg ganto, neuze e tostaas d'e dro an den koshañ hag enorusañ eus ar c'hornad hag e lavaras d'an danvez-priedoù un dra bennak evel-hen : «*Fellout a ra deoc'h dere'hel bev lignez ho tiegezhoù. Bezit evel ho tud hag ho tud-kozh, tud a enori; bezit evurus a-hed ho puhez ha lakit er bed kalz a vugale yac'h ! Roit bremañ ho torn dehoù an eil d'egile ha bezit priedoù da viken*». Kerkenet e'h adkrogas ar baotred yaouank hag ar merc'hed yaouank o c'hanouennoù : «*Humen ! Humen ! Humen ! O Humenaios ! O Humenaios !*».

Eizh deiz e padas ar gouelioù. Ha neuze e'h adkrogas Romanus ha Viviana gant o labour.

Tremen a reas an hañv e-kreiz al labourioù ordinal, labour an tiegezh, labour en-dro d'al loened, labour er park, an eost, kuñtuilhaded ar frouezh, en o zouez ar c'hraoù hag ar c'histin, rak prizet-bras e oa an daou rummad-frouezh mañ, dreist-holl ar c'histin.

Tremen a reas ar goañv hag e paras heol an nevez-amzer, hag e voe tro da baotred ha da verc'hed yaouank all da sevel war gwele Sant Iened ha da glevout d'o zro kantik an Humen.

Un deiz bennak ivez, evit seveniñ mennad an den kozh, deiz o eured, e voe ganet ur paotrig bihan e ti Viviana... Levenez he c'halon ha dudi he daoulagad evel ma vez lavaret. Kreskiñ a ras ar poupig evel ar raden, ha krog e oa da argaezel, nemet e oa un tamm bihan diwezhat o vont e-unan. O! ne oa ket re nec'het e vamm, ken rust evel ma oa he bugel, ponner evit e oad, re bonner moarvat.

Un devezh bennak e reas evel ma ras an holl vammoù yaouank pa veze diwezhat o bugale o kerzhet ; mont en-dro betek ar gwele-mañ e-lec'h ma oa bet euredet, hag eno astenn ha faotr bihan war e c'henoù ha skeiñ gant douster war e gein gant ur bod-balan... Ha distreiñ d'ar gêr leun a esperañs. Met daoust d'ar weladenn-se da wele Sant

Iened, ne save ket nerzh d'he bugel, ha ne oa ket barrek hemañ bepred da bouezañ war e dreid, na da vale e-unan. Krog e oa Viviana da vezañ nec'het.

War-dro ar mare-se e oa savet mesk er vro, rak degouezhout e rae tud eus an tu all d'ar mor hag en em ziazezañ el lec'hioù aet didud ; ha n'eo ket plas eo a vanke dezho. Diskenn a raent er pleg-mor hag a zo anavezet en deiz a hiziv evel pleg-mor Lanuon, pe c'hoazh ar Gozh-Yeoded. Sevel a raent gant ar c'hrav 'hed an hent a gase etrezek Karaez, ha neuze e troe darn war an tu-kleiz dre an hent roman a gase d'an Naoned. Hemañ a dreuze un hent roman all a gase eus an Trigorioz (Treger) da Garaez ; o-daou en em gavent e Kersulvez. Stok er c'hroazhent e save ur pezh peulvan a veze gwelet eus a bell hag a dalveze da arouez evit ar veajourien, hag ivez, hervez giz ar re gozh, d'ar merc'hed dimezet da zont d'ober lidoù a-razozh evit kaout nerzh a-walc'h da gaout bugale.

E-touez an estrenien deuet evel-se d'en em ziazezañ er vro, e oa ur familh : familh an Izuneded, enni div blac'h yaouank hag ur paotr yaouank. Ar familh-se a oa eus relijion Jezuz-Krist, tra ma oa meuriad Viviana eus relijion ar vro, mesk-ha-mesk enni gizioù deuet da heul ar Romaned ha gizioù chomet er vro abaoe a-viskoazh. Ewel m'hon eus gwelet gant eured Romanus ha Viviana.

E Kersulvez ec'h en em ziazezas an Izuneded. Tud vat e cant, ha daoust m'o devoa disfiz tud ar vro diouto, e krogas darempredoù hegarat etrezo. Peoc'h a veze etrezo ken na save kaoz war ar Relijion. «Ni, a lavare tud ar vro, a zo savet hervez gizioù hon tud kozh, hag a fell deomp fidel dezho».

E Kersulvez avat, e veze graet lidoù iskis. N'eo ket en-dro d'ar peulvan evel m'hon eus lavaret bremaik, met stok en ti e-lec'h m'edo tiegezh an Izuneded o chom. Peder gwech ar bloaz en em zastume tud ar vro eno, gant deiz kentañ Mae. Uhelvan an heol (Goual Yann bremañ), neuze war dreuzoù ar Goafv (Kala-Goafv) ha neuze da geñver pouezvan ar Goafv, pe izelvan an Heol

(war-dro Nedeleg).

Ne din ket da gontañ deoc'h dre ar munud petra a veze graet, rak ar skrid deuet betek ennomp a gomz berr-ha-berr eus al lidoù-se evel eus traoù anavezet.

E-touez al lidoù-se e veze graet ur pezh tantad : pep hini a zegase e hordenn-geuneud, pe un tamm koad bennak, ha pa veze peurzevet an tantad, an hini koshañ eus ar c'harter a dape un tamm glaou bev c'hoazh, da lakaat en ur pod-pri, hag a ziskenne gantañ gant ur skeul da strad ur gambr volzet evel da guzhat pe da virout an tan-se evel goell e-kreiz an douar da lakaat ar plant da eginañ ha da greskiñ.

N'eus ket ezhomm da lavarout e kave ar paotr yaouank Izuned hag e dud iskis kement-se, daoust ma ne gredent ket mont a-enep d'ur c'hiz ken kozh. Un devezh koulskoude, da goulz uhelvan an heol, e kredas Izuned yaouank ober ur gentel d'an dud ha lakaat anezho da gompren e oa en tu-hont d'an heol a weled gant an daoulagad, un heol all hag a sklerie ar speredoù... Bec'h a savas ha ret e oa bet d'ar paotr yaouank ha d'e dud mont da glask goudor da lec'h all.

E-touez ar re a oa bet test a gement-se en em gawe Viviana, ha daoust ne oa ger ebet eviti da dreñf kein da Relijion he zud, n'eo ket hi a vije aet da dapout mein evel darn eus ar merc'hed all —hep komz eus ar baotred, da vranskailhat gant an estren. Ha neuze poan-spered he devoa bepred gant he faotr bihan, rak kaer a veze ober, bale ne rae ket, daoust ma oa un tamm-mat en tu-hont d'an oad ma kustum ar vugale mont o-unan.

Deuet e oa an diskar-amzer, ha mare ar c'histina. War zigarez mont da gistina, pa oa brav ha tomm an amzer en deiz-se, e tapas Viviana he faotr bihan da vont betek ur c'hoad e-lec'h ma oa sur da gaout kistin eus ar c'haerañ. Ober a rafe ur variennad vat da zont ganti d'ar gêr, ha klenkañ ar re all en ur plas bennak, ha kerc'het e vijent goude gant he gwaz. Ha neuze evit ur gefridi all e oa aet...

Ponner a-walc'h e oa he faotrig a-benn neuze, ha gratis e kavas Viviana pan erruas er c'hoad. Kent stagañ da

zastum kistin, ec'h azezas en ul lec'h heoliet-brav. Hiboud ur stêr a glevet : al Leger, a lavar an dud brenfañ. Hed-hed ar stêr e save gwez-pupli eus ar c'haerañ darn evel o c'hempnd-all a gegeliadoù delioù fin arwenn, darn all ledanoù-h o begennoù. Hep kontañ marelladur ar gwez derv, ar gwez kistin, glazur teñval ar gwern war ribl an dour, hag ar pineier, o wiskifi kostezioù ar saofenn.

Neuze e savas Viviana ha souchañ brav he faotrig en un toull tommheoliet ouzh 'troad ur wezenn-gistin. Pezhioù kistin rous a zastumas e berr-amzer, ha neuze e tapas he bugel. Ha mont gantañ un tamm bihan pelloc'h betek ur pezh roc'hell vras e-lec'h ma oa boaz ar mammoù da zegas o bugale da zeskiñ dezho bale. Ewel ma pa bet desket dezhi, e reas teir dro d'ar roc'hell, ha bep tro e stoke he bugelig ouzh ar roc'hell, pe gentoc'h e lakae bnezhañ da azezañ, rak tailhet e oa bet ar roc'hell evel d'ober ur seurt skabell (Kêr-Riwallan) a vez graet eus lec'h-se bremañ.

Echu e oa ganti al lidoù, rak gallout a ran komz eus lidoù, ken parfet evel ma rae Viviana ar jestroù-se. Neuze e teuas war he c'hiz evit dastum un toullad kistin en he barlenn, ha neuze ec'h adtapas he bugel da vont d'ar gêr.

Ur skeud a welas a dreuz ar gwez. Un estrañjour, sonn war e dachoù, lemm e zaoulagad. Viviana a skoas ur c'hlaouenn en he c'halon, gant ar fourbiet ma oa o welout an estrañjour-se, ha prest e oa da leuskel kri-forzh ar maouezed da c'houlenn sikour. Met ne seblante ket an estrañjour-se bezañ o klask ober poue dezhi. Er c'hontrol.

— Gwelout a ran, maouez, emezañ, ez oc'h deuet amañ da gaout ar Roc'hell, hag un dra vat hoc'h eus graet, rak ur vertuz yac'hus ha nerzhus a zo en traoù naturel-se. Met a-wechoù e ranker gortaz pellik a-walc'h ar vertuz-se d'ober hec'h efed. Mar karit, ez an-me da bareañ ho pugel, rak gwelout a ran ez eo ur bugel eus ar c'haerañ, nemet n'eus ger ebet gantañ da vale.

Selaouet he devoa Viviana ar c'homzoù-se gant evezh, met daoust ma lakaent spi da sevel en he c'breiz e chome bepred en arvar.

— C'hwè, Aotrou, a zo barrek d'ober

d'am bugel kerzhet ?

— Met ya ! sur-mat... Nemet e vo ret deomp skoulmañ marc'had.

— Skoulmañ marc'had ?

— O ! n'ebet a dra. Me a breno ho pugel diganeoc'h.

— Gwerzhañ va bugel, eme Viviana, biken ! Ha prest e oa da redek kuit.

— Gdrtozit eta, maouez ! N'hoc'h eus ket komprenet. Me a roio arc'hant deoc'h hag a lezo ho pugel ganeoc'h, ha c'hoazh, a-benn m'en em gavot er gêr, e vo gouest ho pugel da vale houls ha n'eus forzh peseurt bugel all eus e oad... Un dra hepkeh a zivizint ouzhoc'h : chom hep daremprediñ an estrañjour-se hag a vez graet Izuned anezhañ...

— Mat eo din, eme Viviana.

— Deit amañ ho paotrig din. Hag en ur serr-lagad en devoa tapet ar paotrig, lakaset anezhañ da azezañ war ar roc'hell. Ar bugelig a laoskas ur gridenn hag a zeredas e-unan da gaout e vamm. Homañ a oa darbet dezhi simplif gant ar sebez hag al levenez !

— Dalit c'hoazh, eme an estrañjour, ar pezhioù-apur-mañ. Met dalc'hit soñj, mar skoulmit darempredoù gant an Izuned-se, mar dic'hañs deoc'h mont da heul e gredenn, e' hollot pep tra : an arc'hant am eus roet deoc'h, ha gwashoc'h c'hoazh, ho pugel, forzh peseurt oad en devezo a-benn neuze, a addeio da vezañ evel a-raok. Kenavo. Steuziañ a eure ken tonnus ma n'en devoa ket bet amzer Viviana zoken d'hen trugarekaat, na da c'houlenn diskleria-durioù all.

N'en eus ket ezhomm da lavarout pebezh laouenedigezh a vo e ti Viviana p'en em gavas er gêr.

Tremenet e oa eta ar gwall-hudvro evit Viviana, ha stad a veze enni o welout he mab hemañ ken smpart hag ar vugale all. Ne oa ket nec'het tamm ebet gant ar marc'had he devoa graet. N'anavezet ket an estren-se ha ne ouie ket eus a belec'h e oa en em gavet evel-se e-kichen Roc'hell Geriwallan. N'eus forzh ! Hag evel dre vuzhud e kreske madoù he zigezh. Nann ! ne oa ket prederiet gant divizoù

ar marc'had.

Kreskiñ a rae avat brud Izuned yaouank a zeiz da zeiz koulz lavarout hag e-lec'h skeiñ mein gantañ e oa meur a hini hag a salude anezhañ war an hent hag a oa prest da selaou e gentelioù. Pa veze meulet Izuned dirazi, e rae Viviana ur c'hruz d'he divskoaz hag e taole ur sell faeüs un tamm war ar re e veule Izuned. Gwelloc'h ha barrekoc'h egetañ he devoa hi kavet war he hent. Berzet-mat he devoa he bugale, rak bugale all a oa deut war-lerc'h ar mab henañ da zegas sklerijenn o mousc'hoarzhoù en he ziegezh, ha difennet outo daremprediñ bugale an dud a zaremprede Izuned, dre ma oant eus an hevelep relijion. Met kit 'ta da zerc'hel mat d'ar vugale. Kement ha ken bihan ma oa kouezhet tamm-ha-tamm kement rakvarn ha kement treuzkredenn a c'helle magañ en he c'hreiz s-enep d'an hini a oa lesañvet ar Sant. Ha dre ranellerez e fellas dezhi gwelout ha klevout anezhañ, hi ivaz.

Bez' e oa gizioù pagan hag a oa diaes-bras diwriziennañ, evel herzel ouzh an dud da vont betek ar Gwele-Maen ha difenn outo soubañ krezioù ar vugale e dour ar Feunteun pa veze klañv ar vugale-se da c'houzout ha ren a rajent pe ne rajent ket... Met bez' e oa un dra hag a gave da Izuned e oa ret diskar evit mat : Lidou an Heol e Kersulvez. N'eo ket dre ma oa enep d'an tantadou a veze graet met abalamour d'ar boazioù fall ha dizoue a veze heuliet war zamani an Heol (Sulvez, evel ma ouzhoc'h, a dalvez perc'henniez an Heol)...

(Petra 'oa ? Amañ, siwazh, ne lavar hon dornskrid netra, evel pa vefe un dra anavezet-mat, met, ni avat, n'emaomp ket evit lavarout deoc'h...). Bezet a vezo, troet e oa Izuned da skeiñ un taol bras evit echuiñ gant an holl voazamantou dizoare-se.

Un tantad bras a vije graet, brasañ hini bet biskoazh, ha neuze e vije klozet evit mat ar Gambr Volzet a servije da glenkañ an etevi diwar an tantadou... Koad a-benn a gavas, ha setu ma fellas d'un nebeudig tud chomet paganed evel o hendadou, dizarbenn an taol... Met pa'z ejont da c'houlenn digant Romanus ha digant Viviana reiñ un taol-skoaz dezho, a-enep Izuned, e nac'hjont krenn...

War verraat ez ae an devezhioù hag etru e oa ar mare a roomp anezhañ Amzer

an Nedeleg ha da geñver ar re-se eta e oa an tantad bras da vezañ.

Edo Viviana da gouz ar serr-noz o tonet en ti gant he c'helorniadou-laezh, pa spurmantas a-dreuz an amc'houlou skeud un den. Diouzhtu e teuas da soñj dezhi eus a Roc'hell Geriwallan, hag eus ar pezh a oa tremenet eno. N'he devoa ket bet amzer da lakaat daou gelorniad-laezh, ma oa ar skeud dirazi :

— *Macuez ! Daoust hag ankouna-c'haet hoc'h eus ar marc'had a oa bet etrezomp. Krog oc'h da zaremprediñ an Izuned milliget-se. Ker e kouto deoc'h. Ho mab a addeüio evel ma oa, ha gwashoc'h en em gavo ganeoc'h ; mar ne ket din ar pezhioù-aour am boa roet deoc'h hag o deus sachet berzh-mat war ho madoù, e vo dilamet hoc'h leve diganeoc'h ! Ha c'hoazh, pa lavaran ar pezhioù-aour am boa roet deoc'h ez eo an hevelep pezhioù end-eeun ha n'eo ket n'eus forzh pere... Me 'vo ouzh ho kortoz e-tal Feunteun Geriwallan warc'hoazh da noz. Kenavo warc'hoazh.*

Ken strafuilhet e oa bet Viviana ma teuas d'an ti hep degas ganti he c'helorniadou-laezh.

A-boan ma oa en ti, ma klevas ar vugale o krial : «Mab-henañ a zo kouezhet ha ne c'hell mui bale...».

Deuet e oa da wir lod eus gourdrouzoù an estren...

Ne oa mui nemet un dra da ober : hastañ buan mont da gaout Izuned ha kontañ an doare dezhañ evit klevout e all...

Dont a reas, mall warnañ. Ar Mab-Henañ a oa en e c'hourvez war ur c'holc'hedad pell-kerc'h, gant un tapis gloan warnañ.

— *Me, eme Izuned, gant sikour gras Doue a rento ar bale dezhañ, met ret e vo da gentañ dispenn ar marc'had ha return e arc'hant d'an estren-se...*

Evel-just, kaer e oa bet furchal ha kleak e pep lec'h ne oa tu ebet da gaout ar pezhioù-aour ; ar re-se a oa bet

dispignet pell hag amzer 'zo.

— *N'eus forzh, eme Izuned, pet pezh-aour ho poa bet... Seizh ? Ma, me a gaso seizh dezhañ d'ar Feunteun hag e vo gwelet piv a vo trec'h d'egile...!*

Ne vije ket brav mont en noz evel-se betek ar Feunteun, met al loar en he c'hann a sklerie ar maezioù hag evit en em gaout el lec'h m'en devoa da vont n'en devoa Izuned d'ober nemet heuliañ penn-da-benn koulz lavarout en hent roman, hag evel ma ouzer e klaske ar Romaned al lec'hioù meinek ha kalet, ar muiañ ma c'hellent da ziazazañ o hentoù. Kornad Kersulez, rak dre eno e tlee Izuned tremen a oa druz a-walc'h, dreist-holl goude glaveier an diskar-amzer. Met ne voe ket pell koulskoude o tapout Rubeuz hag ivez Kerwallan ha neuze en em gavas en ul lanneg war ribl ar c'hoad a-us d'al Leger a glevet o trouz en e deun an draoñenn. Ne oa ket amzer da chom da c'harzhata ! Evel ar merc'hed yaouank hag a zeue e-kerz miz Mae da lenn o flanedenn en ur deurel spilhoù e dour ar Feunteun : un abadenn-blijadur evito, gant un tamm spi evelkent e chomfe o spilhenn war an dour, rak seblant vat e veze neuze : seblant-dimeziñ...

Met lezomp ar marc'hed yaouank a-gostez hiziv evit heuliañ Izuned a-dreuz ar vodennad-lann. Ar Feunteun; kaer gant he mogerennou mein-benerzh oc'h ober ur stern dezhi. Harp ouzh ar varlenn anezhi ; ur skeud, skeud unan o c'hortoz. O klevout trouz kammedoù Izuned hag o welout anezhañ o tostaat, e taolas ar Skeud ar c'homzoù-mañ :

— *Añ ! ya, te an hini a zo deuet d'ober kefridi Viviana. Te, preñv-douar ! Te 'gav dit ez out evidon-me, priñs e balez-ruz ?*

— *Setu amañ ar pezhioù-arc'hant az poa roet da Viviana ; o degas a ran dit en-dro evit terriñ ar marc'had.*

— *Ar seurt pezhioù n'eo ket va re-me eo ez int, eme Briñs e balez ruz en ur sellout gant dispriç outo.*

— *N'az po ket re all, eme Izuned. Terriñ ar marc'had a zo d'ober hag a vo*

graet, dre gaer pe dre heg.

Neuze Briñs e Balez Ruz, aet droug spontus anañ, a dapas ar pezhioù-aour hag o darc'hasas pell dioutañ en ur douñ Doue... Neuze e tec'has kuit en ur leuskol ur pezh yudadenn a lakas holl heklevioù an draoñenn da zistonañ kement ma ne voe mui klevet e-pad ur pennad krouz ar ster. Pa gouezhas ar pezhioù-aour war an douar e oant deuet da vezañ pezhioù-mein, berniet an eil war egile, ha lesanvet e oa bet ar rec'hell-se «Barliniad-Vein Mamm-gozh an Diaouls».

Trec'h e oa bet eta Izuned da holl ijin an Hini Drouk, ha pa zistroas da di Viviana, e tapas krog e dorn ar Mab-Henañ hag e reas dezhañ sevel en e sav...

N'eus ket ezhomm da lavarout deoc'h e oa distroet an eurvad da chom e ti Viviana, ha na pegen kaer e oa bet Tantal Paouezvan an Heol. Met diwar se e voe kemmet anv ar Gouel ha graet anezhañ Gouel ar C'hinivelezh...

Klozadur

Daoust petra a c'helle bezañ gwir an Istor Viviana ? Goude tost da 1500 vloaz ez eo diaes gwiriekaat pep tra. Met ma tegouezhfe ganeoc'h diakenn diouzh tu Ploubêr betek Loser, ha neuze treuziñ ar pont war al Leger, ha neuze klaak hoc'h hent a-gleiz war zouar Tonkedeg, e kavfec'h kollet e-mesk ar c'hoad-tailh rec'hell an eil war eben hag a vez graet anezho end-eeun «Barliniad-Vein Mamm-gozh an Diaouls», ha neuze ur roc'hell all gant un toull don a-walc'h dindani hag a vez graet anezhi «Roc'hell ar Gornadenned» ; ha uheloc'h, goloet gant struj a bep seurt, un daol-vaen ha n'eus nemet tud ar c'hontra a gement a zo barrek da gaout an hent betek enni. Hag ouzh krep an dosenn a-us d'al Leger, e-toues un dornadig-gwez : Chapel Geriwallan, gant ar feunteun distok-mat diouti, el lanneg. Bepred e teu mammoù da asazañ o

bugale war ar roc'hell da greñvaat o c'hroazell dezho, ha n'eus ket pell c'hoazh e veze gwelet merc'hed yaouank o c'hoari gant spilhoù da lenn o flanedenn war zour ar feunteun...

Pep hini a c'hello ober e soñj war istor Viviana.

N'eus ken.
KLERG

LEVRIOÙ HA KELOUENNOÙ

kouchet, berniet ez eo ar munudoù, ar fedoù, an anvioù dreist-holl evit pezh a sell ouzh ar XV^{vet} - XVI^{vet} - XVII^{vet} ha XVIII^{vet} kantved, ken ma teu al lenner da gredif en deus bet c'hoant ar skrivagner da voulañ an dalc'had klok eus pep diell bet kavet ha renket gantañ (renket mat-tre a-hend-all). Setu ur gonid priziuz evit ar 'glaskerien' hag an istorourien ha moarvat evit tud ar vro-se ; met anat eo, ez eo fisklet al lennerien all da vezañ beuzet, ha kollet en dastumad-se ; hag e teu an oberenn hec'h-unan da vezañ ponner. Dav eo lavarout ivez ne deo ket bev-buhezek tro-pluenn ar skrivagner, ha kerse eo ! Met daoust hag e oa tu da virout ar c'hempouez etre an daou dra-mañ : ober ma vefe ken dedennus evit tud ar vro kerkoulz hag evit ar re all o pleustrif gant un dachenn beventet-trizh ? En despit d'ar gwanderoù-se ha ne dint ket eus ar pouezusañ ez eo reizh heñf ma raio al lev, e Landreger hag e lec'h all, berzh-mat hervez e verit bras.

J.C.

Evezhladenn gant Klerg. Daoust ma oa bet kaset d'an oberour notennoù L. Fleuriot diwar-benn orin ar ger TREGER en deus dalc'hed d'ar faltazi diziazez : Tei ster ! Pa'z eo kalz kozh Ploulandreger evel Parrez Lann-Treger. Treger o tont diwar TRICORIOS = teir armead. Da lavarout eo, anv ar meuriad galjan bet o chom eno. Tostaat ouzh an anv-se ouzh PETRICORIOS (Peireguz-Perigor (d) = peder armead. Ha moarvat ivez CORIOSOLITES (Korseu) diwar CORIOS = armead ha SOLITES diwar ar wrizienn SOL = Lagad ? Da lavarout eo 'daoulagad an ar mead' (ar re a veilh war an armead (gwel. Ernod, De Bello Gallico, Benoist-Dossan, Pariz 1914, paj. 671).

Jean MARKALE. Tradition celtique en Bretagne armoricaine, Payot, Le Regard de l'Histoire, 1976.

330 pajenn eus un destenn hir, hir-tre skrivet stank ha munut, leun a notennoù hag alies a adlavaredoù. An hini a fell dezhañ kavout kontadennoù plijus hag aes da lenn a vo gwell dezhañ klask e lec'h all (rak n'eo ket levrioù eo a

vank : A. Le Braz, Cadi, Fouchet...). An hini a fell dezhañ kaout ur studi burutellerzh gavo e walc'h gant an oberenn-mañ, rak anavezout a ra J. Markale kalz traoù ha kredif a ra dezhañ e oar kalz muioc'h c'hoazh...

Ur raskrid hag ur c'hlozadur fetis, enno prederiadennoù a bep seurt diwar-benn kudenn ar Marzherezh (kudenn an traoù marzhus) e-lec'h ma kaver meur a dra dalvoudus ha... re all ivez. Ouzhpenn, a-raok pep kontadenn, ez eus un hir —ha gouzdek marteze— a raklavar, a-wechoù hiroc'h eget ar gontadenn hec'h-unan. Ha pinvidikaet eo c'hoazh an destenn gant kalz a notennoù. Santout a reer emañ J. Markale amañ en e vleud, gwell eget en e ziskleriadur eus (Istor kuzh Breizh).

Da dud gouziekoc'h hag akuitoc'h egedon war ar brederouriezh hag ar varzhoniezh da varn talvoudegezh don an dastumad-mañ. Dav avat, dere'hel soñj n'eo ket bet degemeret en un taol-kont ar menoz-mañ-menez eus J. Markale, gant tud ken barrek hag eñ war ar seurt danvezioù. Met ar pezh a harz da zegemerout pep tra evel talvoudus ez eo an hardison re anat da gadarnaat grofs traoù breutaet ha breutaus, hag ivez an tech-se da welout e pep lec'h arouezioù o sellout ouzh ar seksologiezh. Ur bennozh ez eo evitañ ez eus bet ur wech bennak ur paotr anvet Freud o reif digareziou dezhañ 'd'en em zivoustrañ'.

Evit J. M. N'eus netra wir er BARZHAZ BREIZH ! Ma l day e vefe dezhañ lakaat e fri e studiadennoù spis Donassian Laurent a laka splann hag anat talvoudegezh don oberenn Gervarker. Lec'hiañ a ra ar Gër-a-lz e Bae an Anaon, hervez anv ar Bae, daoust d'ar yezhourien ha d'an douaronourien da vezañ bet prouet ez eo an anv-se an apy Bae an Anaon distummet. Gantañ ez eus ivez un tamm blaz a varkselezh, debroet ma'z eo gant ar c'hoant da welout e pep kontadenn ur gudenn gevredigezh, taolioù-digoll ar beorien a-enep ar binvidien.

N'eo ket souezhus e vefe J.M. enepkristen. Ar Bibl ? Un dastumad marvailhoù. Istor Kain hag Abel : ul lid a zebrif-tud (!). Ar Christ ? Roud ebet anezhañ en Istor ; komz a ra J. Markale eus 'Marvailh ar Christ'. Ur reuz e voe labour an Iliz hag ar gloer evit ar sevenadur keltiek. Ma lavarer e kaver ur patron bennak mat ha madelezhuz ez eo diwar levezon ar gloer. Sent kozh Breizh ? Krouet ez int bet dre gristeniañ doueed pe bennterieren rakkristen, pe zoken diwar santerezh ; da skouer Sant Bill a zo ar maenig (billenn moarvat !) pe an doue Belenoz, h.a.

Met perak neuze degemer hep tabut na rendael ur Sant Jermen met nann ar Sent Vreizhat eus an hevelep mare ? Re aes eo lavarout n'eus bet biskoazh eus ar Sent kozh ! N'eo ket d'ar re a gendalc'h ur gredenn a-viskoazh eo prouit ez eo gwir ar gredenn-se, met d'ar re a nac'h anezhi eo prouit ez eo fals. Diwar ar skouerioù a vrenegomp amañ, ez eo sklaer ez eo ret degemerout ar bajenn-mañ-pa-

jenn eus an oberenn ouziek-se, gant ar brasañ evezh.

J.C.

Michel PONIATOWSKI présente **Cadoudal, Ma reau et Pichegru**, par Emile Marco de Saint-Hilaire, Librairie Académique Perrin, 1977 (380 paj.).

Iskis ez eo an titl : da gredif e vefe eo bet dibabet anv un den anavezet evel Poniatowski da aesaat gwerzh al lev. E gwitioez ez eo siriusoc'h an traoù, rak labour Poniatowski a ya tremen kant pajenn gantañ, damdost an drederenn eus al lev, ha reñf a ra dimp un albers talvoudus-meurbet an an darvoudoù. Ahend-all ez eo un tammig touellus an titl-se, rak n'eo ket ur skrid o koutañ deomp buhez Kadoudal. Morev ha Pichegru, met an danevell eus un darvoud istorel ma voe kemmesket emañ an tri den-se : irienn zivrezhañ Jord Kadoudal a-enep Napoleon Bonaparte. Goude ur raklavar hir o tisplegañ ervat ar mare hag ar perag eus an irienn ez eo ar peurest eus an oberenn an embannadur eus un dornskrid savet e 1843 gant de Saint-Hilaire a voe e servij an Impalaer, evel floe'h a-hed e yaouankiz hag en deus kontet afer an irienn diouzh an dielloù gwellañ.

Dodennus ez eo ar pajennoù-se ken aes da lenn evel ur romant-polis. Livet-mat ez eo an dud, o zemp-spered, abegoù o c'henoberiañ ; danevellet ez eo dre ar munud an irienn, an dilestradennoù, labour kevrenus an ene daonet ma oa Fouché, mestr ar polis, ar bac'hidigezhioù an taolioù-trubarderezh, ar flatraadennoù, ar vuhez en toull-bac'h, ar prosez ha marv ar re varnet.

Met ! meuleudiou dizolo-kaer ha penn-da-benn, d'an Impalaer Napoleon, gant doare-skrivañ pompadus ar mare-se, doare hag a laka an nen da voue'hoarzhif en deiz a hiziv. Met evel-se eo e skrive ar skrivagnerien eus 1750 betek 1850 ha goude roken, die'hoarzh-tre, en ur gemer skouerioù hag arvoudoù en Amzer goañ roman pe c'hresian hag en ur zisplegañ o zraoù war un ton faos ha leun a stambouc'h.

Poltredet eo Jord Kadoudal evelisto, ha dinkouezet evel un den-a-enor, met beznet un tammig er peurrest eus an danevell. Kerse eo avat, dre n'eo bet kemmesket meur a wech Chouanerezh ha Brezelioù ar Vande, ken ma'z eo lakaet a-wechoù da 'general vandead'.

Ur merit bras en deus al labour-mañ koulkoude : adbrudañ dirak daoulagad an dud spered gwitioez stourmad Kadoudal hag e Chouanerezh. Met chom a ra pell da vezañ klok ha dist, ha re aes e lakan Saint-Hilaire e genod an dud kenneud un tammig diwar e faltazi o-uan. Riakhs ez eo alies adober un emviz.

J.C.

C.J. GUYONVARCH (Celticum 27) **Le Catholicon** de Jehan LAGADEUC. Dictionnaire breton, latin, français du XV^e siècle, Vol. 2

Ur misi gwelout ar seurt geriadur o tegouezhout, moulet fraezh ha brav. Gourc'he-mennou d'al labourer diziskuih m'eo C.J. Guyonvarc'h. E-sell emañ C.J.G. da embann a bep eil, gant an dornskrid Cms, holl vouldadurioù ar C'hatholicon, da lavarout ar Geriadur reizh diwarno, ha neuze evel boket, e-giz ma vez lavaret, keñveriañ an holl destennoù evit tennañ an danvez-yezh a zo enno. Kavadennoù a vo graet sur-mat e-kefever latin, gallek ar Grennazer, hag ar brezhoneg evel just. Ul labour ramzel.

Plius eus ar plijusañ ez eo raskrid C.J. Gwionvarc'h e deroù al levri (dav e vefe bet lezet a-gostez koulskoude ar pajennoù CXLVII - CXLIX o sellout ouzh un tabut ha n'en deus netra da welout gant ar brezhoneg krenn).

Ne c'hell ket un den, goude bezañ eus ar gouiziekañ embann ul labour evel emañ, hep ober fazi pe fazi, se 'zo sklaer. Un nebeudig hon eus merzet, ha marteze ez eus re all. Sellomp ouzh ar bajenn XXVII e-lec'h m'emañ raskrid latin ar Geriadur. Gwell e vefe bet embann ar **fac-simile** e-lec'h en em lakaet an riskl da adskrivañ fall geriennoù 'zo ha dreist-holl ar poentadur.

Daou dra hepken a verkimp. An deirvet linenn goude PRINCIPIO : e ranker lenn **nouellum** ha n'eo ket **novellorum** daoust ma 'z eo mat troidigezh K.J.G. 'ce nouveau petit livre' pa lavar e latin : **al levrig brezhoneg-mañ evit 'deraouidi' pe 'nevezianted'**. Per Trepos (Annales de Bretagne, 1964) **NOUELLUM = nevez**. Ar ger **BRITONI** en hevelep frazenn en devefe ezhomm da vezañ diskleriet : ar ger **brittonicum** berraet eo a zle bezañ. Me 'gav din ez eo gwelloc'h dre vras troidigezh Trepos-Marichal eget hini K.J.G. met se 'zo un ger all.

Bez'ez eus avat, un dra souezhus ha n'eo ket bet merzet (pe diskleriet da vihanañ) gant Trepos, na gant K.J.G. hag a zo evito ur sin eus bezañ 'Rannyezhod', d'ar mare ma oa bet savet e C'heriadur teiryezh gant Lagadeuc. Ne lavaran ket ne oa ket dishevelderioù etre ar yezh komzet ar brezhoneg, met lavarout a ran hepken e ranker sachañ war ar fiseleñ evit hen proufi diwar ar gerioù-mañ 'Queso... ut... brittonicum secundum eorum prolationem hic interserant', troet gant Gwionvarc'h, 'Je demande... qu'ils y insèrent le breton selon LEUR prononciation'.

A-raok treiñ evel-se e vefe dav lavarout e lenner **EORUM prolationem** ha n'eo ket **EARUM**, ha daoust ma vefe latin fall, hervez reolennoù ar yezh klasek, e vefe tu da zegemer an droidigezh-se. Met **EARUM** a zo tro-c'henel lies gwregel eus **EA = homañ ! hi**. Anat eo e vank ur ger ! Ha forzh petra a roet da stoufañ an toull n'ho po biken ur brouenn apodiktik ! Ar ger a

vank a zo ur ger gwregel bennak el liester. Marteze **VOCUM (= gerioù) ?**. Troomp en hor stumm-ni bremañ : 'O fedañ a ran (gant kalz a c'hred) da enlakaat brezhoneg amañ hervez distagadur ar gerioù-se'. Komprenit bremañ pezh a gerot ! Gwall-hardizh e oa Per Trepos e-unan o komz eus 'dialectes', ha dav e vefe da Gristian Gwionvarc'h sklaeraat e droidigezh e-unan. Peogwir gant sachañ war ar fiseleñ, e c'heller kompren ali Lagadeuc evel-hen 'thezit sonj da skrivañ ar gerioù evel m'eo dleet !'.

Paj. XLV e tro an embannour :

*Goude guenel map doue guerches eu chomet
Après avoir engendré ? e-lec'h après avoir enfanté...*

paj. LXXXI - LXXXI, ne gomprenet ket evezhia denn K.G. diwar-benn yezh Henri Bossec. Evel just ez eo skrivet ar yezh-se e krennvezhoneg.

Henri Bossec alunar mar car doe me ambezo auantur mat ha quarz (lire quaezr).

Met perak komz eus brezhoneg lennegel amañ ha sachañ evezh al lenner war **Me am bezo ?** Skrivomp eta : **Henri Bossec a lavar : 'Mar kar Doue, me am bezo avantur vat ha kaer !'** Petra 'zo lennegel pe grennamzerel er stumm-se ? Brezhoneg leizh e neudenn an hini eo ! Hag eus an XX^e kantved.

paj. LXXXIX (notenn 49). Ar pezh a leverer diwar-benn ar jubennourien e prosez Sant Erwan ne deo nemet ur gredenn hep diazez e-kefever gouiziegh. Pev ar jubennour touet a oa : unan eus Bro-Leon, unan eus Kernev-Uhel, unan eus Plouvael hag unan eus Bro-Wennrann, en eskopti an Naoned. Setu holl ar pezh a c'heller tennañ eus an destenn ! Evel m'en deus hen diskouezet **Barr-Heol**. Ar sonj hag ar gredenn e vefe bet dibabet ar jubennourien en abeg d'ar rannyezhod, n'eo ket sot na diskiant, met diziazez, hervez testenn ar prosez. Hor c'henel E. Barzig en doa merket kement-se ivez en e levri **Mur de Bretagne**, ha ne ouzomp ket pelec'h en devoa pesketet an dra-se. Ur soñj deuet da vezañ kemeret evel ar wirionez, ne deo ken.

A-hend-all, ez eo ur fazi embann ur seurt testenn hep he burutellat, peogwir e oa Mestr Herve eus Plouvael chaloni lizoù Sant-Brieg ha **Gwened** ha n'eo ket an **Naoned**.

Pec'hed avat, e vefe pouezañ re war an holl draoù-se. Rak fazioù pe get, viou-koukoue pe get, e vo an oberenn ramzel emañ K.J. Gwionvarc'h e-sell da embann, un oberenn a dalvoudegezh vras o reñt enor d'e outizegezh ha d'e galonegezh.

Gras dezhañ d'he c'has da benn !

KLERG

Studi hag Ober, niv. 22-23, 1977. Priz an niverenn : 12 lur. Dim. St Gal de Pons, 22700 Louanneg. K.R.P. 519 40 Roazhon.

Un niverenn fetis : 78 pajenn.

Setu amañ dre vras ar pezh a zo en

niverenn-se (ankouaet en deus an embanner ober an daolenn eus an danvez).

1 - Feiz Damazus, ur formulenn eus ar feiz jakaet e brezhoneg diwar al latin (moarvat hervez Enchiridion Symbolorum-Denziger).

2 - Doareoù padus ar speredelezh relijiel e Breizh : an Dreinded Santel, ar Basion, ar Werc'hez.

3 - Geriaoueg ar Bibl. Ur toullad geriadurioù evel-se o sellout ouzh ar skiantoù modern a vefe mat sevel ivez.

4 - E **Pariz e vez farlotet pep tra**, ur seurt pezh-barzhoniezh troet diwar gallek J. Raynaud d'ober goap eus Pariz hag eus he 'spered'.

5 - Notennoù war levrioù gallek ha brezhonek. Kenlabourerien **Barr-Heol** (darn anezho) a glev o jeu !

6 - Mister ar Christ hag e vezañs el Liturgiezh. Un digarez evit dizoleñ distresadurioù 'zo war dachenn al Liturgiezh hag e speredoù 'zo. Da vezañ lennet pizh en ur brederiañ. Ar gwellañ e vefe (mar befe Kelec'hioù-Studi e yezh ar Vro) e vefe implijañ ar pennad-se evel danvez-studi. Keit ha na vo ket Kelec'hioù-Studi pe ur seurt bennak evel-se ez eo risklet labour bouezus person Louanneg da chom dizimplij a-walc'h. Ha koulskoude ez eus ezhomm a studioù war ar Filozofiezh hag an Doueoniezh. Ne glot ket ervat ar pezh a lavar Maodez Glanndour diwar-benn an troidigezhioù diwar al latin, gant ar pezh a lavar Breuriez-Veur al Lidoù-Sakr. Tud evel an Aotrou Kerveadour, eskob kozh Sant-Brieg, a brize labourioù Komision al Liderezh evit eskopti Sant-Brieg, dre ma rae ar Gomision-se he labour diwar al latin. Met evit gwir e ro Breuriez-Veur al Lidoù, e Roma, aotre d'ar c'honferañsoù-eskibien, da adaozañ (betek ur poent 'zo, na petra 'ta!) an testennoù prientet ganti (gwel. al Levrioù-Liderezh evit ar Vadeziant, ar Gouzoumenn, ar Binjenn, an Nouenn, ar Briedelezh : *De aptationibus quas Conferentiae Episcopales et Episcopi facere possunt*. Ar wirionez avat, a zo gant Maodez Glanndour pa glemm war ar seurt c'hoariva ez eo deuet al lidoù-sakr da vezañ gant darn eus ar veleien. Ha sur-mat, evidomp-ni, Bretoned, e vefe dav 'silañ' ar pezh a vez degaset deomp eus kostez Pariz, ha da c'hortoz, pegañ gwelloc'h ouzh testennoù latin ar Ritualioù nevez, hep o muturniañ pan o zroer e brezhoneg.

Al Liamm, 1977, Gwengolo - Here. 184, P/Le Bihan, St-Maloù, KRP 5349 06 Pariz. Koumanant-bloaz : 40 Lur.

Peadra da lenn en niverenn-mañ skrivet en ur brezhoneg yac'h ha disi, pe dost. Gant pennadoù diwar bluenn E. Barzig (*Eñvorennoù e yaouankiz*), *Istor ar Studoù-Unanet*, gant Kenan Kongar, *Istor Breizh* gant La Borderie, troet gant R. Hemon (an dibenn eus Emgann an Tregont). Allod mat gant F. Kervella diwar-benn *penaos prientit ur skrid evit an embann*. Er penn

kentañ eus ar gelaouenn, un droidigezh diwar ur skrivagner poloniat, *Adolf Rudnicki: Istor ur banne te*. Pennad Tillemont gouestlet da Yann-Kel Kernallegenn. Ar penn-kentañ anezhañ a zo filozofiezh 'giz J.J. Rousseau, 'm eus son, hag ar peurrest ur plede a-enep ar gapitalouriezh.

Un niverenn boudek ha bourrus.

Le Télégramme.

Bep yaou e vez war an TELEGRAMME dindan an titl-mañ : *Aux quatre Vents de la Culture Bretonne*, ur pennad o reñt da c'houzout an nevezioù war dachenn ar sevenadur hag an embannadurioù. Goude ma oa deuet **Barr-Heol**, niv. 94, er-maez ez eus bet komzet eus ar pennad-stur : *E-skud levrioù*. Anat eo n'en deus kronikour an *Télégramme* nemet hanter-vezet ar skrid, ha gwellet emañ traoù ha na oant ket emañ. Da echuiñ e skriv ar c'hazetenner 'Gallout a reer ivez en em c'houlen kement-mañ : *kelaouennoù mat ar jeu ganto evit pezh a sell ouzh an arc'hant hag-eh o devefe muioc'h o lennerien ?*. N'eus kelaouenn ha kelec'helaouenn vrezhonek ebet o vevañ diwar he danvez hec'h-unan ! Zoken an hini a denn ar muiañ a c'hell'gelaouennoù nag ar c'helaouennoù eo a zo kaoz mar deo izel a-walc'h niver o lennerien, met ar 'sistem'... hag a harzh ouzh hor pobl da zeskiñ lenn ha skrivañ o yezh.

Deiziatner 1978

Embannet gant SKOL AN EMSAV, priz : 12 Lur. Deizioù ha Gouelioù ar bloaz, h.a. gant ur stagadenn 'niverennoù-post parrezioù Breizh'. Er stagadenn-mañ hon eus merzet traoù souezhus : *Gergam* evit *Gregam*, *Kervaria-Jular* evit *Sular*, *Fievel* evit *Plouvael*, ha tammoù traoù faltazius, met dre vras ez eo mat. Unvaniezh a ra nerzh !

Breizh

Magazine de la Culture bretonne (gant ur stagadenn e brezhoneg). Koumanant-bloaz : 25 Lur, BREIZH, La Baule, KRP 14 467 Roazhon.

Wanig ha Wenig

Ur gelaouenn evit ar vugale hag ar re all ! 20 lur ar bloaz. KRP Roudant 2943-51 Roazhon.

N'ankouañ ket kas e Galanna da Gwenz ar Brezhoneg. KRP J. Le Bec, 3070-20 T Nannet.

Resevet hon eus Imbourc'h dreist-holl troidigezh La Divina Commedia gant P. Boundelles.

Imbourc'h, koumanant-bloaz : 40 Lur.

KRP Y. Ollivier, Roazhon 1534-25.

Resevet ivez *Anno de Bretagne en bandes dessinées*, war baper Alesia, embannet gant Ti Labour Keltiek Plabenneg.

J. CHARDRONNET, *Le Livre d'Or des Saints de Bretagne*, Armor-Éditeur, 381 pages, skeudennet.

Levr-Aour Sent Breizh gant an Tad J. Chardronnet, Oblad (O.M.I.). Anavezet mat eo an Tad Chardronnet evel istorour : *Histoire de Bretagne*, moulet evit ar wech kentañ e 1965 a zo bet moulet c'hwech gwech ; n'eo ket stank al levrioù hag a zo bet advoulet ken alies en ur par ken barr. Istourer ? Daoust hag ul levr istor ez eo al levr-mañ ? Ya ha nann ! Ya, rak ur bern sent ha sentezed pe da vihanañ sellet evel tud santel a ouzer traoù resis diwar o fenn, evel Sant Erwan, Charles ar Bleiz, Visant Ferrer, an Tad Maner... Nann avat, rak bez ez eus re all, evel Sant Kaourintin, Sant Ronan, hag ez eo diaes bezañ sur eus kement a gontet diwar o fenn.

Diouzh ar roll-se e komprenit diouzhtu hon eus da ober amañ gant ul levr Buhez ar Sent, evel ma lavar titl al levr end-eun.

Evit pezh a sell ouzh ar re hag a c'heller ober anezho, mar kirit, Sent Istorel, n'eus netra da lavarout e-keñver Istor : skrivet berr-ha-berr ez eo o buhez, hag en doare plijus ez eo kontet an diverrañ-se : evel poltreoù livet gant ur mestr-tsalenner. Katell a Fraichville, F. Cormeaux, Dom Yann Leudger, Yann-Vari de la Mennais, h.a. Neuze Sant Erwan (un tammig hiroc'h e-giz ma tere), Charles ar Bleiz, h.a.

Hervez urzh al lizherennoù e galleg, ez eo bet renket ar Sent gant ar stummoù brezhonek o deus o anv. Ar pezh a c'hell rentañ servij d'ar re a vez o klask anvioù brezhonek d'o bugale pe d'o filhored pe filhorezed.

P'hor bo meneget an div gartenn-damlinenet hepken, met sklaer, eus Breizh, hag eus Enez Vreizh, ar stagadennoù diwar-benn «gwirvoud» ar sent kozh, ar marvailhoù pe judennoù, hor bo rost da vihanañ un albez eus danvez al levr.

Evit pezh a sell ouzh ar Sent kozh hon befe ur rebech bennak da ober d'an oberour : daoust ne da ket keit hag Alberzh Ar Braz, an dominigad brudet, ha daoust ma ro da gompren d'al lenner ez eus er buhezioù-se, degouezhioù dreist-ordinal ha n'eo ket dav o sellout evel traoù gwir-bater, ez en em lez a-wechoù da vezañ temptet ! Gwir eo, e vefe temptet ivez meur a hini, ken brav evel ma'z eo «istor» ar burzhudoù lakaet war gont ar sent-se. Barzhoniezh !

Arabat kredif evitkent e vefe bet desevel ar skrivagnour ! Gouezet en deus kemer e ziarbennoù : n'eus nemet lenn ar pezh a skriv paj. 371-2, diwar-benn ar judennoù pe ar marvailhoù.

Bez'ez eus traoù avat hag a vefe ezhomm d'o gwirikaat, evel pajenn diwar-benn Azenor (cf *Barzhaz-Breizh*) o willoudiñ, gant skoazell Santez Berc'hez (evel just), en Iwerzonn, en 32 Aberfraw, troet «Aber Vrau» gant an oberour?

Daoust ha ne vefe ket amañ ur c'hemmesk gant Aberfraw, eus Bro-Gembre ? Ha neuze, zoken evit ober plijadur da unan bennak n'eo ket dav treiñ anv mab Azenor : BUDOC dre «ganet war an dour» ! Ur stumm faoz ez eo Budoc hag a zlefe bezañ da vihanañ, Buzoc-Buzog ; ar z = th dous, diwar ar wrizienn BUDD = *trec'h...* Met da c'hras Doue ez eus kalz a lennerien ha na welint ket ar seurt traoù-se hag a lenno gant dudi *Le livre d'Or des Saints de Bretagne*. Gourc'hemmennoù d'an oberour ha d'ar mouler en deus graet mat e labour ha gouezet dibab e skeudennoù.

KLERG

O PAOUEZ DONT ER-MAEZ...

Dictionnaire Breton-Français des Expressions Figurées (Tome II du trésor du Breton parlé, de Jules Gros). 2^e Ed.

Klervet ho peus ez eo advoulet ar geriadur-mañ a oa diviet ur bloaz 'zo ?

Ac'hanta, deuet eo e-maez ar wask !!!
Al levr dispar-mañ a zo ur benveg talvoudus da gement skrivagner, kelener ha studier a zo.

N'eo ket heñvel ouzh ar geriadurioù all, met degas a ra dezhe holl ar skouerioù a ra diouer dezhe da sklerjenniñ talvoudegezh ar gerioù ha penaos o implijout.

Kement ger a zo ennañ a zo sanket e frazennoù war o hed. Ar re-mañ a zo bet dastumet diwar gomzoù pemdeziek labourerien ha martoloded Bro-Dreger hag o devoa desket o brezhoneg war varlenn o mamm. Se a zo kaoz d'ar frazennoù-se da vezañ brezhoneg reizh, naturel, bev-buhezek, talvoudus hag alies fentus-kenañ.

Ar frazennoù brezhonek a zo troet holl e galleg reizh, hag a-wechoù ger evit ger.

Priz pep skouerenn : 75 L (franko : 80 L)
Da rakprenañ betek ar 15 a viz Kerzu : 70L (franko? : 75,80 l)

Goulven Jacq

Priz Langleiz 1976

PINVIDIGEZH AR PAOUR

166 pajenn, Kartennoù ha skeudennoù

War baper kaer 32 Lur

War baper all 24 Lur

Embannet gant AL LIAMM

Keginerezh

HARINKED gant OGNON

Harinked, ognon, amann, holen, pebr.

Ret eo kemer harinked gant o letez. En ur billig, ennañ un tammig amann, fritañ gnezh war an daou du.

War ur billig all, en amann ivez, lakaat da fritañ ur bern ognon troc'het munut.

Pa vez an harinked tost-poazh, goleiñ anezho gant an ognon. Lezel da boazhañ goustadik e-pad ur c'hardeur.

Holen ha pebr.

Treiñ ar c'hig gwech an amzer, met ret eo d'ar c'habilli-touseg bezañ atav war c'horre.

Pa vezer o vont da servijañ, lakaat dienn fresk er billig. Aozañ pep tra en ur plad.

Taolit pled, ez eo arabat d'an amann rouzañ

TARTEZENN gant OGNON

Toaz tartezenn, ognon, kig-sall, 2 velen vi, 50 g amann, 60 g bleud, 50 cl laezh, holen, pebr, muskadez.

Lakaat en ur billig, an ognon skejet munut, da rouzañ un disterig pe da veleniñ en amann.

Eus an tu all ober ul lipig Bechamel gant amann, bleud ha laezh. Sasunañ gant holen, pebr ha muskadez. Lezel da boazhañ e-pad 10 munut ha goude-se meskañ e-barzh daou velen vi. Meskañ kement-se gant an ognon ha neuze ledañ war an toaz tartezenn en e voul. War c'horre, lakaat 100 grammad a zraillhennoù kig-sall bet betvet un disterig. Lakaat 20 munut er forn.

Da zebrañ tomm-tre.

(Degaset gant Per Denez)

Kudennoù an amzer-mañ hor pesketaerezh en ARVAR

L. ANDOUARD

Ar pesketaerezh a zo bet, a-viskoazh, bras ha pouezus e Breizh, evel ma tere ouzh ur vro a zo bevnet gant ar mor war dri eus he c'hostezioù. Gallet en dije bet bezañ brasoc'h ha pouezusoc'h e'hoazh evidomp ma vijemp bet skoazellet a-zoare, pe ma ne vije ket bet lakaet harz ouzh hor srivoù gant ar gouarnamant a vez dedennet muioc'h, alies, gant oberiantizoù hag ijinerezhoù a seblant talvoudusoc'h dezhañ.

N'eus forzh penaos, lore'h a-walc'h a c'helle bezañ er Vretoned gant o fesketac-

rezh, evel m'edo ur pemp pe dek vloaz bennak a zo rak, d'ar mare-se eo, war a gredan, edo en e varr.

Liziv avat, emañ, 'm eus aon, war e ziskar ha n'eus nemet lenn ar c'helaouennoù, evit hen gouzout. Bemdeiz, abaoe meur a vloaz, ne zegasont deomp nemet keicier ranngalonus.

Ar pesketa, evel ma veze hag evel ma vez graet e'hoazh gant ar Vretoned a zo, en Europa, hag e Bro-C'hall zoken, un ijinerezh dibar, hervez ster strizh ar ger, da lavaret eo n'en deus ket e bar e nep bro all nemet, marteze, en ur mod bennak, en

Euzkadi e ve. En div vro edo hag emafi c'hoazh bev-buhezek, o lakaat tud niverus da vevafi, an div bobl o vont pell war-lerc'h ar pesked hep damant d'o foan. Emafi, ouzhpenn, an div vro dindan dalc'h gouarnamantou estren n'int ket ken douget-se d'o harpañ ha d'o difenn. Rak-se, ar pesketaerezh, en div vro, a zo dreist-holl frouezh ijin, labour ha strivoù ar bobl, anezhi tud yunut, evit al lod vrasafi, tud hep kalz a arc'hant hag a zeskadurezh nemet ez int kalet ouzh al labour, ha n'eo ket ar galon, kennebeut, eo a vank dezho.

Ar prederioù-mafi hag ar re da heul a zo deuet war va spered p'am eus lennet en deizioù-mafi war ar gelaouenn ouezelek «Eorascall» ur pennad diwar-benn «Ceist an Iascaigh» pe, en hor yezh-ni, «Kudenn ar Pesketaerezh».

Ne gav ket din e talv ar boan bezañ troet en e bezh nemet setu amañ penaos e krog :

«Frouezh divvezhañ ar Gomiston (hini ar Gomuniezh) e-keñver ar reoliadur da reñf d'ar pesketaerezh e diabarzh bevnen 200 milvor ar Gumuniezh a vezo sellet pizh outo gant Kuzul ar Vinistred e fin ar miz. Ur gudenn eo hounnezh a zo talvoudus evit tud Iwerzhon rak e soñj kalz anezho e vo Iwerzhon an hini a vo koll, n'eus forzh peseurt kendisentez a vefe kemeret gantañ. Daoust hag ez eus un diazezh bennak gant ar meno-se?».

Ma soñj kalz Iwerzoniz e-giz-se, e kav din o dije ar Vretoned kalz muioc'h a abegoù da soñjal heñvel rak, hiziv an deiz, bep gwech ma vez divizet un dra bennak e Brussel e-keñver ar pesketaerezh, ez eo sur ar Vretoned da vevafi koll.

Hag aes eo kompren perak pa ouzer ez eus eus ar Vretoned tud a ya da besketa pell eus o bro, ken e teu an div drederenn eus ar pezh a vez eostet er mor ganto eus a-bell hag, a-wechoù, eus a-bell bras zoken.

N'emañ ket em soñj displegañ kudenn ar pesketaerezh en he fezh, evel just, tennañ an evezh warni nemetken a fell din. Hep sellet re a-dost ouzh doareoù hor pesketaerezh lavaromp ez a abaoe, ha zoken a-raok. Jake Karter da vorueta da gostez an Douar-Nevez hag al Labrador hag, abaoe un hanter-kant vloaz bennak, d'ar Groenland, da Enez an Arzheb ha d'ar Spitzberg. Diouzh o zu, Douarnenez, Gelvenegiz, Konk-Kerneviz, Oriantiz hag Intelz a zo boas da stlejañ o rouedoù e Mor-Iwerzhon,

a-hed aodoù su ha kornog an Enez C'hlas pa ne vezont ket e kostez an Inizi Gall, e Bro-Skos, pe en Inizi Ork, hag etre ar re-mafi hag Enez ar Skorn, abaoe m'eo deuit ken diaes-all evit ar chaluterien bras, re an Oriant, da skouer, leuniañ a-walc'h o c'hof evit ma vefe arc'hantus o zroiad-pesketa. Arabat disoñjal emafi Konk-Kerneviz ha reoù all o toneta a-hed ar bloaz e pleg-mor Gwinea, hag e tiskennont zoken betek Mozambika. Ha paotred ar pesked krogennek, Pempoulliz, Mogeriegiz, Kamelediz, Douarnenez hag all... a ya da legestreta, da c'hriheta pe c'hoazh da granketa a-hed an Inizi Gall, Iwerzhon, Kernev-Veur, Bro-Bortugal, Afrika ar C'hornog pa ne vezont ket gwelet a-wechoù a-hed aodoù Tunizia hag ar C'hres ha, diouzh an tu all d'ar mor, en Inizi Bahama pe en Antilnez. N'ankounac'haomp ket, kennebeut, ez int set betek aod biz ar Brazil m'o deus kavet eno ur gwir «Eldorado» ha kredet, e-pad ur bloavezhig bennak, bezañ en o bleud eno pe gentoc'h e-touez ur boblad c'hrihied ne oa bet pesketaet biskoazh evit mat. Bras e voe o disouezhadenn pa voent kaset kuit ac'hano. Salokras ! edon o vont da chom hep menegiñ ez ae tud eus Douarnenez da sardineta war aod ar Marok n'eus ket pell c'hoazh.

Evel-se 'ta, e c'heller lavaret eo bet hag emafi c'hoazh ar Mor Atlantel en e bezh gwir dachenn-labour hor pesketaerien.

Evit mont keit-all da glask fortun eo ret kaout listri a-zoare fardet-mat evit ar vicher emeur e sell da seveniñ.

Gouest eo an Ijinerzh a-vremañ da bourchas d'ar besketaerien kement o deus c'hoant da gaout, hag ouzhpenn, evit gouzout e pelec'h emafi ar pesked —pa'z eus c'hoazh anezho— ha penaos o fakañ hag o virout war vourzh. Nemet e morioù 'zo ha n'int ket re vras, n'eo ket bet pell listri-pesketa re niverus ha re c'halloudus o raskañ kement pesk, bihan pe vras, par pe barez, o vevafi e strad ar mor. Gwelit pezh a zo c'hoarvezet gant harink mor an Hanternoz pe merluz pleg-mor Gwaskogn. N'eus ket anezho ken pa greded, 30 vloaz a zo hepken e oa anezho pinvidigezhioù na c'helled ket gwelet ar fin diout. Siwazh ! emamp pell hiziv diouzh an amzer benniget-se.

Neuze, n'eo ket souezh e vije kroget aon e pobloù 'zo hag a zo a-bouez vras ar pesketaerezh evito, pobloù evel Norvegiz ha, dreist-holl, Islandiz. Ac'hano, «brezelioù» evel hini ar moru. Gwelet hoc'h eus, marteze, war ar framm bihan penaos edo oc'h en em dagañ Islandiz ha Saozon er morioù yen ha garv-se e-lec'h m'o deus tremenet warno an nevez-amzer hag an hafv, bep bloaz, e-pad o buhez a-bezh kement a Bempoulliz hag a Vinigiz.

Dalc'het hoc'h eus soñj ivez moarvat eus «brezel» ar grillhed etre Douarneneziz ha Braziliz. N'eo ket e veve ar re ziwefhañ-mafi a-ziv ar grillheta —komz a ran eus re, paour-razh ha marnaoniet, eus an Nordeste, nemet e felle d'o gouarnamant mirout evit pelloc'h ur binvidigezh ne dennent ket kalz a frouezh diouti hag o dije bet poan-galon o welet o vont gant an estren, ha pa ne vije bet nemet ul lod dereat anezhi.

Memes tra evit Iwerzhon bremañ, rak kement hini en deus beajet er vro-se, dreist-holl pa'z eo Breizhad, a zo bet souezhet o welet kement a borzhioù goull, lec'hiet dispar, hag a aodoù dizarempred.

En amzer ar «Broadoù-Unanet», emafi pep pobl o sellout a-gorn ouzh hec'h amezeg, Paour pe binvidik, bras pe vihan, pep hini a glask tapout, ha mirout eviti al lodenn vrasafi eus ar «wastell». Amañ eo eus «eost ar mor» a zo kaoz. Ha setu perak emafi an ensavadurioù etrevroadel, evel ar «Broadoù Unanet», e Nevez-York, pe ar «Gumuniezh Ekonomikel Europat», e Brussel, a-zevri o troc'hañ, o lodenniñ, o vevenniñ strishoc'h-strishañ, pezh a oa d'an holl, evel ar mor bras, n'eus ket tregont vloaz 'zo c'hoazh.

Hag eno eo en em gav tapet hor pesketaerien, rak e kement mor ma verdeont, e lakaer harz outo hag e klasker, evit abeg pe abeg, mirout outo da seveniñ o micher. Hag evel ma n'eo deus gouarnamant ebet d'o difenn—frouezh ar pesketaerezh o vevafi a nebeut a bouez e-keñver re al labour-douar hag an ijinerzh—n'o deus netra ken d'ober nemet klask fred e lec'h all ha dont en-dro d'ar gêr, mezek ha kounnaret an tamm anezho.

Diaes eo gouzout petra a chomo eus hor pesketaerezh. Daou dra, avat, a rank bezañ graet :

a) adpoblañ hon aodoù hag hor morioù. Setu pezh en doa kroget da ober «Bodad etrevicherel ar pesked krogennek» tost da 15 vloaz a zo ha

b) astenn ha diorren ar sevel pesked kement ha ma c'hell bezañ graet war skouer ar pezh a zo bet graet pell 'zo breman evit an istr hag ar meskl. Dija, e lec'hioù 'zo, ez eus pesketaeriz hag a zo set da saverien besked, krogennek pe get, pe e sevenont an div vicher war un dro. Ret eo dere'hel gant an hent-se. Pesketaerezh ar c'hregin Sant-Jakez e pleg-mor Sant-Brieg a zo ur skouer all eus ar pezh a c'hell bezañ graet evit reñf buhez en-dro d'hor porzhioù bihan ha d'hon aodoù. Ret e vo, avat, teurel evezh ouzh saotradur ar mor gant an eoul-maen, an douristezh hag all.

Ur vezh eo deomp ivez, paotred ha merc'hed ar brezhoneg, Bretoned emskiantek ma'z omp, sañset, pa n'hon eus ket gouezet skoulmañ etre Iwerzhoniz, Skotiz, Kembreiz, Kernev-Veuriz ha ni darempredoù a c'hellfe hiziv bezañ talvoudus d'an eil re ha d'ar re all. Ezhomm hon eus ni da besketa er Mor Keltiek, ha, dreist-holl, er mor m'eo Iwerzhoniz ar vistri warnafi hag, en eskemm, e c'hellfent dont d'ar skol gant hor pesketaerien. N'emeur ket setu pell gant an darempredoù sevenadurel en deus ar «C'heltic Congress» klasket skoulmañ abaoe ouzhpenn kant vloaz 'zo. Ma vefe ac'hanoz tud «pleustrek», evit chom hep lavarout «pratik», da lavaret tud gant o zreid war an douar—pezh n'omp ket d'am soñj—e klaskfemp sevel ur «C'heltic Economical and Social Congress» a c'hellfe tud hor broioù tennañ ur mad bennak dioutañ ha pa ne vefe nemet dre studiañ kudennoù evel hini ar pesketa.

Ha, marteze e sellfe neuze hor c'henvroiz, mestr ha martoloded an «Nos-Deiz» ha, dre vras, paotred ha merc'hed «Sant-Gwe», da skouer, war hon tu muioc'h eget na reont bremañ pezh na vije ket diaes dezho rak e kement ha ma ouzon, ne ouzont ket re piv ez omp ha petra a glaskomp ober.

eil beaj Jakez Karter o sevel a-benn ar ster sant laorahs



KOROLLER KIWAT

Hervez un dresadenn gant HOKEAH, tresadennet Kiowat

36

D'ar 16 a viz Mae 1535, a oa sul ar Pantekost, ez eas Jakez Karter hag e gompagnuned da gomuniañ en iliz-veur Sant-Malou rak e oant prest neuze da vont en-dro d'ar C'hanada. Sevel a rejont goude betek ar c'heur da zegemer bennozh an Aotrou Frañsez Bohier a oa eskob Sant-Malou d'ar mare.

Rak, war an danevell eus e veaj en doa graet dezhañ, ar roue Frañsez kentañ en doa divizet e vefe graet un eil beaj d'ar C'hanada. Dre ul lizher eus an 30 a viz Here 1534 e voe Jakez Karter, hag eh «*loman ar roue*» hiziviken, lakaet e penn 3 lestr hag int pourvezet ha fardet a-zoare evit chom 15 miz hep distreiñ da Sant-Malou.

An tri lestr-se a oa disheñvel-tre o ment. Jakez Karter, evel kabiten-meur, a ranke mont war-vourzh an hini brasah anezho a-gevret gant un toulladig tudjentil o doa c'hoant da welout an douarou nevez ha, marteze, d'ober fortun enno. Hemah a oa an «*Erminig Bras*», c'hwec'h-ugent tonell d'ar muiañ ar vent anezhañ. An eil a oa an «*Erminig Bihan*», tri-ugent tonell, hag an trede an «*Emerillon*», daou-ugent tonell dezhañ. Lennet em eus en un tu bennak, n'eus ket pell, e oa banniel Breizh e beg o gwernioù nemet ne lavar Karter netra war se.

Tri devezh goude sul ar Pantekost, an avel o vezah a-du, e lakae an 3 lestr da ouel. Ne voe ket, avat, treizhadenn Garter ken evurus hag er bloaz a-raok. En em goll a reas an tri lestr a oa dindanañ ha ne voe nemet d'ar 7 a viz Gouere, 49 devezh goude bezañ kimiadet diouzh St-Malou, m'en em gavas an «*Erminig Vras*» e-unan penn, en Enez al Laboused. Ac'hano ez eas da Borzh ar C'hestell ma ranke an 3 lestr en em gavout asambles. Ne zegouezas eno an daou lestr bihanañ nemet d'ar 26 a viz Gouere.

«Ar muiañ, ar gwellañ war-raok»

Bez'e c'helle enta J. Karter kregiñ da vat gant e ergerzhadenn war-du an douarou misterius-se a raed «*Saguenay*» ha «*Kanada*» anezho. O vezah tremenet dre strizh-mor Belleisle, ec'h en em gave an 3 lestr, d'an 18 a viz Eost, ar SeizhEnez, dres e genoù ar ster Sant-Laorahs.

Derc'hel a reas Karter da vont war-raok gant e dri lestr ken na erruas en ul lec'h a biljas dezhañ, war aod hanternoz ar ster, dirak un enez vras a reas Karter «*Bacchus*» anezhi (*Enez Orleans* hiziv) 37

abalamour d'ar gwini stank a greske warni. Al lec'h-se a voe anvet gant Karter «*Kroaz Santel*». Tost edo ouzh ul lec'h all anvet *Stadakone* ma veve ur veuriad Indianed ruz a oa en e fenn un den a raed Donnakon-na anezhañ. Klask a reas Karter toullañ kaoz gantañ hag, evit-se, e kasas devetañ an daou Indian Teguragni ha Domagaya o anvioù, a oa deuet gantañ da Sant-Malou hag o doa desket eno un tamm galleg bennak. An daou den-se a gontas d'o c'henvroiz pezh o doa gwelet e-pad ar goañv ha penaos e oa bet graet brav dezho. Evurus e voe an Indianed ouzh o c'hlevout hag e rejont un degemer eus ar c'hentañ da Garter ha d'e dud. A-bouez eo merkañ e voe degemeret brav-tre e pep lec'h ma'z eas. Ha pa drenkas an traou etre an dud wenn hag an Indianed e voe a-ziwar meur a abeg a vo gwelet diwezhatoc'h. Koulskoude, Donnakonna hag e dud ne zalejont ket da ziskouez o enkreiz o welout kement a «*bizhier-brezel*» gant hor Malouiz.

Kentañ tabut etre an Indianed ruz ha Karter a savas pa zisplegas hemah ar c'hoant en doa da vont da *Hochelaga*. Ne weler ket splann perak e oa an Indianed a-enep ar meno-se nemet e tisplegas Karter en doa roet ar Roue «*urz dezhañ da vont ar muiañ ma c'hellfe war-raok*» ha neuze a ranke derc'hel gant e hent.

D'an 19 a viz Gwengolo e krog Karter da vont a-benn ar ster adarre hag e tremen dirak douarou «*ar re gaerhañ hag ar re wellañ a c'heller gwelout, ken kompez hag an dour, ha leun a vez ar re gaerhañ eus ar bed*» (penn. IV). Kavout a ra ivez war e hent «*un niver bras a diez war ribl ar ster hag enno tud o vevañ diwar an holl seurtou paked mat, hervez koulz ar bloaz*».

Bagesadenn Garter war ar Sant-Laorahs a voe graet war an «*Emerillon*», an daou lestr brasah o vezah bet lazet gantañ e *Kroaz Santel* (Kabek hiziv). D'an 2 a viz Here e tegouezas tost da *Hochelaga* e-lec'h ma voe graet un degemer «*kan brav hag e c'hell un tad ober d'e vugel*». Karter a oa gantañ lod eus an dudjentil hag 28 morser, en o mesk kabitened an daou lestr bras, Macé Jallibert ha Gwilherm Le Breton. Ouzhpenn 1 000 a dud, gwazed, merc'hed ha bugale, a zeuas en arbenn dezhañ hag int o tiskouez ul «*levenez vuzhodus*».

Kêr Hochelaga

Antronoz ez eas Karter hag e gompagnuned da Hochelaga. Kavout a reas war e hent «douaroù aret ha maeziou kaer ha bras ha leun a winizh... a zo evel mell ar Brazil, ken tev ha muioc'h eget piz» hag er maeziou-se emañ «kêr hochelaga, tost ha stok ouzh ur menez a zo en he zro». Hemañ a voe graet gant Karter **Menez ar Roue** (Montréal pe **Grec'h-ar-Roue** geneomp-ni bremañ). «Ar gêr-se a zo peurgrenn ha kloz gant teir renkennad goad... N'eus er gêr-se nemet un nor a c'hell bezañ prennet... E kêr ez eus tost da hanter-kant ti, hanter-kant kammed o led. An holl anezho a zo savet e koad, goloet gant ruskennou bras ha pluskennou ar c'hoadoù kentlavaret, kel ledan ha taolioù, gwriet-mat ganto, hervez o giz, hag enno ez eus meur a leur hag a gambr.

Hag e-kreiz an tiez-se ez eus ur sal vras ma reont tan enni war al leur ha ma vevont an holl asambles ; goude ez en em dennont er c'hambrou, ar wazed gant o gwiragez hag o bugale... Grignolioù a zo e barr o ziez ma lakaont enno ar gwinih a reont bara gantañ... hag e reont anezhañ en doare da heul... frikañ a reont ar gwinih gant horzhioù-koad... ar poultr neuze a zo dastumet e toaz hag e reont gantañ torzhioù bet lakaet ganto war ur maen tomm a vez goloet gant mein tomm hag evelse e poazhont o bara kuit a forn. Bez'e reont, er memes doare, kalz a soubennoù gant ar gwinih kentlavaret, fav ha priz, m'o deus o gwalc'h, ha kokombrez tev ha frouezh all. Listri, bras evel tonelloù o deus ivez ma lakaont enno o fesked, da lavarout eo silioù ha reoù all, a vez sec'het ganto er moged e-pad an hañv ha ma vevont a-ziwarno e-pad ar goañv ; hag e reont ganto ur bern bras, evel m'hon eus gwelet hon-unan. N'eus blaz ebet a holen gant o boued, hag e kouskont war ruskennou astennet war an douar, gant kozh c'holoennoù krec'hin a dalv d'o gwiskañ, da lavaret eo : huneganed dourgon, kaserelled bras, lern, kizhier gouez, demmed, kirvi ha loened-dour all ; nemet an darn vuiañ anezho a zo kazi noazh» (penn VII)

Hag e teu gant Karter ar bomm souezhus-mañ : «Ar boblse kentlavaret ne ra nemet gonit an douar ha pesketa evit bevañ, rak eus madou ar bed-mañ ne reont forzh dre ma n'o anavezont ket ; ha n'eo ket kantreerien anezho evel re Ganada ha Sagene daoust m'emañ ar Ganadianed kentlavaret dindan o dalc'h a-gevret gant eizh pe nav fobliad a zo war ar ster kentlavaret» (Dibenn ar penn. VII).

War varr krec'h ar Roue

Un niver bras a dud a zeuas da gaout Karter hag e ambrougerien, ar merc'hed karget a vugale hag o ouelañ gant al levenez, an «agouhanna» (penn ar meuriad) en o fenn. An dud klañv a voe degaset da Garter hag hemañ o welet ar fiziañs a lakaent ennañ a lennas a vouezh-uhel dezho aviel Sant Yann ha pasion Hor Salver a voe «selaouet ganto en un doare burzhudus» (hag int) o sellout ouzh an neñv hag oc'h ober ar memes lidou hag ar re a welent edomp oc'h ober».

Goude ar gouel iskis-se e savas Karter hag e dud war Venez-ar-Roue ma c'hellas gwelout ac'hano ouzhpenn tregont lev eus ar vro hag-eh bamet bepred gant an doare anezhi : «Etre ar menezio u emañ an douar kaerañ a c'heller gwelout, anezhañ douar da arat, unvan ha kompez»... «Hag e welemp ar ster keit ha ma c'helled sellout outi hag hi bras, ledan, ec'hon o vont wardu ar mervent» (penn. VIII). Distreiñ a ra Karter d'e lestrig ha, diskennet ar ster gantañ, ez erru e porzh **Kroaz-Santel** d'an 11 a viz Here. Eno eo an doa lezet e zaou lestr brasah. Savet e oa bet dirazo, e-keit m'edo Karter o veajiñ e diabarzh ar vro, ur c'hreñvlec'h «gwarniset gant kanolioù hag int e-ratre evit en em zifenn a-enep ar vro» (penn. IX). Pa voe degemeret gant tud ar vro e voe diskouezet dezhañ «krec'hin pemp penn-gwaz ledet war goadennoù evel krec'hin parch». Pennoù enebourien moarvat, da lavaret eo «skalpoù» a ranke dont da vezah ken brudet goude-se.

Chom a reas Karter hag e dud e porzh «**Kroaz Santel**» betek ar 6 a viz Mae 1536, e listri o vezah bet lakaet war ar sec'h gantañ.

38



«Bez' o deus ur c'heotenn ma reont ur bern bras e-pad an hañv evit ar goañv ; ... leuniañ a reont o c'horf gant ar moged ken ez a er-maez dre o genou hag o fronelloù... Lavarout a reont e talc'h anezho yac'h ha tomm...».

39

An «ffern yen»

Ha setu ma teuas ar goañv gant ar skornegi war an dour, daou c'hourhedad treuz dezho, ha pevar zroatad erc'h war an douar.

E miz Kerzu, pobl Stadekona a voe taget gant ur c'hleved ken grevus ma varvas un hanter-kant eus an Indianed ruz. Daoust ma voe difennet ouzh ar re-mañ dont war-dro ar c'hrehvlec'h hag al listri, e voe taget ivez tud Karter ken e lavar «e kreiz miz C'hwevrer, war 110 den edomp n'oa ket 10 anezho a oa yac'h»... (hag a-benn neuze 8 a oa marv hag ouzhpenn 50 n'edod ket o c'hortoz e chomfent bev). (penn. XV). N'edo ket Karter en e vleud, evel just. Petra 'reas eta en un degouezh ken ankenius ? An den a zoujañs Doue ma oa anezhañ, a lakeas lod eus e dud d'ober pedennoù ha lakaat ur skeudenn eus ar Werc'hez ouzh ur wezenn er-maez eus ar c'hrehvlec'h, ha lavarout un oferenn eno. Prometiñ a reas ouzhpenn mont da berc'hirinañ da «Roquemadou» (Rocamadour) ma rafe Doue dezhañ ar c'hras da zistreiñ da Vro-C'hall.

Ne oa ket, avat, Karter un den devot hep muiken. Ur fri-furch hag ul louarn e oa ivez. Dre ma oa dianav ar c'hleved a dage ken spontus e genvroiz e lakeas digeriñ korf un den marv da welout e pe stad edo an diabarzh anezhañ : ar galon a oa hollwenn ha gwehvet, ar skevent du-holl ha gwan, ar gwad du ivez ha flaeius. Ar «skorbut» an hini e oa.

Ar stad m'en em gave e dud enni a oa fall-put ha Karter hen gwele splann. Tregaset e oa ouzhpenn gant doare an Indianed. Bemdez e teuent da gantren en-dro d'ar c'hrehvlec'h ha sur-mat o doa ul lastez soñj ne dae ket pep tra evit ar gwellañ gant an dud wenn daoust ma klaake Karter kuzhat outo ar wirionez. Petra edont o vont d'ober ?

Evruruzamant evitah, unan eus an daou Indian a oa aet gant da Sant-Malou, Domagaya e anv, a ziskouezas dezhañ penaos e oa en em bareet e-unan p'edo taget gant an hevelep kleved un toullad deizioù a-raok. Reiñ a reas da Garter ur guchennad skourroù en ur lavarout dezhañ penaos ober ganto. Ret e oa o frikañ hag o lakaat da viriñ hag an dourenn bet a-zivarno, evet bep eil deiz, a rofe ar yac'hed en-dro d'an dud klehv. Sizhun goude e oa diglahvet holl dud Karter nemet ar 25 a oa marv. Ne ouzer ket re pe e oa

gant sapr ar C'hanada (*Abies canadensis*) pe gant ar sporn melen e rae an Indianed o vezah ma'z int mat an eil hag egile da yac'haat an dud taget gant klehved ar voraerien.

Evel m'hon eus gwelet an disfiziañs eo a rene bremañ etre ar re wenn hag an Indianed ruz. Ar re-mañ a oa gwell-levezonet gant Teguragni a glasse treiñ e genvroiz a-enep Karter. Donnakonna, aet da vale e diabarzh ar vro e-pad 2 viz, a zeuas en-dro gant un niver bras a Indianed ken en devoe Karter aon da vezah taget ganto. Evit argas an droug a oa e gor eo e vennas, moarvat, ober ur gouel bras.

D'an 3 a viz Mae, a oa gouel ar Groaz Santel, e lakeas Karter, hervez e voaz, sevel ur groaz koad, pemp troad ha tregont sav dezhi. Merket e oa warni : «Franciscus primus, Dei gratiâ, Francorum rex, regnat» pezh a ziskouez, da nebutañ, e oa anaoudek Karter ouzh e vadoberour. Donnakonna a oa eno gant e dud, ne grede ket re tostaat daoust ma oa aet Karter d'e saludiñ. Padal, war c'hourc'hennenn hermañ e voe tapet krog e Donnakonna, e Teguragni hag e Domagaya hag e daou Indian all. Petra a oa e soñj Karter oc'h ober an taol ganas-se ? Ne ouzer re.

Antronoz e teuas un niver bras a Indianed da gerc'hat penrener o meuriad nemet e viras Karter anezhañ. Donnakonna en em ziskouezas d'e genvroiz hag e lavaras Karter d'ar re-mañ ez afe gantah «ha goude bezañ komzet da roue Frañs, e vestr, ha kontet dezhañ pezh en doa gwelet er Sagene hag e lec'hioù all, e teufe endro a-benn 10 pe 12 loariad hag e rofe ar roue dezhañ un donezon bras». Laouen-bras (?) e voe Donnakonna o klevout kement-se, hervez Karter evel just, nemet ne c'hellomp ket bezañ sur eo ar wirionez rik.

D'ar 6 a viz Mae e kimiadas J. Karter, gant daou lestr nemetken, eus Kroaz Santel. Chom a reas en Enez ar C'helvez (*Île aux Coudres*) betek ar 16 a viz Mae. Bez' e rankas dont en-dro d'an enez-se na gimidas diouti da vat nemet d'an 21. Un ehan all a reas c'hoazh en Enez Vriou ha, goude bezañ tremenet e-biou da Enez-ar-C'hab-Breizhat, e skoas etrezek aod kreisteiz an Douar Nevez a heulias betek Inizi Sant-Per (*Sant-Per ha Mikelon*). Kavout a reas eno «meur a lestr ken eus ar Frañs ha ken eus Breizh» (penn. XXII)

Chom a reas en Enez Sant Per betek ar 16 a viz Mezheven. Un ehan diwezhañ a reas «en ur porzh anvet Rognousi (*bae an Anaon*) da gemer dour ha koad da dreizhañ ar mor». O vezah lakaet da ouel d'an 19 a viz Mezheven e tegouezhas e Sant-Malou, gant daou lestr nemetken, d'ar 16 a viz Gouere 1536.

*
**

Karter ne zegase gantah nag aour, nag arc'hant, na kouevr. N'en doa ket kavet, kennebeut, an hent misterius-se a greded e kase da Gatay. Kavet en doa, avat, ur vro

c'harv hag un douar strujus e-lec'h ma tlee, pell goude, ur bobl nevez kreskiñ. Dre ober tro an «Douar nevez» en doa kavet ivez an hent nevez etrezek ar Sant-Laorahs.

Bez' e c'heller, avat, en em c'houlenn petra eo deuet da vezah an Indianed ruz a boble ken stank riblou ar ster vras meurdeuz e oa bet Karter, meur a wach, bamet ganti. Siwazh Doue, planedenn o gouenn a ranke bezañ reuzedik meurbet evel ma voe hini ar paour-kaezh Donnakonna na zistroas ken d'e vro. Daou vloaz ne oant ket peurdremenet ma oa aet da anaon war un douar estren...

(Da gendrec'hel)
L. ANDOUARD

pedenn an iliz

gement-se a gaver e skridoù ar skrivagner pagan Takitus (Annales XV, 44), ha gant Klemens, eskob Roma en e lizher da Gorintiz (pennad 5-6).

Tennet eus Lizher Sant Klemens kentañ, Pab, da Gorintiz (Cap. V, I-VII, 4; Funk I, 67-71).

«Gouzañvet a deus en abeg da warizi an dud, ha deuet da vezañ skouerioù dispari.»

*
**

Lezomp a-gostez skouerioù ar re gozh, ha deomp da gaout ar c'houroned a zo tost deomp ; kinnigomp skouerioù kalonek hon amzer-ni. En abeg d'ar warizi ha d'an avi, ar re a oa ar re uhelañ hag ar re reishañ en o zouez, ar pileroù, o deus gouzañvet gwallgaserezh, ha stourmet o deus betek ar marv.

Lakomp dirak hon daoulagad an Ebestel benniget. Per hag a c'houzañvas dre ur warizi displeal, n'eo ket ur boan bennak pe ziv, met kalz, ha goude bezañ douget e desteni ez eas da lec'h ar c'hlod evel m'en devoa dellzet (meritet). En abeg d'ar warizi ha d'an dazuvaniezh en deus diskouezet Paul talvoudegezh ar basianted : seizh

30 A VIZ MEZHEVEN
Merzherien gentañ Iliz Roma
En heskinerezh kentañ digoret gant an impalaer Neron a-enep d'an Iliz, goude tangwall Ker-Roma, er bloaz 64, e voe lakaet kalz a gristenien d'ar marv e-kreiz bouereverezh kriz-meurbet. An testenit war 41

gwech taolet er chadennoù, harluet, meinnet deuet da vezañ embannour an Aviel, er Sav-Heol hag er C'huzh-Heol, ha gonezet gantañ dre e feiz ur vrud hep par. Goude bezañ kelennet ar reizhded d'ar bed holl, ha deuet betek harzoù ar C'hornog, e rentas e desteni dirak an dud e-karg; evel-se e kuitas ar bed evit mont d'al lec'h santel, en ur chom ur skouer veur a basianted.

Gant an dud-se, renet ganto ur vuhez santel, ez eus deuet d'en em unanif engroezioù bras a dud hag o deus diwasket bouerevezh kriz ha gwaskerezh a bep seurt, ha deuet int da vezañ skouerioù eus an uhelañ en hon touez. En abeg d'ar warizi, maouezed, evel o c'hemand-all a Zanaidezed hag a Zirkerezed a c'houzañvas gwall-heskinerezh, ha goude bouerevezh a bep seurt ha disakr, e kerzhjont betek ar penn gant startijenn, dre hent ar feiz, hag e c'honezjont ar gopr gloriüs, evito da vezañ gwan o natur.

Ar warizi eo a zistrannas speredoù ar gwagez diouzh o gwazed hag a gemmas lavar hon tad Adam «Hemañ eo an askorn eus va eskern, ha kig eus va c'hig» (Gen. 2, 23).

Ar warizi hag an dizunvaniezh o deus diskaret kêrioù bras, ha distrujet en o fezh pobloù niverus.

Skrivañ a reomp kement-se, Breudeur karek, evit degas da soñj deoc'h eus ho tlead, met ivez evit reiñ ali dimp-ni-hon-unan, rak holl emaoomp war an hevelep tachenn hag emañ an hevelep emgann ouzh hon gortoz.

Dre-se eta, lezomp a-gostez ar prederioù goull ha didalvez, ha distroomp da reolenn gloriüs ha santel hon hengoun; ha gwelomp petra a zo hetus dirak an Hiniñ deus hor c'hrouet.

Paromp gant evezh hon daoulagad war gwad ar C'hrist, hag anavezomp pegen prizius ez eo dirak Doue, ar gwad-se bet skuilhet evit hor silvidigezh hag a ginnigas d'ar bed holl gras ar binijenn.

RESPONT

R : *Kinnig a rejont o c'horfoù da vezañ bourreviet abalamour da Zoue. Ha meritout a rejont kurunenoù peurbadus.*

V : *Ar re-mañ eo ar re a zo deuet eus an drubuilh vras hag o deus gwalc'het o dilhad e gwad an Oan. Ha meritout a rejont...*

MEULEUDIOU AR MINTIN

Antif. (onenn) ar ben. (edictus) :

Ur bobl diniver a verzherien a chomas start en o c'harantez a vreudeur, dre na oa ganto nemet ur spered hag ur feiz hepken.

Kempedenn

Kensakret hoc'h eus, Aotrou Doue, amzerioù kentañ frouezhus Iliz Roma dre wad ar Verzherien :

Roit dimp, ni ho ped, an nerzh da chom start ha divrall da heul ar re o deus gourenet en ur stourmadeg ken bras, hag a levezon da vezañ trec'h bepred en emgann santel.

GOUSPEROU

Antif. (onenn) ar Magn. (ficat) :

Karout a rejont ar C'hrist e-pad o buhez, skouer a gemerjont warnañ en o marv : ha setu perak emaint o ren gantañ da virviken.

28 A VIZ GENVER

**An Den Evurus, Juluen Maner
lesanvet an Tad Mat, beleg ha misioner**

Ganet e oa bet Juluen Maner, d'an 1 a viz Here 1606, e parrez Sant Jord Restembaod, en eskopti Roazhon. E dud a oa tud brudet abalamour d'o c'harantez kristen. Abred e tiskouezas Juluen merkoù eus e santelezh da-zont. Kaset e voe da skolaj Roazhon. Eno, kerket ha ma klevas komz eus labourioù an Tadoù misionerien eus urzh ar Jezuided, e Bro-Indez hag e Japonia, e c'houlennas bezañ degemeret en urzh-se. Ur wech echu gantañ e neveziallezh, e teskas ar skiantoù-sakr. Evel kendiskible dezhañ en devoa Sant Izaag Jogues ha Sant Gabriel Lalemant. Karget e voa d'ober skol d'ar vugale hag e teuas neuze da vezañ brudet evit e ampartiz da gelenn. Daoust ma oa bepred e soñj mont d'ar C'hanada evel misioner, e reas anaoudegezh gant Mikael Noblez, ur beleg troet a-grenn gant silvidigezh ar Vretoned, hag hemañ sklerijennet gant Doue a gomprenas e oa galvet Juluen da vezañ e heritour... Neuze ec'h en em santas Juluen douget d'ober war-dro an dud kaezh dibourvez eus a sikourioù ar relijion. Setu perak, et chapel anvet e brezhoneg **Ti Mamm Doue**, e c'houlennas gant fiziañs, digant ar Wer-c'hez, an anaoudegezh eus ar yezh diaes-meurbet n'eo ar brezhoneg, pa ne

ouie ket anezhañ, ha roet e voe e vennad dezhañ.

E-pad m'edo o studiañ an Doueoniezh, e kouezhas gwall-glañv; neuze e reas al le d'en em reiñ d'ar misionoù, e Breizh, hag e noz an Nedeleg, ec'h en em gavas yac'h en un taol. Goude ma oa bet beleget, e voe galvet da zistreiñ da Gemper. E-pad 42 vloaz e kasas da-benn labourioù bras. Mont a reas hep ehan dre seizh eus eskoptioù Breizh. An holl dud a bep stad, dreist-holl ar beorien, labourerien-douar, tud a vor, pesketaerien, a servijas hag a gelennas gant ur garantez hep he far, dre e sarmonioù hag e guzolioù. Ober a reas vad koulz d'ar veleien evel d'ar bobl, rak dastum a reas en-dro dezhañ ur mil bennak a veleien evit reiñ ul lañs divent d'al labour bouc'het gant Mikael Noblez. An darnvuiañ anezho a zeuas da vezañ prezegerien eus ar gwellañ, pe bersoned a dalvoudegezh; met koulskoude ez eo war gont o mestr karek eo e lakaent kement vad a raent e gwinienn an Aotrou. Setu perak e teuas da vezañ anvet un tamm dre-holl : Abostol Breizh, hag e tellezas bezañ laketañ gant Eskob Landreger keñver-ha-keñver gant Sant Visant Ferrer.

Dont a reas a-benn da zastum un eostad ken bras a eneoù n'eo ket hepken dre e gomzoù, met ivez dre e skouerioù. Un izelded dreist-ordinal a weled o lugernif ennañ, kement ha ken bihan ma c'houzañve an dismegeañs, distrafulh, hep diskouez netra a-ziavaez; troet e oa dalc'hmat da bedif; hep ehan, e taole evezh war skiantoù e gorf; pur ha glan e oa evel un ael. Ha n'eo ket burzhudoù eo a vankas evel testenioù a-berzh madelezh an Aotrou Doue; ar galloud da bareañ, ar vestroni war nerzhioù ar bed ha war an drouksperedoù, an anaoudegezh eus an traoù kuzhet, diouganif an amzer-da-zont.

Hag eñ leun gant kement a veritoù hag a zonezonoù, e voe roet da c'houzout dezhañ e kêr Sant-Brieg, a-berzh Doue, edo warnes mervel. E-pad ma haste etrezek Kemper, e kouezhas klañv gant an derzienn hag un taol-gwad en e skevent, hag uzet gant ar c'hleñved, e varvas, evel m'en devoa diouganet, war zouar Sant-Kaourintin, e-giz ur paour, goude m'en devoa nac'het chom da loaji e ti un den a-noblañs, mignon dezhañ. Treman a reas en ur boket d'ar grusif, d'an 28 a viz Genver, er bloaz 1663. Nebeut amzer goude, e voe kaset e galon da Gêr-Gemper hag eno e voe degemeret gant 43

ar brasañ doujañs hag enor gant an eskob hag ar bobl. E relegoù avat, bet miret en iliz parrez Plevin, a zo bet enoret hep ehan, e-pad tri c'hant vloaz, gant an dud fidel o c'houlenn digantañ, gant fiziañs, grasoù ha pareañsoù. Ar beleg-se fidel-meurbet, hervez kalon an Aotrou, a voe laketañ, goude ma oa bet aprouet, hervez Lezenn an Iliz, ar burzhudoù graet drezañ, war roll an Dud Evurus gant ar Pab Pius XII.

RESPONT

R : *An den-mañ a reas kement en devoa luvaret Doue dezhañ, hag e lavaras Doue dezhañ : Deus e diskuizh da vestr. Rak gwelet em eus e oas reizh dirazon eus a-douez an holl bobloù.*

V : *Hemañ eo a reas fue war vuhez ar bed hag a dizhas kaout Rouantelezh an Neñv.*

Kempedenn

Aotrou Doue, c'hwi hag hoc'h eus en un doare efedus, dre labourioù an Den Evurus, Juluen Maner, adenaouet e kalonoù an dud, ar feiz aet war ziskar,

plijet ganeoc'h reiñ dimp ar c'hras, gant sikour e bedennoù, da chom stag-mat ouzh ar feiz-se, ha da ziskouez en hon oberoù ar sklerijenn a skuilh en hon eneoù.

*
**

28 A VIZ KERZU An Inosanted Santel, Merzherien

Matinezoù : Ofis al Lennadeg

Eil Lennadenn

Tennet eus a Sarmonioù Quodvultdeus Eskob (Sermo 2 De Symbolo : PL 40, 653)

«N'int ket gouest da gomz hag ec'h anzavont ar C'hrist».

Ganet eo ar bugelig bihan, eñ ar Roue Meur. Eus a bell eo degaset ar Vajed davetañ, dont a reont d'e azeulif hag eñ gourvezet c'hoazh er prehez, met o ren en neñv ha war an douar. Pa gemenn ar Vajed ez eo ganet ar Roue, ez eo strufulhet Herodez, ha gant aon da goll e droun e fell dezhañ lazhañ an Hini ha ma kredfe ennañ, e vije e surentez amañ war an douar, hag e renje da viken er vuhez da zont.

Petra a zoujz, Herodez, o klevout ez eo

ganet ar Roue ? Ne zeu ket hemañ d'az tiskar, met da drec'hifi war an diaoul. Met, pa ne gomprenet ket se, ez out strafuilhet hag e tiskouez krizder, hag evit kas da goll an hini nemetañ emañ o klask, e teuez da vezañ kriz hag e lakez d'ar marv kement a vugaligoù.

Na teneridigezh ar mammoù o ouelañ, na kañvoù an tadoù o c'harmañ d'o bugale, na yudadennoù ha gwic'hadennoù ar vugaligoù, ne reont dit kemmañ menoz. Lazhañ a rez ar re a zo bihan a gorf, dre n'emañ ket an aon ouz da lazhañ te ez kalon ; hag e kav dit, mar kasez da benn ar pezh a c'hoantez ober, e c'helli bevañ pell, p'emaout end-eeun o klask lazhañ ar Vuhez !

Hennezh hag a zo ar c'hras, hennezh bihan ha bras, hag a zo gourvezet er prezeb, a ra aon d'az tron, met drezout-te, hep gout dit-te, e tegas e vennadoù da wir, hag e tiffamm an eneoù eus a sklavelezh an droukspered. Degemeret en deus bugale e enebourien e-touez an advibien.

Ar vugale vihan a varv evit ar C'hrist, hep gouzout dezho, ar gerent a ra kañvoù d'ar verzherien o vervel : met Hennezh gant bugale ha ne c'hellont ket komz, a ra e destoù gwirion. Setu penaos e ren an Hini a oa deuet da ren evel-se. Setu dija an dieuber o tieubifi, hag ar Salver o reñt ar silvidigezh.

Met te, Herodez, pa ne ouzout ket se, a zo strafuilhet hag a ziskouez krizder ; ha tra m'emaout o tiskouez krizder e-kefver ar Bugel, e rentez dija enor dezhañ, ha c'hoazh ne ouzout ket !

O donezon bras ar c'hras ! Dre beserit meritoù gonezet ganto ez eo bet aotreet da vugaligoù trec'hifi er stumm-se ? Ne gomzont ket c'hoazh hag e-h anvont ar C'hrist. Ne c'hellont ket c'hoazh dre fivadennoù o izili talañ ouz ar stourm, ha dija ez a palmerenn an trec'h ganto.

Disk. 5, 14 ; 4, 10 ; 7, 11

RESPONT

R : Azeulif a rejont an Hini a vev e kantvedoù ar c'hantvedoù. En ur deurel o c'hurunenoù dirak tron an Aotrou, o Doue.

V : Kouezhañ a rejont dirak an Tron war o genou, ha bennigañ an hini a vev e kantvedoù ar c'hantvedoù. En ur deurel... 44

TE DEUM

Kempedenn

Aotrou Doue, da geñver an deiz-mañ, an Inosanted santel, merzherien, a ganas meuleudi deoc'h, nann gant o zeed met dre o marv.

grit eta, ni ho ped, m'en em ziskouezo hor feiz neket hepken diwar-bouez hon teod, met ivez dre hor buhez.

«PEDENN AN ILIZ»

Ur brevel e brezhoneg, levrenn a 320 pajenn roneoskrivet, ment 21 x 29, o kinnig un droidigezh diwar levr ar C'hallegerien : «*Prière du temps présents*». Souezhet moarvat a vo unan o welout pegel eo bet dav gortoz evit ma zeufe e-maez al levr-mañ evit ar Vrezhonegerien a bilj dezho pedañ e yezh o bro ; souezhet c'hoazh pa soñjer e tes al labour-se diwar intrudu prevez. Siwazh n'en duss ket gallet an embanner ober moulañ e obereun : setu an tonkad m'eo redlet dezhañ an darn eus hon embannadurioù brezhonek.

«PEDENN AN ILIZ» a zo e gwerzh evit 25 Lur e ti an oberour, J. Lec'hvien, 22110 Kergist-Moñhoù. Ar re a zo mennet da implijout al levr-mañ a ranko pourchas ouzhpenn :

- Ar Bibl Santel, gant M. Giannour, emb. Al Liamm
- Levrioù ar Bibl, gant Per ar Gall, e ti an oberour e Lokarn 22340
- Lenadennoù diwar an Tadoù, gant Klerg, 22300 Bullen

DEIZIADUR GODELL 1978

An dek : 10 Lur
 Distal 1/3 adalek 50
 Kasit ho chekenn hag ho koulenn da :
 R. HUON - 2, Venelle Poulbriquen, BREST
 CCP R. Huon 1629 14 Rennes
 Embannet gant AL LIAMM

Ul levr haer da brofañ :

ITRON VARIA GARMEZ gant Youenn Drezen

323 pajenn, 48 skoudeñ gant R.Y. Kreston
 Priz 58 Lur
 War baper kaer 70 Lur
 E pop stal a-zoue hag e ti :
 Melle J. QUELLE, 47, rue Notre-Dame
 22200 GUINGAMP - CCP 1136 82 Rennes
 Embannet gant Al Liamm (Ronan Huon)

KELEIER BERR

DIWAN :

Goude skolioù Lambaol-Witalmeze ha Kemper, setu an deirvet skol-vamm savet gant ar c'hevredad Diwan, e Plouenour-Menez. D'hor meno, mar deo un dra vat goulenñ ar muiañ ar gwellañ brezhoneg er radio hag er skinwel, ez eo ken ret ha reoc'h marteze kas ar stourm war dachenn ar skolioù hag a zo oc'h ober ur ruga, ya unan c'hwec'h, a-enep ar yezh... Mar deo youlet ar vrezhonegerien da saveteñ o yezh ha da reñt dezhi ul lañs nevez, hennezh eo an hent da heuliañ. Evel just, bugale vihan, trubuilh vihan, bugale vras, trubuilh vras, rak a bep ma kresko bugale ar Skolioù-Mamm e kresko ar c'hudennoù. Unan a zaou : pe e kemero ar Stad ar skolioù-se war he c'hont, hag e vo ret diwall na lakfe he fri pelloc'h eget ne deo dileet, gant aon da zeufe da laourif an traoù. Pe e nac'ho (gant ar spi da welout an traoù o kouezhañ), met neuze e vo tu da gas an afer war an dachenn etrevroadel. Evit pezh a sell ouz an Iliz, e vo dav dezhi soñjal, da vihanañ, mar bez kerent ar vugale a-du, katekizañ ar vugale-se en o yezh naturel. Chafis ha berzh-mat d'ar skolioù nevez !

AFER REUN RICHARD :

Unan eus an displegerien er Radio brezhonek : Reun RICHARD, en deus roet e zilez dre ma ne veze ket paet a-walc'h (22 a viz Here 1977). Grevusoc'h e c'helle an afer-se bezañ eget hini Charlez ar Gall, pa roas e zilez, goude ma oa bet dilostet dezhañ ur frazenn bennak, er Skinwel, o vezañ ma c'houlenne sikour evit prizidant an FLB-ed. Seurt degouezhoù a zo dispar evit ober bruderezh. Dav implijout faziou an enebour evit ober dezhañ plegañ.

SPORTOU :

Tra m'emañ c'hoarierien-vellroad an Naoned o zroad er pal, emañ strollad (bet) brudet Roazhon o vont war-draoñ.

Arabat ankouazh ez eo ar c'hoari mellroad evel ur sport broadel evit ar Vretoned —hag estreget evit ar Vretoned !— N'eus bouc'h ebet koulz lavarout e-lec'h n'eus ket ur strollad c'hoarierien, gant meur a gverenn hervez osad ar c'hoarierien. Ar c'hoari hirvell a zo evit paotred ar c'hreisteiz, ken ez eo fentus klevout ar Frañsien o komz eus ar strollad hirvell «broadel», pa n'eus nemet an hanter (an hanter izelañ) eus ar c'hwec'h kogneg o pourchas ar seurt c'hoarierien. Pep hini a ro an anv a gar d'e loen.

KUDENN AR POLISARIO :

Er Sahara, etre Maroko, Maouritania hag Aljeria, ez eus ur bobl hag a fell dezhi bezañ anavezet evel ur gwir vroad, ha sevel ur gwir Stad : ar Sarahoui. Harpet ez int, anat eo gant Aljeria, nemet ez eus estrañjourien, ispisial Frañsien. Ha Bretoned o labourat e Maouritania hag a zo bet tapet gant ar Polisario-meur a hini anezho, en o zouez daou Vreizhad. Komz a ra Gouarnamant Pariz eus «gouestlidi» hag ar Polisario eus «prizonidi» : hervez ar ster a roer d'ar gerioù eo aes kompren peseurt menoz a zo e penn an dud. Merkomp an taol hep e bar graet gant an UDB, o toullañ kaoz dreist penn Gouarnamant Pariz gant dileuridi eus ar Polisario, a-du gant an daou Vreizhad prizoniad. Ur jestr dezhañ ur ster etrevroadel, forzh pegen diefed e c'helle bezañ, marteze... Un afer a interest ekonomikel ne deo ken eus an holl gabaduilh-se.

PREZIDANT REPUBLIK ARABIAT AN EJIPT O VONT D'OVER GWELADENN DA ISRAEL (19-20 a viz Du 1977).

Ur galv diehortoz a-berzh Anouar el Sadate, preziant Republik arabiat an Ejipt : goulenñ bezañ degemeret gant Stad Israel. Ha degemeret eo bet e-kreiz an enorioù brasañ. Dises eo gouzout petra a zeuio ac'hano, met ur jestr heuliet gant sebez gant ar bed-holl ez eo bet. A-raok kas o gourc'hemenn, o deus an 9 bro eus ar Gummiezh europat gortozet evit gwelout petra 'soñje ar broioù arabiat ! Politikerezh a zo politikerezh ha bisnes a zo bisnes, dreist-holl evit pezh a sell ouz an eoul-douar.

ALI D'HOR C'HOUMANANTERIEÑ

Pedif a reomp hor c'houmananterien da bezañ o adkoumanant hep dale. Warlene (1977), e oa chomet 60 anezho ha n'o doa ket paet c'hoazh a-benn mix Gwengolo !

Un dra difrez avat, ez eo evit ar re a fell dezho terriñ o c'houmanant : degas ar gele'he-laouenna en-dro gant ar meneg «refus» war ar golo. Ha netra ken.

Priz ar c'houmanant :

- Boutin : 36 L
- Estrañjour : 40 L
- Studierien : 32 L

Revue BARR-HEOL
 22300 LANNION - Pellgomz (96) 37.64.37
 K.R.P. 245-453 ROAZHON

NAMIBIA

Kalz trouz a vez graet bremañ en-dro da Afrika-ar-C'hreisteiz, dreist-holl, abaoe m'eo bet roet o frankiz da Vozambika ha da Angola, bet o-div, abaoe kantvedoù, dindan dalc'h Portugaliz.

Ankeniet e c'heller bezañ diwar-benn amzer-da-zont ar rann-se eus ar bed, rak kudennoù niverus ha diaes-diaes a zo eno da zirouestlañ. Hag, ouzhpenn, ar Broadoù Unanet (sañset) n'o deus ket diskouezet, betek-hen, e oant gwall-varrek d'hen ober.

Daoust pe zaoust, unan eus ar broioù a vez komzet bremañ ar muiañ diwar he fenn a vez graet anezhi Namibia.

Namibia, petra an diaoul eo se hag e pelec'h emañ-hi ? Sed petra a c'houlennno an darn vuiañ eus an dud, zoken marteze ar re a ra brud en-dro d'an orañjez suafrikat a garfent skarzhañ eus hor marc'hallec'hioù.

Afrika-alaman-ar-Mervent

An XIX-^{vet} kantved a zo bet hini an trevadennoù. En dibenn anezhañ, e oa aet an darnvrasañ eus Afrika gant ar Saozon hag ar C'hallaoued hep komz eus Belgiz, Portugaliz ha me 'oar. Pa fellas d'an Alamanned, war an diwezhat, kemer o lod, ne chome ket kalz douaroù diberc'henn. Unan eus ar re-mañ a oa war aod ar Mor Atlantel, etre Angola perc'hennet gant Portugaliz, ha rannvro ar C'hab, dindan dalc'h ar Saozon.

Pa zouaras an Alamanned eno, e 1883, ha pa'z aloubjont diabarzh ar vro, e teuas houmañ da vezhañ an «DeutschSüd-West-Afrika» pe, en hor yezh-ni, «Afrika-Alaman-ar-Mervent».

Ur vro vras eo anezhi bremañ, kement ha seizh gwech bennak warn-ugent gorread Breizh. Nebeut a dud a zo o chom warni, avat, rak ne sav ar boblañs anezhi nemet da 900 000 den bennak. Daouzek gouenn a yafe d'hec'h ober (1).


E-kehver douaroniezh n'eo ket unvan ar vro kennebeut. Teir lodenn vras a ya d'hec'h ober, dre vras, en tu all d'un arvor izel ha strizh-meurbet.

a) ar biz, anezhañ ur rannvro drovanel. Un uhelgompezenn eo o sevel da vil metr well-wazh a-zioc'h live ar mor. Gieborek a-walc'h eo ken e c'hell an douar bezah gounezet. Poblet eo gant morianed a vez graet **Ovamboed** anezho. Brudet e oant gwechall evel ar re zahjerusañ eus holl veuriadoù Afrika-alaman-ar-Mervent. Ur seurt emrenerezh, ha na blij ket d'an holl, a zo bet roet dezho e 1968 gant an **Unvaniezh Suafrikat**. Muntret eo bet penn gouarnamant an **Ovamboland** d'ar 17 a viz Eost 1975.

b) E-kreiz ar vro e kaver an **Herreroed** ha gouennoù all. Uheloc'h c'hoazh eo bro ar re-mañ eget hini an Ovamboed peogwir emañ warni menezioù a sav o c'hribennoù da 2 700 metr a-us da live ar mor. Ur vro dorosennek eo hag a zo bet lakaet alies kehver-ha-kehver gant ar Forest Zu, en Alamagn, pe ar Vojennoù, e Bro-C'hall. Klouar a-walc'h eo hag abalamour da-se e plijas kalz d'an Alamanned en em ziazezas enni dreist-holl, hag e savjont eno o c'hêrbenn : **Windhuk** pe **Windhoek** an anv anezhi (2). Ur bobl a saverien-chatal eo an **Herreroed**. An ejened, dreist-holl, a zo niverus ganto, hag e veze kenberc'hennet o zropelladoù gant an holl, hag en abeg da-se ne ziskouezjont ket kalz a vall da vont da vevelien gant Europiz. N'emaint ket o-unan e-kreiz ar vro peogwir e kaver eno ivez un **Damaraed** hag ar **Bushmen** pe «*gwazed ar strouezheg*» (3). Etre 1897 ha 1902 e voe savet ur strizh a hent-houarn, 75 lev an hirder anezhañ, gant an arme alaman etre porzh **Swakopmund** ha kêr **Windhoek**.

k) **Kraisteiz ar vro** a zo izeloc'h ha sec'hoc'h eget ar c'hreiz anezhi. Mont a ra betek ar ster **Orange** a dalv da vevenn etre Afrika-alaman-ar-Mervent ha Rannvro ar C'hab. Poblet eo gant an **Hottentoted**. Hervez tud 'zo ne vefe ket morianed anezho rak n'eo ket du o c'hroc'henn, melen ne lavaran ket. Lod a lavar e vefent speredekoc'h eget ar vorianed daoust d'o anv, hag a zae a-ziwar an hollandez «*Hütentüt*» a dalv kement ha «sod» (4).

Kavout a reer ivez er vro hironed a ra «*Bastarded*» anezho o-unan. Ganet e vezont a-ziwar dimezioù etre **Boered** ha



bet gwechall "Afrika Alaman ar Mervent"

merc'hed hottentot. Komz a reont hollan-deg.

An trevadennih o vont war-raok

Evel m'eo bet gwelet dija e vev —pe e veve— an dud a-ziwar ar sevel-chatal dreist-holl hag en ur vro ha n'eo ket re zruz ar peuriñ enni, ha ret eo kaout kalz a zouar evit-se. 20 devezh-arat douar a zo ret kaout da sevel ur penn chatal. Ret e oa eta e savfe tabut, abred a-walc'h, etre an henvroidi hag an drevadennerien alaman a felle dezho ober ur «vro wenn» eus Afrika ar mervent. Ar meurgompagnunezhioù alaman, da gantañ, ar gouarnour, da c'houde, a brenas tachennoù bras evit dister-briz, d'o reiñ d'an drevadennerien, ha lod eus ar re-mañ a reas, zoken, o annez e lec'hioù a blije dezho hep damant da wirioù an henvroidi. Heñvel a-walc'h e teuas stad ar re-mañ ouzh hini Indianed ruz Amerika ken, e klever en o c'hlemmoù evel un heklever eus klemmadeg an eil re : «Spontet omp», eme un Herrero, «o welout an douaroù o tremen, an eil re goude ar re all, etre daouarn ar re wenn ha, rak-se, e pedomp uvel an Ao. Gouarnour da chom hep gwiriekat ebet amañ e kornbro an Nosob gwenn, ha da lakaat berz war an holl dachennoù chomet diwerzh, evit c'hoazh, evit ma vezimp, ni hag hor bugale, e surentez da lavarout eo m'hon devezo ul lec'h ma c'hellfemp chom ennañ ha gounit liorzhoù» (7 500 mereuri dalc'het gant ar re wenn a vefe er vro hiziv).

Evel en Amerika

Evel en Amerika, enta, e veze kaoz, ha zoken gant broiz, da sevel tachennoù berzet (rezervation). Nemet ma oa an holl a-du gant ar ratozh-se ne oa ket heñvel ar pezh a soñjed diouto. Evit an henvroidi e ranke an tachennoù berzet bezañ bras-meurbet, dezho da vezañ barrek da vesa o zropelladoù warno, ha derc'hel da vevañ evel o hendadoù. A-du ganto edo ar visionerien. An drevadennerien n'eo ket hennezh e oa o menoz. Evito e ranke an tachennoù berzet bezañ seurt kampoù-bac'h ma vefe bodet enno tud ar vro, ha ma c'hellfe ar re wenn kavout labourerien diouzh o c'hoant. Ar gouarnour o vezah degemeret kentoc'h menoz ar visionerien ez eas war-drenkaat an darempredoù

etrezah hag e genvroiz a rebeche d'ar gouarnamant bezañ re wan.

A-enep d'ar pezh a c'hellfemp krediñ, ne gasas an Alamagn d'an drevadenn nevez ar soudarded kentah nemet e 1891. Daou vloaz goude ne oa ket c'hoazh er vro 50 anezho. Abalamour da se e klaskas ar gouarnour lakaat an dizunvaniezh da ren etre ar gouennoù. Klask a reas ivez diskouez an nebeut a nerzh a oa gantañ hag, e 1893, e tagas, hep ma vije bet diskleriet ar brezel, ur meuriad Hottentotet renet gant ar «c'haptain» Hendrik Witbooi ha chomet dizalc'h betek-hen. Ne voe ket peurdrec'het an Hottentotet a viras o armoù, nemet ez anavezjont hiziviken beli an Alamagned.

Daoust d'an taol-brezel-se e chome gouarnamant ar vro kentoc'h a-du gant an henvroidi, pezh na blije ket d'an drevadennerien. El lezioù-barn, avat, e talvez e buhez un Alaman kalz muioc'h eget hini un henvroad. Etre 1894 ha 1900 evit 6 den gwenn muntret e voe barnet 15 henvroad d'ar marv hag unan all a voe lakaet en toull evit e vuhez a-bezh. Er bloaz 1896 hag etre 1901 ha 1903, 5 den eus ar vro a voe lazhet gant tud wenn a bakas evit-se etre 3 mizvezh toull-bac'h ha 3 bloavezh, unan all o vezah barnet da dremen 5 bloavezh hanter er galeoù.

An emsavadeg (1904-1907)

N'eo ket souezh eta m'en em savas an henvroidi a-enep d'an Alamagned. Kregih a reas ar stourm diwar un darvoudig dister : ur penndehved aet, dre laer gant «kaptein» ar Vondelzwarted. Pa fellas, avat, d'al letanant alaman kregih el laer e voe taget gant tud ar meuriad ha lazhet a-unan gant daou soudard alaman a oa gantañ (25 Here 1903).

An emsavid, anezho tud eus ar c'hreisteiz pellañ, a c'helle pe en em repuñ er menezioù pe mont en tu-all d'ar stêr-Orange. Bez'e c'hellent kaout pourvezioù-brezel aes a-walc'h abalamour da-se. Pa gasas an Alamagned di un darn vat eus o gwarnizonoùigoù e kredas an Herreroed e oa deut evito ar mare d'en em sevel. Kemenn a reas neuze o fennrener Samuel Maharero e anv, d'an holl gabitened (11 Genver 1904) en doa gourc'hemennet d'an holl wazed dindanañ chom hep kregih en dud-mañ : Saazon, Bastarded, Damarad ar menezioù, Hottentotet ha

Boered. An Alamagned eo, enta, a oa an enebourien, hag a-benn daou pe dri devezh e voe lazhet an holl re en em gave o-unan en Damaraland : 123 den a voe diskaret.

C'hwec'h miz goude e voe tro Hendrik Witbooi, hon eus graet anadudegezh gantañ dija, d'en em sevel. Hemañ ne oa ket un den ordinal, ha daoust d'e gozhni, e voe ur penn-brezel ampart ha kalonek. Un den relijius anezhañ, kenlabouret en doa pell gant an Alamagned ha skoazellet anezho zoken e deroù ar brezel. Trumm e reas e venoz, ha lazhet e voe an holl Alamagned en em gave en e gornbro evel ma oa bet graet en Damaraland.

Tri bloavezh e padas ar brezel hag evit dont a-benn eus an emsavid e voe ret d'an Alamagned kas 14 000 a' soudarded d'o zrevadeñ, ha dispign arc'hant bras.

Evit gwir daou vrezel a voe, disheñvel-krenn an eil diouzh egile : unan berr a-walc'h a-enep an Herreroed a zeuas a-benn da vodañ, waf un dro, betek 6 pe 7 000 fuzuilh, hag egile a-eriep an Hottentotet a badas pelloc'h.

Trec'het e voe an Herreroed e-harz menezeg ar Waterberg en un emgann a badas daou zevezh (10-12 Eost 1904).

A-strolladoù bihan eo e tage an Hottentotet an Alamagned, pa gavent tro d'hen ober, hag e tec'hant goude ar buanañ ar gwellañ. En abeg d'ar brezel bihan-se ne deujont a-benn eus Hendrik Witbooi nemet d'an 29^a viz Here 1905. Lazhet e voe en ur pech-brezel. E vuariad, ur wech dibennet, en am zaskoras.

Ar Vondelzwarted avat, a stourmas c'hoazh a-pad ur bloavezh a-bezh. Kavet o doa e Jakob Morenga ur pennrener ken akuit ha Witbooi met taeroc'h egetañ. Speredek e oa. Komz a' rae hollandeg, saozneg hag alamaneg. Stourm a reas betek fin 1906 pe e menezeg ar C'harras, pe war ribl ar stêr Orange. E dud, avat, a skuizhas hag en em zaskoras d'an Alamagned gant ma ne vijent ket kaset d'ur vro all.

O vezañ kavet repu en tu all d'ar stêr e vodas Morenga en-dro dezhañ un eizh-ugent brezelour bennak. Pa glaskas, avat, treuzin ar vevenn, e miz Gwengolo 1907, e kavas dirazh an Alamagned hag ar Saazon hag ar re-mañ eo a lazhas anezhañ d'an 22 eus ar miz-se, e gouelec'h ar C'halahari.

Krizder ar brezel

Echu, evit ar mare, e oa ar brezel, met kriz-meurbet e oa bet evel m'hen danevel-las deomp ur romantour alaman (5) a zisplegas petra e voe buhez ar soudarded alaman kaset di ha, war un dro, hini o enebourien.

«Dre ma'z aemp war-raok, dindan an heol grizias, e teue an hent da vezañ tristoc'hristañ. Pegen izel en dimegafas e oa kouezhet ar bobl lorc'hus, gouez ha faeüs-se ha hi ankeniet-marv Dre-holl e-lec'h ma pare va sellioù, hi ma war va marc'h divi, e oa strewet a-vernioù kement a oa bet perc'hennet ganti : ejened, kezeg, givri ha chas, pallennoù ha krec'hin. Un toullad bugaligoù dinerzh ha diskozell a oa astennet a-stok ouzh merc'hed, goullou hag a-istreibih o divronn hir ; Reoù all, en o gourvez un tammig pelloc'h, a oa leun o daoulagad hag o fronello u a gellen hag int bev bepred koulskoude. Kaset e voe dezho hor charretourien du ha, me 'gav din, n'o deus graet nemet skoazellañ anezho da vervel. O welout an holl grouadurien douar-iskis hag int en o gourvez war an douar, iskis o jestroù, an holl anezho, tud ha loened, evel m'edont kouezhet, dilezet, pounner, o finval c'hoazh pe difiniv-kaer dija, ho piñe lavaret e oant kouezhet holl aus bolz an nefivoù.

Wardro kreisteiz e chomjomp asav e-kichen poullou-dour leun-barr a gofou marv. O zennañ a rejomp alese gant sternadoù kezeg hor c'hanolloù ; ne oa, avat, ar foñs anezho, nemet dour gwadek ha flaeñtus. Klask a rejomp kleuzañ donoc'h an douar nemet ne deuas takenn dour abet. Geotenn ebet kennebeut-all evit ar c'hezeg. Fiamminañ a rae an heol war an traëzh ken n'hellemp ket mont en hon gourvez warnañ. Derc'hel a rejomp da vont war-raok war hor c'hezeg bourreviet gant ar sec'hed, ha ni hon-unan ken bourreviet all gant ar sec'hed hag an naon. Ur pennad pelloc'h, gwrac'hed kozh, un neuz set warno, a oa set a-vernioù en o fuch. Amañ hag ahont, e oa ejened, en o sav c'hoazh, o vlejel. Diwezhatoc'h mervarv, tud ha loened en em dañf, tizh ganto, a-dreuz d'ar

strouezh, disofj, da vont n'eus forzh pelec'h da glask dour koustet a gousto, en un taol dizeper diwezhañ. Hag ar strouezh ne gavint nemet o marv.

En em c'houlenn a reas an Alamaned, goude ar brezel, penaos e rankent ober e-keñver an henvroidi, pe o c'has da get pe kenlabourat, mui pe vui, ganto.

N'eus forzh penaos ur gwall daol a oa bet skoet gant tud ar vro. An div drederenn eus an Herreroed a oa marv hag, en Namaland, e diwez ar bloaz 1906, e kontet 16 000 a brizonidi-vrezel eno, war ur boblañs a save, war a greded, da 31 000 den.

Feliout a rae ar gouarnamant ober eus an drevadenn ur vro wenn hag evit-se e konte war al linenoù hent-houarn a ranke, evel en Amerika an Norzh, lakaat trevadenerien niverus d'en em ziazezañ hed-hed anezho.

N'hellat ket, avat, an Alamaned kas o menoz da-benn. E 1914 e kroge ar brezel-bed kentañ ha troc'het e voe an darempredoù etre an Alamagn hag he zrevadenoù tramor. Er bloaz war-lerc'h e oa aloubet an «Deutsch-Süd-West-Afrika» gant arme an Unvaniezh Suafrikat. Chomet eo dindan dalc'h houmañ abaoe. Daoust m'emañ, a-hervez, o vele hiziv war hent an dieubidigezh n'eo ket echu an diaesterioù a savo dirak ur vro, bet graet a-dammoù hag a bobloù disheñvel, gant Europiz.

L ANDOUARD



Notennoù

(1) Hervez ur studiaden embannet gant ar gelouenn «Le Monde», daou vloaz a zo, setu an daouzek gouenn (pe strollad-tud) a yefe d'ober ar boblañs anezhi :

gouennoù	Milladoù tud
Ovamboed	396
Tud wenn	99
Damaroed	75
Herreroed	56
Kavangoed	56
Nomeed	37
Hironed	32
Kaprividi ar reter	29
Boschimaned	26
Bastarded Rehoboth	19
Kaokoveldered	7
Tawansed	5
A bep seurt	15

En holl 862

(2) Emañ Windhoek war an uhel : 1 620 metr a-zioc'h live ar mor. Un 60 000 den bennak a vev enni, an hanter anezho tud wenn.

(3) Anvet ivez Boschimaned. «Bushmen», liester «Bushmen», eo un anv a vez roet ivez da drevadennidi Aostralia, ar re anezho o vevañ war ar maez.

(4) Diaes am eus kavet skrivañ Hottentot, gant un «t» e dibenn ar ger, o vevañ m'am eus distaget bepred Hottentot ha klevet distagañ heñvel. Skrivet e vez ar ger Hottentot(s) gant ar C'hallacoued (s.o. «Larousse e 6 levrenn» ha Deniker «Gouennoù ha Pobloù an douari, 1900).

(5) Gustav Freussen eo anv ar romantour alaman a savas, a-ziwar ar pezh a voe kontet dezhañ, «Peter Moors Fahrt nach Südwest, ein Feldzugsbericht» (Beej Per Moor en Afrika ar Mervent, d'ar nevell ur brazal). Troet eo bet ar bomm tennet dioutañ a-ziwar galleg. E. Tonnellat e «L'Expansion allemande au XXe siècle» (A. Colin, Paris, 1906).

Achnotenn - «Walwis Bay» pe «Bee Walwis», gwechall un drevadenn saoz anezhañ, a zo perc'hennet gant an Unvaniezh Suafrikat hag abalamour da-se eo e savas an Alamaned ur porzh-mor all napell dioutañ pa zlestrjont er vro, 598 kilometr karez eo gorred an dachennad perc'hennet gant Suafrikiz.

a) 20 devezh-arat douar a zo ret kaout da sevel ur penn-chatal.

b) 7 500 mervur dalc'het gant ar re wenn a yefe er vro hiziv.

Embannadurioù Barr-Heol evit al Liderezh

Nebeut-tre eus lennerien BARR-HEOL marvat a ra ur sell war bajenn diwezhañ ar gelaic'hgelaouenn e-lec'h m'emañ roll embannadurioù BARR-HEOL, dreist-holl, ar re evit al liderezh. A-ratozh-kaer e oa bet embannet al levrioù o sellout ouzh al liderezh evit reiñ tu d'ar veleien (da gentañ) ha d'ar fideled, da gaout etre o ouarn kement a vez implijet gant an iliz e-hed ar bloaz evit hec'h ofisoù. Bez'ez eus betelien —kaiz muioc'h eget na soñjer peurvuiañ hag a lavar an oferenn e brezhoneg, da vihanañ pedennoù ar c'hinnig ha neuze ar bedenn eukaristiel. Darn avat, a gev asec'h lenn e galleg al Lennadennoù. Gwir eo, evit al lennadennoù e oa ezhomm 8 levrenn (a bep eil evelato l). Setu m'hon eus soñjer strollañ war un dro pep bloavezhliad. A-benn bremañ ez eo prest al Lennadennoù Pemdeziek evit 1978, ul levr brav

Da aesaat an implij anezhañ hon eus lakaet ouzhpenn PEDENNOU AR SULIOU ORDINAL ha na oant ket klok e pep hini eus levrennoù. 30 Lur e vo gwerzhet al levr.

En tu-hont da se, ez eo strollet ivez al LEVRIOU OFERENN evit an AZVENT-NEDELEG-KORAIZ-PASK : 35 Lur e kousto al levr neuze. Ne vo tu ebet avat, d'ober kement-all gant al LEKSIONALOU d'ar SUL, dre fazi ar mouler ha n'en devoa ket graet al LEKSIONAL B evel ma oa dieet. Ul levrenn liesskrivet (Azvent ha 9 Sul kentañ ar Bloavezh B) a zo bet ranket tennañ da stouañ an toull.

Evezhliaden : Ar re o deus prenet dija al LENNADENNOU PEMDEZIEK (pe al LEVRIOU OFERENN) ne vefe diaes dezho o strolañ : lakaat krennañ ar c'hinnig ha neuze lakaat ur seurt diavez skañv da heul ar peg (lakomp ar peg Planetol) hag evel-se ne vez riak ebet d'al levrioù da zistrollañ. Ma ne reer nemet gant peg (zoken peg tomm, evel ma leverer) e tistag ar fallennoù a-strobadoù, kaer a vez ober.

Komunion ar Sent

Ur sulvezh bennak a viz Here, nebaut amzer a-raok 6 uel an Hollsent, en ur barrez e-lec'h m'emañ c'hoazh ar vered en-dro d'an iliz-parrez, da vugel, ur plac'h vihan hag he breur dirak beziou o zud-kozh. Bet int en oferenn, hag evel ma'z eus bet lavaret dezho ez int aet d'ober ur bedenn verr, kent distreiñ d'ar gêr, da glask o lein, evit o mamm-gozh hag o mamm-iou-gozh bet anavezet gante. Ne gavont ket souezhus tamm ebet ober jestr-se p'o deus bet gwelot o zud o-unan oc'h ober kement all. Evite ez eo bev bepred, en ur stumm misterius ar re ez int deuet da bediñ evite.

Troc'h ebet er familh etre ar re dremenet hag ar re a zo bepred o laviget war an douar-mañ. Skoulmet eo chadenn an Aonañ, ha

skoulmet n'eo ket hepen dre ar soñj, an ehvor, met dre ar bedenn.

Un istor all :

Goût e oar an holl dud pegen start ha pegen tener ez eo al liammoù etre an tadoù-kozh, ar mammoù-kozh hag o bugale vihan. Gwell-glahv e oa kouszhet ar vamm-gozh, pe marteze ar vamm-iou-gozh, ha setu ma oa gelaic'haret ar paotr bihan, ken sot evel ma oa gant e vamm-gozh.

Ar vugale, evel 'ouzoc'h, ne welont diaezmant ebet e mamm ebet l Hag homañ neuze, hep gouzout kaer petra a oa ar marv, a bede evit na varje ket e vamm-gozh. Evitah ne oa ar marv nemet ur veaj hir da ober, hag e kompene hepken marvat na welje mui e vammig kozh, ma tichañse da homañ mervel ; setu perak e talc'he da Bediñ an Aotrou Doue evit zilañje ket anezhi digantañ. Ar vugale l ya ar vugale l. Met allaz l re gozh e oa e vamm-gozh dezhañ ha ne oa ket an Aotrou Doue evit ober ur burzhud, ha rentiñ ar yec'hed d'an hini glahv...

Ha glac'haret ar paotrig, daoust ma oa lavaret dezhañ e oa aet e vammig kozh da welout an Aotrou Doue hag ar Werc'haz d'ar baradoz...

Evel m'emañ ar c'hiz e talc'he tud da zont da ober ur vizit d'ar familh ha da skeiñ ur benniget war forf ar vamm-gozh, en he chapel wenn a dape ar follenn-baper miret evit-se, da enskrivañ ur servij pe un oferenn bennak... Hemañ bihan, hag a zo ur paotrig lemm, a c'houlennas digant e vamm d'ober petra a lakae an dud o ferennoù evel-se : «Evit bediñ evit mamm-gozh» am e vamm. Chom a reas ar bugel d'en em soñjal, hag eñ neuze o c'houlenn digant e vamm hag eñ ne c'hellje ket reiñ ur gwenneg ivez da lavarout pedennoù evit e vammig-kozh, da sikour anezhi. Ur pezhig gwenn a dapas da lakaat e-mesk an arc'hant all. Ur paotrig 6 vloaz oc'h ober un dra evel-se a gompene hag a veve en e stumm ar wirionez kaer-se m'eo Komunion ar Sent : ar skoulm a zo etre an Aonañ ha tud fidel an douar.

Lazhañ ar Festoù-Noz ?

Abaoe ar brezel diwezhañ, met dreist-holl abaoe ar bloaz 1960, e komzer eus FESTOÙ-NOZ. An holl a oar a-benn bremañ petra eo ur Fest-Noz hag evel-se ez omp kult d'hen

lavarout... Giz ar Festoù-Notz a zo deuet eus kreiz Bro-Gernev : war-dro Karaez, Poullaouen. Ne oa da gentañ eus ar Festoù-Notz nemet un diduamant evit tud ur c'harter bennak hag en em zastume asambles da ganah ha da zahasal hervez giz ar vro... Tamm-ha-tamm avat, ez eo en em ledet ar c'hiz-se dre-holl, er-maez eus Kernev... betek Pariz zoken (eno 'vel ouzoc'h, n'eo ket Bretoned eo a vank, siwazh !).

Deuet eo ar **FESTOU-NOZ** da vezah traoù arc'hantus ha setu perak e vez graet gant ar seurt diduamant evit dastum ur gwenieg bennak.

Bez'eo oa mamm-familh hag a oa stad enno o welout ar Festoù-Notz gant kansouennoù ha dahsoù onest ar Vro o tont da zistroadur ar balioù. Ha stad enno o vezah ma na oa riski ebet, pe ken nebeut ! evit o zud yaouank.

Bez'eo oa tud all hag a oa stad enno o welout gizioù brav ar vro o tonet da vezah diouz ar c'hiz, hag ar spered breizhat zoken oc'h adveuniañ...

*
*
*

En deiz-all avat, e weien ur beleg hag a bled tamm pe damm, a-bell pe a-dost gant Festoù-Notz hag a lavaras din krak-ha-berr : «*Ar Festoù-Notz a zo da lazhañ !*».

Er fest-noz divvezah bet gwelet gentañ e oa ur miller bennak a dud. Met peogwir ez eo techet an den da louzhañ zoken an traoù bravah e oa darn eus ar re a oa deuet d'ar fest-noz war o c'hrabanoù, pa ne oant ket evit dougen o sac'had. Re all o klask ur c'houlign tehal bennak. «*Da lazhañ emañ ar Festoù-Notz, gant o boesan hag o choucheñn (= chufere)... Un dra o vreinah, un dra o vreinah e-unan, hag o vreinah ar yaouankiz*». Un taol-esa a vo graet emañ a-benn daou zevezh ac'han. Ne vo takenn boeson ebet da evah. Bez'eo vo kafe, chokolad, ha zoken laezh, ha krampoeh ha gwestell, met na gwin, na jistr, na chufere ! Lavaret em eus d'an dud eus va farrez bezah gant o jeu... En deiz all e oan bet ken heuet, ken am boa ranket sevel va mouezh en deiz war-lerc'h en oferenn da glemm... Diwar an taol-esa-mañ e vo gwelet petra da ober !.

Sot eo an dud yaouank bremañ, zoken (ha dreist-holl) ar Vretoned yaouank. Pebezh ranngalon (ha pebezh fulor ivez !) evit an tadoù hag ar mammoù hag a rank gouzavh gwelout o zud yaouank o vevah dindan o fri, evel pa vefent dimezet dija ! Ha ret dezho plegah ha kuzhat o mezhi c'hoazh gant son da zroukrudah o familh... Piv eta e savo da dennah ar maki ? da ziskuilhah ar gizioù diroll a zo o c'honit tachenn mul-ouzh-mul. Rak evitkent e chom c'hoazh un tamm onestiz e kalon kalz a dud, ha zoken e kreiz kalon ar yaouankizoù, moarvat.

52

Katekiz

Katekiz ? Pa gomzer eus Katekiz e soñjer diouzhtu el levr bihan-se hag a gaver ennañ «*Ur gelaennadurezh sklaer hag a zesk dimp pevar zra: kredih, goulen, ober ha resev*». Ul levr bihan, Gwechall, e oa an hini bihanañ, an hini disterañ eus al levrioù a veze lakaet etre daouarn ar vugale. Bremañ, abaoe ma'z eus bet kavet e oa ar brezhoneg un dra a c'hiz kozh, ha ma'z eo taolet er blotoù, e kement parrez 'zo tout pe dost, ar c'hatekiz brezhonek, e kaver pezhioù levrioù-katekiz, ha zoken kaieroù-katekiz brav a-walc'h allies -gwir eo- gant skeudennoù ha taolennoù a-liv da aesaat labour ar vugale ha da rentiñ plijusoc'h an deskiñ ar Relijion.

Katekiz ? Saliou-katekiz a aozer an deiz a hiziv, dreist-holl er c'hêrioù, 'lec'h ma c'heller diskouez taolennoù ha sinema d'ar vugale ma tremeno dre o daoulagad betek don o spered hag o c'halon an anaoudegezh-se hep he far m'eo an anaoudegezh eus Doue, eus e Vadelezhioù e-keñver an Den, eus an liz, eus ar Relijion, eus ar Vuhez-mañ hag eus ar Vuhez-da-zont.

Ar C'hatekiz ? Ar pep gwellañ eus ar pezh en deus an Aotrou Doue fiziet en liz, ar pep gwellañ eus ar pezh en deus pep den da grediñ ha da ober er bed-mañ, trec'h eus a bell d'ar skiantoù -forzh pegenkaer ha prizius ma c'hellont bezañ a-hend-all - a zo frouezh labour an dud hepken. Skiantoù an dud a zo graet da badout ur pennad: betek fin ar bed hepken ; met ar Skiant a vez roet dre ar C'hatekiz a zo graet evit padout da viken, keit hag Aotrou Doue e-unan.

Ar C'hatekiz n'eo ket, evel ma'z eus, siwazh ! kalz re a dud o kredih, un tammig skol, ur wech pe ziv ar sizhun, da zeskih un toulladig pateroù hag un nebeudig respontoù, evit bezañ resevet d'ober e Bask. Un dra kalz donoc'h ha siurusoc'h ez eo eget se. Na zesker ket er c'hatekiz penaos dastum arc'hant bras a-benn diwazhatoc'h, nann met deskiñ ren e vuhez en un doare onest ha bezañ «un den» e pep degouezh. Ha kement-se a zo dija un dra bennak. Na zesker er C'hatekiz micher ebet, nemet ar vicher a zo dresit pep hini all: ar vicher gristen. Pe gentoc'h bouc'hañ al labour, rak a-hed ar vuhez-mañ ar vicher gristen da zeskih ha da ober.

Setu perak ez eo diskiant a grenn ar re a soñj ganto ez eo trawalc'h kas ar vugale d'ar c'hatekiz betek o 12 vloaz. Un afer ar hir-amzer ez eo an Deskiñ Relijion. Ma vijeret d'ar vugale chom a-hed o buhez gant o dilhad 12 vloaz, e chomfent klenket er gêr, pa bale en noazh. N'eo ket gant Katekiz 11, 12 vloaz e tleer chom, anez ez eo risklet ar Relijion-se da gouezañ e plijoù ebred !

Embannadurioù Barr-heol

1 - Leksionaloù ar suliou hag ar gouelioù (A.B.C.). Pep hini	18,00
O-zri war un dro	50,00
2 - Levrioù oferenn	
Azvent-Epifaniaz ; Koraz-Sizhunvezh santel ; Amzer Fask (pep hini)	11,00
O-zri war un dro	30,00
3 - Lennadennoù pemdeziek (Poder levrenn e pep hini)	
Pep bloavezhad	25,00
Ritual ar Briedelezh (klok, liesskrivet)	6,50
Ritual ar Vadeziant (offset)	5,50
Pedennoù ar suliou ordinal (liesskrivet)	5,00
Levr-oferenn evit Gouelioù ar Sent (a-hed ar bloaz)	
(Liesskrivet brav, ment 22 x 29) ; 166 paj,	25,00
gant un nebeut oferennoù a zevosion (Treinded santel, Sakramant an Aoter, Jezuz-Krist beleg, Kalon Jezuz, Unaniezh ar Gristenien, Misionoù, Peoc'h, Klafvourien, oferenn a anaoudegezh vat, h.a.)	
hag ur geriadurig latin-brezhonek !	

EMBANNADURIOU ALL

Un nebeut skouerennoù a chom c'hoazh eus :

Otello, Seurez Kerwenan, Aviel Sant Lukaz, Mervel evit bevañ... pep hini 12,00
Merkit war ho chekenn-bost ar pezh a vennit hag e viot servijet kerkent hep mizoù all.

Koumanant da Varr-heol

Koumanant ordinal	35,00
Broioù estren	36,00
Studieren	32,00

K.R.P. 245 453 ROAZHON



UL LEVR-KEGIN E BREZHONEG

Abaoe 12 pe 13 vloaz 'zo e kaver e **BARR-HEOL** pennadoù diwar-benn an doare da ober kegin. Gant SAOZ AN TIEG eo bet savet an darn-vrasañ anezho, ha setu m'he deus kavet mat ober ul levrig ganto ha gant meur a hini all embannet gwechall e kelaouennoù brezhonek. Al levrig-se, ment 21 x 13,5 a zo embannet evel stagadenn da Varr-Heol.
PRIZ AL LEVR : 15 LUR.

Imprimeur : Copie 22 Pederseg - Moulur : an Aotrou Gall, person Pederseg
Directeur de la publication : M. Le Clerc, Buhulien, 22 Lannion, Gérant.
Rener ar gelaouenn : an Aotrou Klerg, person Bullen, 22300 Lannuon

Périodique inscrit à la commission P.P.P. sous le N° 29 746
Commentarii in lingua Britannica editi - Revue kvaranjara en lingvo bretona

Dorojoù ar Baradoz



- 1 - *Dorojoù ar Baradoz, me 'wel, 'zo digoret
Gant ar priñs Emmanouel, eil person an Dreinded.*

Diskan :

*Aeled santel an neñvoù, kanit gloar da Zoue.
Ha deoc'h, tud vat an douar, ar peoc'h, al levenez.*

- 2 - *Pa bec'has hon tad kentañ enep lezenn Doue
'Voe serret al levenez outañ hag e lignez.*
- 3 - *Met Jezuz dre garantez a zibrenn dor an neñv ;
Evidomp eo 'n em c'hraet den, rentomp gloar d'e druez.*
- 4 - *Meuleudi, gloar, karantez, da Jezuz, Mab Doue,
'Zo ganet eus ur Werc'hez, hor Salver, hor Roue.*
- 5 - *Ur steredenn a lugern, 'zo trec'h d'an holl astroù,
A zegas ar Rouaned da zont eus a bell vro.*
- 6 - *D'adoriñ ar Mesiaz gant pep a zonezon,
An aour, ar mirr, an ezañs, karantez o c'halon.*
- 7 - *Ha ni 'velto kinnigomp gant hon meuleudioù,
Pa ne c'houl ken a vadoù, doujañs hon eneoù.*